

youenn olier

Teskad skridoù politikel
1945 - 1962

TONKAD 62

PREDER

Kaier 37-38

Gouere-Eost 1962

TONKAD

62

YOUENN OLIER, DEN AR ROUD BREIZHAT

Pa welen an Ao. MARTRAY e-kreiz poellgor ar CELIB en Oriant d'an 18 a Vazheven 1962, ne c'hellen ket tremen hep soñjal e YOUENN OLIER. Labour bras ha talvoudus a ra evit Breizh an Ao. MARTRAY, ul labour servijel, sujedigezhel, dellezekoc'h a-se a zoujafs. Soñjal a raen koulskoude e YOUENN OLIER, marteze pa gaven arouezius eo dre an Ao. MARTRAY, breizhad an hentoù gall, e vos roet taol ar marv da Avel an Trec'h, ar gelaouenn savet diouzh ar roud breizhat glan gant YOUENN OLIER dres goude ar brezel.

Skuizh o selaou ha kenlusket moervat gant boubou ar vodadenn, en em laos-kis da rambreal, ha da deural pled penaos ez eus atav daou roud er broioù sujet. Roud ar sujer, arroudennet stank, savet, nevesaet, ledanaet bemdez hentoù dioutañ. Roud ar vro, gwenodennou damsteuziet, rouedad ar gourhentoù estren o treuskiziat warno. Alese an daou seurt den, an daou hepken, a zo e pep bro sujet : an eil o vont dizamant gant hentoù an estren, degemeret gantañ ur wezh da vat stadelezh, yezh, ren-buhez an estren, ha pa vefe evit stourm gwelloc'h a-se outañ; egile, o fiziout e donkadur penn-da-benn e gwenodennou ar vro, o vont, gant "sklerijenn ar spered hag adsav ar galon", er fank hag en drez, diouzh roud adkavet ar vro...

- Se zo brav, emezoc'h, mèt an efedusted...
- Dres ! an efedusted, Petra zeue war-c'horre e bodadeg an Oriant, mar n'eo ket ar mennozhioù bet estaolet gant Breiz Atao adalek 1920 ?
- Kannaded Vreizh gonezet gant gras ar vroadelezh vreizhat ?
- N'emaoc'h ket e-barzh ! Eginerezh mut, plantel, an anadurezhioù hadet e-kerz 40 bloavezhid stourm war wenedennoù Breizh. An dud bodet en Oriant ne oa ket enno an disterañ diwan a vroadelezh, nemet e tiseoc'he warno, gwall-zarnel c'hoazh, lañs ar vroadelourien : ur skramm e oant ma teke outañ ar skinoù eskaset bloavezhioù-hed gant an Emsav gwastadour. Ganto ne oa ket anv a gemer gwenodennou, dic'houzvez ma oant a-hend-all eus alfoù ar mennozhioù o zreuze. Pell diouzhin lavarout eo didalvoud o labour. Nemet ne ouzont ket pe labour a reont, dreist-holl ar re anezho e gred e mibiliezh goulenn ul lezenn-stur digant ar gouarnamant gall. Emañ drezo o warañ an hentoù gall e Breizh, setu o labour gwirion. Neket e vo biken an hentoù gall evit gwarañ a-walc'h da dreñf e hentoù breizhat; - ne c'hell ket e gwir ar gwariadur mont en tu all d'ar poent merket gant kempouez an emframm gall. Ur wezh tizhet ar poent, ha marteze bremañ ne c'hell ket bout na vije ket tizhet, e tarzhe an emframm, o lezel ar plas gant un all. Un all, pehini ? Moarvat n'emañ ket mui e galloud den mirout ouzh an

C

Youenn OLIER ha PREDER

emframm gall a darzhañ, pa'z a en-dro diouto o-unan war-du ar poent-terriñ an nerzhioù a zigempouez diorreet amañ hag ahont, ha pourgetket gant an Emsav Breizhet; pedal, n'eo tamm ebet ur rêt ma savo un emframm breizhat e-lec'h an emframm gall e Breizh. Setu perak, gwariadur an hentoù gall e Breizh, - ar gourvenn enep-parizian, an tech prevezalour, rannvroelour, kevredelour ha me oar, a ziwan bremañ gant kannaded c'hall Breizh, - n'eo dioutañ nemet un emell a eil renk, un ober nac'hel, ur gefridi sujedigezhel. Ar pep kentañ a chom muic'h eget biskoazh pezh a voe adalek an derou preder meur an Emsav Broadel, tresañ hentoù ar vro hop darc'hel kont eus hentoù an estren, diorren ar stad- elezh vreizhat "evel dinden an dant-laehz an dant all"; en ur ger, klesk roud ar vro da gentañ, yezh, ren-buhez, speredelezh Vreizh, hag ar peurrest, an estren argaset gant e armoù dezhañ e-unan, a vo roet deomp dreist ar marc'had.

o
ooooooo

Er pajennoù da heul e vo kavet an darnvuiañ eus ar pennadoù savet hag embannet gant YQUENN OLIER war An Avel (A.A.) hag Avel an Trec'h (A.A.T.) etre 1945 ha 1948. Da glozhañ e kavor ur pennad diimbann bet skrivet e 1962.

Pedif a reomp al lennerien a-garfe klokaat o anaoudegezh eus oberennoù YQUENN OLIER, da addigeriñ Preder :

niv. 4 : Dirak an darvoudoù.
niv. 15-16 : Istor an Emsav sevenadurel abaoe ar brezel bed kentañ.
niv. 24-25 : Opion an Emsav, pp. 55-72. (En hevelep niverenn Ionkad 61, lenn e pennad PER DENEZ : Ur sell war pemzek bloavezh : 1945-1960, pp. 83-104, un danevell eus istor An Avel hag Avel an Trec'h.)

Operennoù all eus YQUENN OLIER a zo bet embannet gant Arvor, Al Liamm, La Bretagne réelle, Hor Yezh, Ar Vro.

Abanna

T A O L E N N

	P.
YQUENN OLIER DEN AR ROUD BREIZHAT	3
DIWAR-BENN AN DOARE-SKRIVAÑ (AA 1/6, 9.45).....	7
WAR-DU AN TREC'H (AA 4-5/22, 12.45).....	12
YEZH HA POBL (AA 6-7/1, 1.46).....	17
MENZOIOU AN DUD DIWAR-BENN AR BREZHONEG (AA 8-9/15, 2.3.46).....	23
LENNEGEZH HA SPEREDEGEZH (AA 8-9/20, 2.46).....	25
SEVENADUREZH DA GENTAÑ (AA 10/11, 4.7.46).....	29
DBER (AA 12/1, 10.46).....	31
GWERINRENDURIEZH (AA 12/2, 9.46).....	33
PENADS EMBREGER HOR STOURM EN AMZER DA ZONT (AAT 1/5, 9.46).....	38
STADELURIEZH (AAT 1/6, 10.46).....	42
BROADELURIEZH (AAT 2/5, 11.46).....	46
NI HA BRO-C'HALL (AAT 2/8, 12.46).....	52
PEOC'HELURIEZH (AAT 2/10, 11.46).....	56
KUDENN AN DBER (AAT 3/7, 11.46).....	60
BARNEREZH HA REIZHDED (AAT 3/9, 11.46).....	63
RESIZADURIOU DIWAR-BENN AR STOURM SEVENADUREL (AAT 4/13, 12.46)....	68
A-ENEP D'AR VROADELURIEZH RIK (AAT 4/15, 11.46).....	72
POLITIKEREZH RANNVROEL PE DISRANNDURIEZH (AAT 5/4, 1.47).....	75
E-SIGUR KEVREDADELURIEZH (AAT 6/20, 26.2.47).....	81
DISKLERIADURIOU (AAT 7/10, 3.47).....	89
ADSEVEL (AAT 8/4, 9.47).....	93
DIWAR-BENN DIEUBIDIGEZH IWERZHON (AAT 11/4, 12.48).....	100
PEOC'H HA BREZEL (Meuzh-Mezheven 1962).....	103

999999
999999
99

DIWARBENN AN DOARE - SKRIVAÑ

I

Tabut a zo savet endeo diwarbenn an doare-skrivañ nevez. A-boan ma voe divizet ar reolennoù anezhañ ma voent kavet fall gant un nebeut tud. Ar re a oa a-du ganto zoken o doa kertri da ober diouto a-drumm. Degemeret e voe da gentañ ar "friachoù" iñ, añ, h.a. Ar zh en diwezh. Petra 'zo da soñjal diwarbenn ar gudenn-se ?

Ha da gentañ pere 'oa paliou an doare-skrivañ nevez ? Broadel e cant arak pep tra : unded stumm ar yezh a arouezie unded ar vro hag unded ar vuhez speredel anezhi. War un dachenn all, hini ar politikerezh, e ouezer mat ne c'hello ur mererezh brezhon da zont degemer nemet ur stumm eus ar yezh. A-walc'h eo kacut skiant-vat evit hen meizañ; e pep stad eo heñvel. En abeg da vad ar vro e voe degemeret ivez ar skritur nevez gant "Studi hag Ober". Hag hervez Langleiz s-unan n'eo bet savet ar KLTGnemet evit lakaat termen d'ar brezhoneg rannet - d'ar "wezenn forc'hek" war var da vezañ difrouezh en abeg d'he forc'hagezh. Ur yezh hepken d'ur vro, a oa ar ger-stur. Diaes e oa ouzhpenn-se sevel levrioù-skol e KLT hag e gwenedeg war un dro, ha fall e oa ahendall : ur yezh hepken a zleed kelenn d'ar yugale. N'eo ket dre ma toujed pourchas d'ar gouarnamant gall un digarez da c'hom hep reif dor-zigor d'ar brezhoneg ar skolioù. Hogen ret e oa reif tu da dud pobl Vreizh d'en em intent dre o yezh hep kacut ezhomm eus ar galleg.

Da soñj ar werin ahendall eo dreist ar galleg d'ar brezhoneg en abeg d'e unveded. Arabat ankounac'haat ez eo ar galleg skouer ar yezh evit Breizhiz. Ha ne gredo ar re-mañ "yezhelezh" ar brezhoneg ha ne raint forzh anezhañ nemet pa verzint ez eo yezh o Bro-Vreizh egiz m'eo ar galleg yezh Bro-C'hall - dezhi holl berzhioù ha dreistwirioù ur yezh stad. Evit ar poent, n'eo ar brezhoneg d'ar muiañ evit ar re zizesk nemet yezh ar barrez, yezh an tiegezh. Ermaez eus ar barrez e ra an dud gant ar galleg. Ac'hann an arvar mervus a zo o pouezañ war hor yezh hiziv. Ar brezhonegoù a lazho ar brezhoneg. Ha pa ne ve nemet daou vrezhoneg, e vefe unan a re. Seul abretoc'h e vo graet peur-unvanidigezh ar brezhoneg, seul welloc'h e vo. Ne c'heller ket mont diouz ar wirionez-se.

Brogarourion eo ar re o deus savet an doare-skrivañ nevez. Mad ar vro ha skignidigezh ar yezh o doa draistholl en o sell. An dra-se eo a vez ankounac'haet gant tud o barn kreñn ha direizh hiziv. Pezh o deus klasket d'an 8 a viz gouere saverion ar KLTG - evel tud an emglev rñhendall - eo ober un emglev daoust da bep tra. Unvanif a vennent. Arabat disofjal avat e voe sturiet ar vodadeg gant rener "Gwalarn". Ar reolennoù bet degemeret n'int ket dres e re. Evelato n'en deus asantet R.H. da stourm evit an doare-skrivañ nevez nemet dre ma'z eus anezhañ trec'h labourioù Vallée, Ernod ha Meven Mordiern, trec'h ar KLT, frouezh labour yezhonourion a-hed kantvedoù abaoe adal an tad Maner betek Vallée. N'eus ket a skritur nevez e gwirionez : gwenediz o deus degemeret ar KLT an ur gempenn anezhañ diouzh o ezhemmoù. Gouzout a reer na felle ket da R.H. degemer peurunvanidigezh ebet nemet diazezet e vefe war ar KLT. Setu perak e harzas ouzh aozerion an emglev kerkoulz hag ouzh an dud a glaskas nevez 'zo sevel ur reizhekrivadur sonadouriel hepken. Abegoù all en doa da zont'hel d'ar KLT : ret e oa diwall diouzh an dizurzh hag ar maskerezh. Ur skritur distabil he defe noazhet elreizh ouzh al lennegezh. Digalonekaet e vefe bet ar re o defe bet c'hoant da zeskif hor yezh hag i boas ouzh unvanded ar galleg. Erfin, ur skritur savet gant tud a-enep dezhañ a-wechoù en defe foeltret e labour. Hag ar gwir en doa da soñjal e oa e labour an hini pouez-usañ kaset da benn evit ar yezh. Ouzhpennañ a c'heller ez eo d'ar re a skriv reif o ali diwarbenn an doare-skrivañ, ha n'eo ket d'ar yezhonourion dreist-holl. N'eus forzh penaos e oa lu a-walc'h da re "Brezhoneg ar skol" - hag i damzisek war ar yezh a-wechoù - reif kuzulioù da ziskoulmañ ar gudenn epiz m'o deus graet. N'oa ket kennebaut d'ur genveuriezh bennak d'en em emellout en afer-se. Daoust ha ne oar ket c'hoazh Breizhiz ez eo an doare-skrivañ tra ar skrivagnerion da gentañ. Ha R.H. eo an hini a zo bet a penn ar skrivagnerion vrezhonek abaoe diwez kantañ brezel ar c'hantved-mañ.

Ar vrogarantez an hini eo he deus graet emglev an 8 a viz gouere, a lavaren e penn kentañ an dilinennad diwezhañ. En deiz-se, e gwirionez o deus anavezet ar vrezhoneg e oa mat labour Vallée ha R.H. hag hen anavezet o deus dre ma oant o-unan brogarourion. Ha dre ma'z omp-ni brogarourion ivez emomp a-du gant un doare-skrivañ a roio tu d'hor yezh da ober berzh aesoc'h. Sklaer tre eo ar gudenn evidomp. Divizet eo bet d'an 8 a viz gouere 1941 reolennoù un doare-skrivañ nevez. Skrivagnerion eus an holl gelaouennoù brezhonek o doa

kenlabouret d'o sevel. An doare-skrivañ nevez a zo hini "Gwalarn" kreizenn hor buhez spereidel apad ouzhpenn ugent vloaz. N'hon eus ket muioc'h abeg d'hen dilezel e 1945 eget e 1930. Ur gudenn a gensentidigezh eo evidomp ha netra ken.

I I

Petra a damalle ar veskerion avat d'an doare-skrivañ ? Den n'en deus gouezet biskoazh ez resis. Lod a asure ne vije biken tud ar bobl evit lenn seurt skritur. Na zalc'homp ket kont eus ar re n'oant ket gouest da zigejañ ar K.L.T. kozh, da lavarout eo eus 98% eus ar vrezhonegerion : ne c'hellent ket eveljust reif o ali. An 2% all a daolas nemeur a bled ouzh kemm ar skritur. Kenderc'hel a rejont da lenn "Arvor" avel araok. Ne gavjont biskoazh abeg ebet er zh. Daoust hag e oa o micher ober wardro ar brezhoneg hag e skritur ? Hini ebet na zigoumanantas en abeg dezhañ. Ar re a reas e oa anezho skrivagnerion, n'oant ket tud eus "ar bobl"(1). Warlorc'h ali tud eus ar bobl avat e tegaser ali bugale ar skol. Re skuizhus eo evito ar K.L.T.G. war a lovaront (gouez d'an enepzedacherion). Betek hen avat n'en deus roet bugal ebet e ali diwarbenn doare-skrivañ ar galleg, na souezhus ne gav ket deoc'h ?

E gwirionez, pezh a oa ur gudenn a gensentidigezh evit ar vrogarourion a oa ur gudenn a yezhoniezh hepken evit anezherion ar zh. Ar re-se o dije karet "adteuzif" penn-da-benn reizhekrivadur ar brezhoneg. Hemañ a vefe bet diazezet emic'hañs war labourioù sonadouriezh an Ab. Falc'hun. Eleizh a arouezioù nevez en defe krouet hennezh marteze : ar "c'h" blot hag al "l" kalat warlorc'h "ho" pe "he" da skouer. Graet o dije ivez gant kartennaouegoù Per ar Rouz evit adneveziñ a-gronn stumm ar brezhoneg. Da vana kalenner keltieg skol-veur Roazhon ne vefe diforc'h ar peder rannyezh nemet er skritur (daoust ma n'o defe biskoazh korneviz ijinet un doare-skrivañ evit o hini). Harvezaf eta e vefe rannet ar brezhonegoù etre 2 rumm lec'hiet a bep eil e kornog-reter hag a kreisteiz hanternoz. Ma vefe bet ganet reizhekrivadur an dud-se e vefe bet dishefvel tre emic'hañs diouzh ar brezhoneg m'omp boas outañ

(1) 3 den en holl a nac'has degemer "Gwalarn" en abeg d'ar "zh".

hag hep mar ebet kalz diasesoc'h da lenn - hep kelennadurezh aberzh-stad eval-just - eget ar K.L.T. pe ar K.L.T.G. Rak n'eo ket lakaat daou skritur da genglotañ o dije graet egiz m'eus bet klasket ober e 1941 - hogan sevel un doare-skrivañ nevez a-grenn diwar studioù hir ha pizh. Setu perak e c'hourzezent peurunvanidigezh ar brezhoneg a-benn 10 pe 15 vloaz marteza.

I I I

Ar re a zo savet a-enep d'an doare-skrivañ nevez o deus divizet kenderc'hel da implijout doare-skrivañ kozh "Gwalarn". Ar pezh furañ eo o doa da ober. Reoù all avat, degemeret ar zh ganto da gentañ, o deus kpez hiziv; ober a reont gant ur skritur etre a dalvezas da bont etre ar K.L.T. hag ar K.L.T.G. Evals e kav dezho e chomint hep feukañ den emichañs. Friadurioù an tregerieg a resevont, an "où" ivez. Hogan argas a reont ar "zh".

D'ar re-mañ e c'heller arguiñ ez eo bet savet an doare-skrivañ, ar zh evit Gwenediz ha n'eo ket evit Tregeriz ez eo ken pounner ar friadurioù hag ar zh ha kalz didalvesoc'h egetañ paogwir n'eus unvanidigezh ebet da ober diwarne. O skritur an deus siou fall ar K.L.T.G. hep dougen e frouezh : diezhomm eo. Kerkoulz eo distreñf d'ar K.L.T. kozh diouzhtu : ne vo ket distaget muoc'h ar friadurioù eget ar zh.

I V

Tud 'zo a nac'h ober gant ar K.L.T.G. abalamour - emezo - m'eo bet savet gant skrivagnerion a-du gant an Alamaned. Ar paour kaezh tud-se n'o deus ket chañs rak an hevelep re eo o deus savet ar K.L.T. hag ar K.L.T.G. Bremaik hor bo e Breizh kement a skriturioù hag a stroladoù politikel, hag un dra natur tre eo emichañs ! E gwir ez eus peadra da souezhif, pa señjer ervat, o welout ar resistañserion e Bro-C'hall oc'h ober gant an hevelep doare-skrivañ hag an hevelep reolennoù yezhadur hag ar gonlabourerion !

Ar memes tud a ziogel doomp ez eo dilezet ar K.L.T.G. gant an holl. Biskoazh kemendall ! A-c'houde miz gouere 1944 n'eo bet embannet levr brezhonek ebet koulz lavaret (ur vuhez eus St Fransez gant ar gabusined, daou lavrig gant an Ykam ha setu holl. Hag arak miz gouere 1944 e veze embannet e K.L.T.G. kement levr a-bouez a zeus ermaez (e ti "Skridoù Breizh"); "Gwalarn" ha "Studi hag Ober" hon div gelaouenn uhel a rae gant an doare-skrivañ nevez. Evit lavaret ez eo dilezet ar K.L.T.G. gant an holl e vefe ret gortoz ur pennadig amzer.

Kenderc'hel a raimp eta da ober gant an doare-skrivañ nevez. Netra nemet dre ma ra unvanidigezh ar brezhoneg an aesañ hag an digoustañ ar gwellañ. Ne ouzomp ket ha trec'h e vo ar skritur-se; spi hon eus avat e vo trec'h ha gouzout a reomp penaos hen lakaat da drec'hif. Goude holl n'eo ar skritur nemet ur gudenn a levrioù embannet. Ma teuomp-ni ar re yaouank a-benn da voulañ e-leizh a oberennoù klasol hag a-bouez e vo trec'h ar K.L.T.G. evit brasañ mad Vreizh. "Emgleo" Vallée, K.L.T. R.H. a zo deut avalse ar gounid gentañ. Ne gav ket doomp ahendall e vefe fall embann skridoù a vruderezh e K.L.T. pe e gwenedeg ma c'hellont dre-se bezañ lennet aeseoc'h gant ar bobl : ken nehout a gemm a zo avat etre skritur nevez ha skritur kozh "Gwalarn" ma ne dalvez ket kalz ar boan. Mat e vefe ivez war un dro boazañ an holl Vretoned da lenn skritur peurunvan ar brezhoneg.

Direizh e vefe ahendall da dud zo lakaat warnomp o skritur - an hini o deus amprestet da "Walarn" kentoc'h - hag i divarrek da embann levr brezhonek ebet. Rak tra ar skrivagnerion hepmuiken eo an doare-skrivañ. Arabat hon ankounac'haet !

Miz gwengolo 1945

An Tremener

WARDU AN TREC'H

I

Setu bloaz hanter, pe dost, m'eo deut warnomp endro galloud ar C'hallaoued. Ur gwall-varead o deus bet da dremen an darn-vuiañ ac'hanomp. Hor c'hevredigezhioù hag hor strolladoù ne voent ket mui dindan lezann; hor c'helaouennoù - an holl, politikel pe get - a baouzas' a zont ermaez. Hor rannerion a voe harzet pe a voe rediet da dec'hout kuit; an holl stourmerion a voe heskinet, lod a rankas en em guzhat; lod all a voe bac'het epad miz-vezhioù, gwall-varnet goude-se. Ne gomzan ket eus ar re a voe masket gant an Alamaned pe ez resisoc'h eus ar re a gemerâs perzh en o brezel. Evit reoù zo ne voe ket souezhus ar varnidigezh a voe douget outo : diouzh reolenn ar c'hoari-e oa. Forzh penaos n'o doa ket da vezañ barnet gant lezioù-barn gall, dezho gwir ebet da varn Brezhoned n'o doa bet ken mennad biskoazh nemet stourm evit o bro. Menegif a rin un torfed barnerezh all. Emeur o klask bremañ lakeat barn ha kendaoniñ R.H. Enebiñ a reomp. Ne zleomp ket bezañ barnet gant Gallaoed evel Gallaoed fall, rak n'omp ket Gallaoed. Hag ehendall, ret mat eo d'an holl gouzout ne c'heller gortoz peoc'h nag unvaniezh ebet e Breizh keit ha ne vo ket bet divac'het R.H. ha didamallet an holl Vretoned barnet en abeg m'o doa labourer evit Breizh epad ar brezel.

Ha setu penaos emaoamp hiziv : n'eus mui rener nag urzhiadur ebet. Abaoe pemzek miz n'eus den ebet en dije komzet en anv broad Vreizh. Evel merv eo bet hor bro, ha laouen e c'helle bezañ hon enebourion.

II

Adal hiziv avat - ha ni di-rener, abaoe divadaouet - e stagomp da ad-sevel. Ne fell ket deomp hepken ober anv eus goulenadegoù evel hini ar Falz pe hini ar studierion; ne gomzan ket kennebet eus labour ar c'helc'hioù keltiek, hag ef talvoudus bras. Reizh eo lavaret ez eo bet alies ar c'helc'hioù kreizennoù buhez breizhek. Hogen ni hon unan n'omp ket chomet da eoniñ ha da grenañ hep ober netra. Ar re gentañ omp bet oc'h embann kelaouennoù. A-c'houde miz C'hwevrer, pa oa an heskinerezh en e washañ, e c'hellomp adarre klevout mouezh Breizhiz wirion. Ur frealz e voe avit kalz. Abaoe eo bet heuliet ar skouer-se. Ha setu penaos e voe krouet "An Avel" d'un abar-daevezh klouar hafv war ribloù mor Breizh - en ur c'hazarn gall. "Hor Bro"

diouzh he zu a skign kelaier ha gerioù-stur ha tizhout a ra muic'h-muiañ a dud bemdez. Didalvez eo lavarout n'he deus biskoazh "Skol Ober" paouezet a reiñ kentelioù brezhoneg dra lizher. Erfin en diwezhañ holl e welomp o tiwanañ ur gazetenn krouet evit Breizhiz an diabarzh ha Breizhiz an diavaez "Breizh nevez" hac'h anv da c'hortoz. Spi hon eus e c'helle bezañ anvet dizale "La Plus Grande Bretagne". Hag evit echiñ da vat ar roll-mañ, menegomp embannadurioù evel re ar Gabusined "St Fransez mignon ar vugale", "Diwar c'ho-arzin", "Petromik"; ul levrenn moulet gant "Studi hag Ober" hac'h anv : "Kaieroù kristen"; kevredigezhioù yaouank-flamm evel "Ia J.E.B." a raio, me gred, bruderezh mat; C.E.L.T.A. nevez savet war hon eus klevet gant an Diuzet (hemañ a embanno ul lavr dizale "Pazannoù kentañ ar brezhoneg" a gav din).

Kement-se a ziskouez ez eus buhez bepred en hor bro, lies ha dizunven marteze, buhez avat.

E-keit-se n'eo ket chomet hor skrivagnerion eus rumad "Gwalarn" - heskinet pe nann - da vorediñ; oberioù o deus savet. Hag e 1946 e vo medet emichañs un eostad founnus a levrioù hag a gelaouennoù nevez.

Setu eta ar c'hentañ kammed war hent an adsavidigezh.

III

An eil kammed war-raok eo bet adstagañ an darempredoù etre broioù keltiek Breizh-Veur ha ni. Degemer a reomp kelaouennoù, levrioù; lizhiri eleizh a vez esketmet. Harp a zeu deomp zoken eus Bro-Gembre hag eus Bro-Skos. Ma n'eo ket klevet hor c'hlemmoù e Breizh-Vihan, n'eur ket bouzar ouzhip e Breizh-Veur. "Yr Faner", "Y Tyst", "Y Cymro", "The Scotch Independent" a embann pennadoù e kembraeg hag e gouezeleg Bro-Skos, enno diskleriadurioù freezh ha resis diwarbenn ar stad m'emaomp enni. Ar Seczon o unan a zeu d'hon anavezout : "The Spectator" a voul ur pennad savet gant Cyril Jones diwarbenn Breizh. Lizhiri-Klemm a vez kaset da gannadourion Vro-C'hall e Lunden ha da c'houarn-ament D.G. e Paris. An Ao. Emrys Roberts A.S. Meirion en deus komzet eus kudenn Vreizh e ti ar C'humunioù (Y Faner, 5-12-1945).

N'eus mui nemet ar C'hallaoued na anavezont ket kudenn Vreizh.

I V

Breizh n'eo ket marv. A bep tu e poanier eviti; n'eus ket nemedomp-ni ar vroadelourion o labourat war dachenn Vreizh; hen gouzout a reomp. Un dra anat eo evidomp koulskoude n'eo ket al labour-se evit saveteif Breizh. Deomp-ni eta e chom ar pep diaesañ hag ar pep dafjerusañ : kenderc'hel da stourm egiz arak evit reif da Vreizh ar goudor politikel n'hell broad ebet bevañ heptañ. Kement-se ne dalv ket e labouromp rag-eeun evit ar stad. N'hon eus ket da ober politikerezh. Ar vroadelouriezh a zo da gentañ ur stumm-spered. Krediñ a reomp n'hon eus nemet ur vro. Breizh an hini eo, ha n'hon eus dlead brogarour nemet en he c'heñver. Setu holl.

Hor soñj a zo hefevel atao : krediñ a reomp bepred ez eo kudenn Vreizh, kudenn ar brezhoneg, kudenn buhez pe varz hor sevenadur, ur gudenn gevredigezhel dreist pep tra. Kavout a ra deomp ne c'hell bezañ diskoulmet ar gudenn-se - en diwezh - nemet dre genurzhiañ broad Vreizh er stad.

Ret eo deomp darc'hel d'ar pezh a gav deomp eo ar wirionez. Rek an darvoudoù n'o deus degaset kemm ebet er wirionez-se.

Adlavarout a reomp adarre koulskoude : n'eo ket al labour politikel an hini pouezusañ hiziv daoust ma vo rot adkregiñ gentañ un deiz.

V

Hor reolenn-stourm a chom atav an hevelep hini : kenderc'hel da embann eo an dishualded gwir groñs ur vroad; un torfed eo lazhañ Breizh - aratozh-kaer pe get - egiz ma ra ar C'hallaoued. Div drevell resis a zo dirazomp : da gentañ kenurzhiañ ar stourmerion ha sturial o labour, ha d'an eil skignañ anaoudegezh ha karantez Vreizh etouez tud ar werin, brudañ menoz Broad Vreizh.

Gouzout a ran n'eo ket bet disi bepred hon abostolerezh gwechall. Fall brañ eo bet a-wechoù. Pe kentoc'h n'eus ket bet anezhañ c'hoazh nemet etre 1941 ha 1944. Ret eo deomp eta kemer un hent nevez, ha degemer penn-da-benn doareoù-ober ar werinelouriezh en hor bruderezh. Ret eo komz ouz ar bobl e doare ma kompreno hag hi gallekaet.

Ret e vo argas ur politikerezh dispac'h en deus douget ar frouezh a anavezet e diwezh ar maread 1940-1944. Arabat eo deomp c'hoazh koll tud en aner a-grenn. N'hon eus ket re a stourmerion ha gwell-faziet eo bet ar re ac'hanomp a gavas dezho e tleent en em gannañ ha mervel evit o bro. Muioc'h a zroug eget a vad, o deus graet da Vreizh. A-dra-sur n'int ket kiriek rak

faziet int bet. Hogen diskouezet o deus n'eo ket awalc'h kaout hepken youl-vat ha taerder; fur a ranker bezañ ivez.

Dav eo deomp chom reizh, ha, betek gwelout krediñ e gwirionded eus reoù zo eus hon eneberion. Arak o miligañ e vefe mat marteze klask o sklerijannañ. Ret holl eo deomp kaout soñj eus kement-se.

V I

Bez' e rankomp eta en em glevout gant kement hini a labour evit Breizh pere bennak e ve e venozioù. Ret eo deomp ivez esa difaziañ hon eneberion leal. Ken ret all eo deomp avat darc'hel d'hon dieubiezh ober ha barn.

Kemer a reomp tro diwar-se evit reizhañ da vat afer ar bloavezhioù 1940-1944. Faezh omp o klevout tud ouz hon tamall en abeg n'eo ket bet hefevel hon emzalc'h epad ar brezel ouz hini Gallaoued vat. Pensaos avat e c'hellomp Gallaoued vat pa n'omp ket Gallaoued ? Lavarout a raomp kreñn ha krak n'hon eus keuz ebet da vezañ dalc'het da labourat evit Breizh pa oa tu deomp d'hen ober. Ar brezel ne selle ket ouzhip : n'hon eus ket kemeret perzh ennañ, ha mat hon eus graet; n'hor boa ahendall gouarnamant ebet. Neuze e vefe bet sod-nay lezel 4 bloavezh da dremen hep ober netra. Ne vije ket bet diouz mad Vreizh. Setu perak a kredomp n'eo ket bet fall al labour sevenadurel hag al labour bruderezh hon eus kaset endro epad an amzer-se. Lavarout a ran adarre n'omp ket Gallaoued ha n'hor boa ket da stourm evit ur stad n'en doa graet biskoazh nemet hor "gounit".

Kement-se a ziskleir mat ivez perak hon eus dalc'het d'an doare-skrivañ nevez. N'eus bet biskoazh kudenn a skritur ebet. A-dra-sur n'hon eus ket da goll amzer o c'hoari gant lizherennoù ha diarvar eo n'en defe graet ur c'henn nevez nemet degas trubuilh. Hogen fellout a reas deomp dreistholl mirout hengoun skol skrivagnerion "Walam", rak un hengoun broadelourion eo. Ur rener hor boa hag e anavezout a reomp a bell 'zo. Un dlead striz eo deomp bout feal dezhañ en abeg d'al labour a reas evit Breizh. Ur gudenn a gesentidigezh eo, egiz m'em eus skrivet dija. Setu perak ne c'hellomp degemer emglev mezhus ebet a dalvezfe rennaviañ kement tra reizh a rajomp epad ar brezel. N'hon eus da geuziañ da netra na da c'houlenn digerez evit netra digant den. Ne c'hellomp ket kompren, - evel ma ra tud 'zo - ez eo ar "zh" un ijinadenn eus an Nazied egiz ar form-pulluc'hañ, ha koulskoude omp pastred speredek.

Tud zo a glemm abalamour d'an dizunvaniezh etre Bretonad. Ret eo dezho kounañ ne c'hell bezañ graet an unvaniezh nemet endro d'un rener anavezet

ha doujet.

Ma n'eus unvaniezh ebet e Breizh eo dre 'n arbenn ma n'eus rener ebet. Ar soñj-se ne zle ket mont diwar hor spored, Tud dreist hon eus ezhomm anezho pe ne vo ket saveteet Breizh. Arak distrujañ levezon ur rener e rankfed gouzout piv lakaat en e lec'h.

V I I

Trawalc'h e zo bet lavaret diwarbenn-se. Ne c'hell bezañ tizhet an unvaniezh nemet war dachenn an ober ha n'eo ket war dachenn ar menozioù. Ha mat eo evelse. N'eus ket da'hetif e vefe broadelourion eus an holl re a labour evit Breizh e doare pe zoare. Ret eo deomp kaout tud evit kenlabourat gant ar C'hallaoued peogwir emañ stre daouarn ar C'hallaoued buhez ha marv hor yezh. Hogen ar re-se ne zleont ket bezañ renerion. Spored an emsav a zle chom broadel, pe ne vo emsav ebet.

Ni broadelourion e zle chom frank. N'hor bo darempred ebet gant ar stad c'hall hag e gargidi. Anavezout e reomp hon nerzh; divent eo hor youl : enni dreistholl emañ hor fiziañs hag hor spi. Ni eo a gomz en anv Breizh, en anv Breizh keltiek an hini n'eus nemeti. Den ne c'hell nac'hañ ouzhip ar gwir-se, rak ni eo hon eus gouzafvet ar muiañ evit Breizh.

Gouestlet hon eus hor buhez d'hor bro; he reif a rafemp eviti diouzh ret. M'hon eus graet fazioù eo dre ma karemp re Breizh. Deomp-ni eo an enor hag ar gwall-samm da ren lestr Breizh betek porzh ar Frankiz. Dreistdiraez e vo deomp ar porzh-se marteze. Betek ennañ ez aio avat hor mibion pe hor mibion vihan. Neuze hepken e c'hellint soñjal e vo Breizh e savete.

An Tremener

Miz Kerzu 1945

Y E-Z H A P O B L

"Ur yezh ne vez morse na gwelloc'h na falloc'h eget an dud he c'homz. Ar gerioù a ya d'hec'h ober n'o devez buhez ebet drezo o unan : ar ster a vez roet dezho gant an dud o implij, sed a laka galloud enno. N'eo ket ar yezh a zeu da vazañ gwan pe vrein; ar re a ra ganti, ne lavaran ket. Ha pa zeu ar re-se da wanaat pe da vreinast, e sachont ar yezh ganto war hent an disleberidigezh."

"Ma reas Chaucer gant yezh e vro n'eo ket peogwir ne ouie ket galleg pe latineg, na peogwir e felle dezhañ tizhout izelañ renkadoù e bobl ker-koulz hag ar re uhelañ. Dibab a reas ar saozneg a-youl-kaer peogwir e soñje dezhañ e oa ar yezh nemeti a zerec ouzh Saozon skrivañ enni; ha setu perak e voe ker bras e levezon."

T.R. Lounsbury
History of the English Language
(Trest gant Per DENEZ)

I

Kont a zo hiziv gant tud zo eus stourm evit ar yezh hepken. Ur yezh, ha n'eo ket ur vro a vanner saveteif : argas a ranker amezo, pep politikerezh n'en deus graet nemet degas disfiziañs ar gouarnamant gall war an emsav, ha krogiañ endro gant an emgann war un dachenn ar strishañ a vo gallet. Arabat eo komz kan eus brezhoneg exmaez eus Breizh-Izel. An dra-se a vefe pac'hiañ ouzh Bro-C'hall.

Ne fell ket din emañ tamm ebet burutellañ menoz an dud-se. Ar gwir o deus da soñjal ha da grediañ pezh a garont, da embann o ali an doare ma plij dezho, ha da embreger o stourm harvez ma kavint e vo ar gwellañ. Kement den a zifenn ar brezhoneg ne vern pe dre zoare e ve, en deus ar gwir da gacout doujañs hag anaoudegezh-vat eus hor perzh. Ne fell din nemet resizañ hor menoc'h diwarbenn talvoudegezh ar brezhoneg e-kefver pobl ha broad Vreizh. N'eus netra gwelloc'h avat d'an den da resizañ e soñj eget hen keffveriañ gant hini re all. Lavarout a raimp eta ne c'hellomp ket asantif da veno an dud-se pa fell dezho na vefe kelennet ar brezhoneg nemet e rannad Vreizh elec'h ma vez komzet c'hoazh brezhoneg hiziv. Anv a zo ganto bepred eus yezh ar bobl, ha me' oar-me. Hogen disoñjal a reont e veze komzet brezhoneg gant ar bobl gwechall e darn vrasañ Breizh-Uhel. Ha disoñjal a reont ivez emañ tachennoù zo eus Breizh-Izel o vont da goll o brezhoneg a-benn ur rummad tud

d'an diwezhatañ; da skouer ledenezioù hag enezennoù ar Morbihan. Ne gomzan ket eus pep muiañ kêrioù ha bourc'hioù Breizh-Izel elec'h m'eo deut ar galleg da vezañ yezh ar bobl (ha dizistroadus en abeg da se hervez meno an dud-se). Petra 'vo da c'houlenn pa vo ar galleg a-benn 2 pe 3 rummad (hanter-kant vloaz lakaomp) yezh an holl e Breizh-Izel, ar yezh nemeti, pa ne vo mui komzet ar brezhoneg nemet gant 100.000 pe 150.000 kozhiad, enket evel an iwerzhoneg en rannad-vro dister-tre ? Netra. Ne vo mui nemet dilezel ha plegañ da ober, rak yezh ar bobl a vo deut da vezañ ar galleg.

I I

Gouzout ervat e ran petra a respontor din : re zu eo an daolenn hoc'h eus treset; ar brezhoneg ne gilo ken ha ne day biken da get, rak kelennet e vo ar skolioù a-berzh ar stad c'hall. Ar pezh iskisaf eo e kaver tud gwirion awalc'h - er stad kembraek - evit krediñ kement-se : un survezh, div eurvezh, tair survezh brezhoneg er skol bep sizhun, ha bevañ a raio ar brezhoneg betek dezir ar Varn. Setu diluziet brav ur wall-gudenn ha skafvaet mat koustiañs an dud-vat-se.

Skouer Bro-Gembre n'en deus ket sklerijennet ar re-se. Pell 'zo evelkent en deus displeget R.H. penaos edo ar bad gant ar yezh er vro-se; gwall-fall daoust d'an divyezhegezh, d'an "aistedd-fodod" d'ar skingomz, d'ar "chapel" ha d'ar peurrest. Brein eo ar c'hembraeg evel ar brezhoneg, enbarzhet m'eo enni gant tud ar bobl beznioù gerioù ha troiennoù saoznek, ken eo disneuziet holl ha dishoc'h volbras diouzh ar c'hembraeg reizh komzet gant un nebeut bourc'h-izion. N'eus nemet lenn ar pennad "Iethoedd" eus T. Gwynn Jones ebarzh e levr "Cymeriadau" hag ur pennad all eus Saunders Lewis ebarzh "Ysgrifau dyddmerc'her" embannet nevez zo e mis Eost 1945. Gwashoc'h zo - ha kement-se zo anavezet a-bell zo - Kembreiz yaouank a zilez ar c'hembraeg evito da vezañ bet desket war ar yezh-se. Aze ez eus peadra da reiñ gwall-brederioù d'ar vrogarourion berwel ha dispered na ouzont ket da balec'h e fell dezho mont na peseurt hent a rankint mont gant evit tizhout o fal.

I I I

N'eo ket dav prederiañ kalz evit kompren perak e vez dilezet o yezhoù gant Kembreiz ha Breizhiz. Meneg zo bet graet alies eus pezh a bouez ar muiañ war an dud hiziv : an arboellerezh, ar mezerezh, erfin mekanik ar stad a-bezh. Anavezout a ran ivez kudenn ar fivskoudennerzh, hini ar skingomzerezh (en

ur ger berr kudenn ar vuhez vodern gant an holl ezhommoù he deus degaset ganti - ha deut eo anat d'an holl vrogarourion e vint e Breizh ur benveg divrezhonekaat ha divreizhekaat spontus keit ha ma chomint e dalc'h ar c'hallaoued.)

Lavaret eo bet ivez e felle d'ar werin marmouzañ ar vourc'hizion ; ne fell ket d'ar werin chom gwerin, mezh he deus eus he gwerinelezh. Un dra wir a zo en diskleriadur-se : tud Vreizh-Izel - evel tud Vreizh-Uhel o tilezel o zrefoedajoù gallek - en em sante dirak kêriz evel mevelion dirak o mistri. An dud pinvidik, doujet, ar vistri ne gomzent ha ne ouiant nemet galleg. Evit dont da vezañ kemmesket gant o mistri e ranke kouerion Vreizh-Izel dilezel ar brezhoneg : arouez o meveliezh e oa.

Hogen skouer Bro-Gembre a zesk deomp adarre n'emañ ket ponn-abeg diskar ur yezh e kement-se; rak e Kembre eo komzet ar c'hembraeg gant bourc'hizion, kelennet hag enoret e pep lec'h. Ar skingomz a skign abadennoù kembraek bemdez, ha koulskoude e varv ar c'hembraeg.

I V

An diskleriadurioù ocunaf eo ar re wellañ. M'emañ ar c'hembraeg evel ar brezhoneg o vervel eo abalamour m'o deus pobl Vreizh evel pobl Kembre kollet o emskiantoù-broadel. Arabat eo klask pemp troad d'ar maout, ha n'eus ket ezhomm bezañ gwall-fin evit kompren na varv ket ar brezhoneg en abeg da heskinerezh ar c'hallaoued : rak ne lazher ket ur bobl na vann ket mervel. Ma tilez ar Vrezhoneg o yezh eo dre ma fell dezho he dilezel ha ma fell dezho he dilezel eo dreist-holl en abeg ma kav dezho int Gallaoued. Daoust ha yezh ar Gall n'eo ket ar galleg ha daoust ha gallout a ra un den komz ur yezh n'eo ket hini e vro ? Betek-hen n'o doa ket Breizhiz komzet galleg nemet peogwir ne c'hallent ket e gwirionez. Enep-daolaf a raer ouzhin pezh a c'hoarvez en U.R.S.S. Hogen anavezet eo du-se ez eus meur a vroadalozh er stad, ha nepred ne lavaro deoc'h ul Lituania eo ur Rusian. Goulennit avat ouzh Breizhiz hag-ef int Breizhiz pe c'hallaoued. Ar respont na zaleo ket ha gouzout a raer pehini eo.

E gwirionez he deus pobl Vreizh a-bezh en em renaviet, ar werin war-lerc'h ar vourc'hizion. Gwashoc'h zo evit ur bobl eget bezañ trec'het : asantañ da vezañ kemmesket gant he mistri evel pobl C'halla gwechall. Setu ar vezhusañ mezh a c'hell kouezhañ war choug ur bobl ha sed an hini a zo kouezhet war choug pobl Vreizh. Aes eo kompren c'hwervoni ar vrogarourion e Breizh, rediet mañ int da vezañ estrenion en o bro, hervez gerian R.H.

Daoust ha dav eo moulañ emañ gwerzennoù anavezet mat gant an holl ?

Kredif a ran eo touellet an dud o deus fiziafs e goulennadegoù a seurt gant ar re vouezhiet gant ar c'huzulioù-parrez evit diskouez e talc'h pobl Vreizh d'he yezh. Re a Vretoned am eus anavezet hag a gasao o yezh, hag o deveze mezh anezhi - hag i dic'houest a-wechoù da zisplegañ mat o soñj e galleg. Re c'houzafvet o deus Breizhiz diouzh o brezhoneg a-berzh ur stad na felle dezhi anv nemet ar galleg evit damantif kalz dezhañ. Ar vourc'h-izion pe an damvourc'hizion - evel re ar c'huzulioù-parrez - o deus dis-kouezet bezañ a-du gant ar brezhoneg na vint ket gouest gwech ebet da zeskif ar yezh-se a-unan, seul vui d'he deskiñ d'o bugale; ne garont ket ar brezhoneg n'int ket a-enep dezhañ (hep gouzout re perak ahendall) setu holl. N'eo ket evito ar brezhoneg benveg displegañ ur gevredigezh kenurzhiet. O'o soñj e tle chom ur yezh kouerion, ne emponnont ket e c'hellfe ar brezhoneg dont da vezañ ur yezh sevenadurezh koulz hag ar galleg. Ar meno-se a zo ivez hini ar Skol-Veur hag an eskibion e Breizh. An holl dud vat-se - hag i desket bras ha speredet kear war a lavarar - ne fell ket dezho kargañ o c'houstiafs gant muntr ur yezh, un hendra ken doujus hag ar c'hoefoù da nebeutañ. Evel just n'eus ket kont gant an dud-se eus kelenn bugale Breizh-Izel e brezhoneg. Yezh an deskadurezh a zlc chom ar galleg ha ret eo kelenn e galleg ar galleg da gentañ hag ar brezhoneg da c'houde evel ur yezh estren.

Emañ ar gwir ganto ahendall. Bez e fell dezho kelenn ar galleg da gentañ d'hor bugale ? Daoust hag hor bugale n'int ket Gallaoed, ha daoust ha n'eo ket ret dezho gouzout da gentañ yezh o bro ?

Hefvel eo hor menoz ouz o hini avat : bez e ranko an holl Vreizhiz gwitibunan an amzer da zont deskiñ ha komz ar brezhoneg peogwir int Breizhiz ha netra nemet Breizhiz. Meizañ a reomp ar vroadelzh evel ma ré ar C'hallaoued : bez' e tle pep den gouzout yezh e vro, ha komz enni kerkent ha ma vo deut barrek. Ne redimp ket muioc'h an dud da gomz brezhoneg eget n'omp rediet gant ar C'hallaoued da gomz galleg. Ne raimp nemet oipennif stad an traoù, o doare ma vo a-du gant ar brezhoneg warc'hoazh kement a zo a-du gant ar galleg hiziv. Ne c'hell trec'hif ar brezhoneg evel m'en deus gret ar galleg. Kement-se avat a vo meret en ur pennad all. Lavaromp hepken na zeuio al lafs gant ar brezhoneg da vat e Breizh nemet pa vo dout da vout ar yezh nemeti a sevenadurezh, a vererezh, a stad. Bez e tleo ar brezhoneg warc'hoaz bezañ yezh ar renerion evel n'eo ar galleg o yezh hiziv.

Da c'hortoz e rank an holl re a bled gant ar stourm evit ar yezh hepken soñjal ervat an daou dra-mañ : da gentañ ne garo Breizhiz o yezh nemet pa garint o bro; hag a-rack he c'harout e rankint gouzout ez eus anezhi. Hor c'hentañ trevell eo eta dihunif ar garantezvro stouez Breizhiz. Bez' e tleo Breizhiz deskiñ karout ar vrogarourion ha disficiout diouzh an estrenion pe an dreitourion n'o deus ken soñj nemet distroadaf hor yezh dizolo-kear pe dra guzh evit lakaat hini ar C'hallaoued en he lec'h. O'an eil e rankint meizañ mat emomp en ugentved kantved ha ne stourmer ket ouzh ar "vombezenn elvdarzhus" gant ur vouc'hal vaen eus derou ar pevare hoalad (Setu e gwirionez skoudenn reizh ar stourm etre ar galleg hag ar brezhoneg hiziv). Ret eo ergas falstrivliaderezh ar c'henaouion a gred hag a lavar eo a-walc'h karout ur yezh evit he savetoiñ. Skuizh omp o klevout tud o randonif diwar-benn ar "yezh kozh" hag ar "yezh karet" ha me car-me. N'eus nemet dibaot hini a c'hell chom ar brezhoneg evitañ e vuhez pad tra ar galon. Evit darn-vuiañ ar stourmerion a hiziv e teu ar brezhoneg da vezañ tra ar spered da gentañ. Ar re-mañ n'o deus mui spi da lakaat tud ar bobl da garout ar brezhoneg evitañ e-unan. Gouzout a reont eo kentañ preder ar gouerion hag an dud vunut - nemet unanig bennak an o zouez a rank neuze mont da stourmer - gounit o bara. Ne raio forzh ar re-se eus o yezh eta nemet pa dalvezo d'un dra bennak dezho da wellaat o stal. N'eus ket ezhomm glac'hariañ en abeg da se, hogen ret mat eo deomp embreger hor stourm evit ar yezh diouzh ar wirionez-se.

N'eo ket ar brezhoneg evidomp-ni stourmerion un dra varv a virer evit dudi ar yezhonourion hag an istrogelled falstrivliadet a vourr en hendroù. Bez' ez eo da gentañ yezh ur bobl vev; un tu eo da Vreizh d'en em zieubiñ, ur benveg ivez da zisplegañ he buhez vroadel, da grouiñ he sevenadurezh hag erfin da seveniñ ar bed en amzer da zont ar c'halvedigezh roet dezhi gant Doue.

Ur bobl eo a garomp ha n'eo ket gerioù na senioù ken kozh bennak e ve o rin. Evidon-me e lokaan war an hevelap pazenn trefodajoù brezhonek Breizh-Izel ha trefodajoù gallek Breizh-Uhel. N'em bo ket muioc'h a geuz d'ar gentañ re eget d'ar re all. Lavarit din pesurt koll e vefe da dud Vreizh-Izel dilezel o brezhoneg hiziv ? Koulz e vefe hag hini tud Vreizh-Uhel o deus dilezet o rannyezhoù gallek. Rak n'eus spered ebet ken ar brezhoneg komzet gant Breizh-Izeliz; n'eo ket mui yezh ur bobl emskiantek; n'eus sevenadur

ebet ken displeget annañ; erfin peseurt gounid a c'haller tennañ dioutañ ?
N'eo mui nemet ur skoilh war hent an deskadurezh hag ar plasoù mat. E gwir
ma tle ar brezhoneg chom da viken yezh ur gevredigezh diglok, enni kouerion
hepken, ur yezh vruderezh hepken, evel m'eo gant tud zo, neuze eo kerkoulz
dezh mont da get - ha ne c'hell ket chom hep mont da get. Pe e vo ar brezh-
oneg yezh sevenadur pobl Vreizh en he fezh pe ne vo ket anezhañ. Lavarout a
reer din n'eus pobl ebet hep yezh; hogen daoust ha gwelet hoc'h eus-c'hwil ur
yezh hep pobl ? N'hoc'h eus ket graet emichañs, rak ur yezh a varv war un dro
gant ene ar bobl he c'homz.

I X

Ne stourmer ha ne varver ket evit ur yezh, egiz ma krede R.H. Stourm
ha mervel a reer evit ur bobl; ha maz eo evidomp un dlead stourm evit hor
bro ha mervel eviti diouzh ret, eo peogwir n'he deus bro ebet gwir ebet
d'en em lazhañ, evel n'en deus den ebet ar gwir d'en em zistrujañ. Rak pep
bro he deus he c'hefridi da sevenañ ha Bro-Vreizh he deus hec'h hini ivez.
Ha ma stourmomp evit ar yezh eo dre ma ne c'hell ket ur vro bezañ hep yezh.
"Hep brezhoneg n'eus Breizh ebet". Breizh hag he spered eo a zifennomp pa
zifennomp ar brezhoneg. Netra ken.

Miz Genver 1946

An Tremener

MENOZIOU AN DUD
DIWARBENN AR BREZHONEG

E miz Genver eo bet embannet war "Mouezh ar C'hornog" diwarbenn ar
brezhoneg. Mat eo dreistholl dre ma ra brud evit ar brezhoneg. Menozioù zo
avat displeget gant aozer ar pennad n'omp ket evit degemer. Da gentañ e kav
deomp n'eo ket fur goulenn digant holl dud ar werin anavezout div yezh.
Dic'hallus eo. Ar C'hallaoued vihan o unan, m'eo ar galleg yezh o c'havell,
n'anavezont ket mat ar galleg pe gitaont ar skol. Seul vui ar Vretoned vihan
a rank deskiñ ar yezh-se evel ur yezh estren. Keleennadurezh ar galleg e Breizh
n'he deus nemet un dalvoudagezh he palioù politikel : ober Gallaoued eus
Breizhiz, ha n'eo ket reif deskadurezh dezho. Ne damallomp ket kement-se da
dud gouarnamant Bro-C'hall : un dra "realiek" eo peogwir, hervezo, n'eus nemet
Gallaoued er Frañs.

D'an eil e seblant skriver ar pennad bezañ prest da zegemer marv ar
brezhoneg evel un dra reizh pe da nebutañ disouezhus. Gouizision vras a Vreizh
pe a Vro-C'hall, spisoc'h o sell eget ar re all, o deus diouganet ha degemeret
marv ar brezhoneg abaoe pell zo : hon hendadoù, emezo, o deus kemmet a yezh
dijs un teir gwech bennak; ur wech muñoc'h, ur wech nebeutoc'h... (E gwir ma
tilezfe ar C'hallaoued o yezh evit kemer an alamaneg pe ar rusianeg ne vefe
ket ur gwallleur bras : ne varvfant ket gant an naon evit-se; hag evelse ne
vefe ket mui a vrezel etre Bro-Alamagn ha Bro-C'hall. Na brav e vefe ar bed
ganeomp neuze !)

Merkit mat ne damallan tra ebet d'ar re-se, hag emañ o vont da zisplegañ
perak. Pa zilez ur Breizhad ar brezhoneg evel trefodadaj pobllel, evit degemer
ar galleg yezh a sevenadurezh, ne ra nemet ar pezh furañ a c'hell ober. N'eo
ket eta dilezel ar brezhoneg a rebechomp d'an dud-se; bez e c'hell mervel
kent gwech brezhoneg an "Atlas linguistique"; n'eo ket ni, a c'hellit kredif,
a zougo kavñ dezhañ. Mervel a ranko forzh penaos, evel trefodadajoù Breizh-
Uhel, pe dre ar galleg pe dre ar brezhoneg peurunvan. Neuze omp akord. Hogen
pezh a rebechomp dezho eo dilezel ar brezhoneg evel yezh sevenadur Breizh.
O nac'hañ ar brezhoneg e nac'hont o bro. Treitourion int. Hep brezhoneg n'eus
Breizh ebet, ha Breizhad ebet n'en deus ar gwir da zilezel e vro.

A c'hell bezañ o defe hor gourdadoù abaoe henwarevezh ar maen benet kemmet
a yezh meur a wech. Hogen ne gavomp ket e oa heñvel an traoù neuze. Tud gouez
e oant, ha n'o doa sevenadur ebet da saveteñ na da legediñ d'o warlerc'hidi,
ar pezh hon eus-ni. Ra gounor pezh a lavare "an Tremener" en niverenn diwezhañ:
ur sevenadur, ur spered hepken a zifennomp pa zifennomp Breizh hag ar brezhoneg,

ha pobl ebet n'he deus ar gwir da nac'hañ he sevenadur nag he spered. Pobl ebet n'he deus ar gwir da nac'hañ he broadelezh ar pezh a ra Breizhiz o ti-lezel o yezh.

Kement-se a zisplegomp amañ evit resizañ hor soñj diwarbenn talvoudegezh ar brezhoneg evidomp-ni. Ahendall e c'hall pep hini soñjal ar pezh a gar diwarbenn ar brezhoneg hag a zifenn evit abeg pe abeg. Hogen splann eo ne gar ket ur brezhoneger a-vihanik hag ur skrivagner brezhonek eus Breizh-Uhel - ha stank tre int hiziv - ar brezhoneg en hevelep doare.

Miz C'hwevrer 1946

Ar Buruteller

LENNEGEZH HA SPEREDEGEZH

"Rhaid i lenyddiaeth wirioneddol fod yn genhedlig; neu os mynnwch eir hwy ac anghwyrach, yn genedlaethol."

EMRYS AP IWAN, Erthyglau, II.

"Rak atav pa 'z eus diskar ez eus tu da adsevel."

ROPARZ HEMON

Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh, p. 259.

I

An darvoud brasañ en istor al lennegezh vrezhonek abaoe ugent vloaz eo n'eo ket mui ar brezhoneg evit darn-vuiañ hor skrivagnerion a hiziv yezh ar c'havell. Eus ar brezhoneg poblel e komzan, anat eo. Un darvoud mantrus e vefe hervez lod, hag e c'hall bezañ, ma karer, peogwir e tiskouez n'eus mui a lennegezh poblel e Breizh, hogen frealzus eo ivez rak ma tiskouez eo daut da vezañ yezh an dud desket; gwechall e komze ar vourc'hizion galleg kerkoulz hag hiziv, nemet hini ebet ne soñje, ken e Breizh Uhel, ken e Breizh-Izel, deskif brezhoneg hag ober anezhañ e yezh nemeti. Forzh penaos ne gredan ket e vo un harz d'hor paotred yaouank da vezañ skrivagnerion vat, gant ma vint ampart ha ma ouezint labourat. E-touez skrivagnerion vrasañ Roma e kaver anvioù Kelted evel Caecilius, saver pezhioù-c'hoari, brudet evel unan eus glanañ skrivagnerion al lennegezh latin, eus Afrikiz evel Terentius, diwezhatoc'h eus tud evel Ammianus Marcellinus ha Claudianus, gwellañ barzh latin an Impalaeriezh war he diskar. An holl re-se o deus ranket deskif al latin diwezhat-tre a-wechoù evel ur yezh estren. Hefvel oa an traoù evit ar skrivagner gresianek Loukianos; e Bro-C'hall e c'heller menegiñ anvioù evel re Hamilton ha Renan, ha kalz re all; e Bro-Saoz e kaver Conrad. Aes e vije hiraat ar roll. Ar rummad skrivagnerion yaouank e Bro-Gembre a zo ivez ar eozneg yezh o c'havell. Ha fentus kerkoulz ha kentelius eo lann aradennoù hirvoudus ar varveion diwarbenn kembraeg "modern" ar re-se. Soñjit ! Elec'h komz eus an "Hen wlad" en o barzhonegoù e reont meneg eus ar postoù-pellgomz pe traoù evel-se. Ijinañ a reont troiennoù nevez a laka blev ar re gozh da houpiñ war o fenn. Eveljust ez int dic'houzvez a-grenn eus an troioù-lavar poblel ken saourus ha ken plijus a zeue ken stank gant ar skrivagnerion a wechall. Erfin, patrom kozh ar yezh a zo distreset ha mestaret holl ganto.

E Breizh hon eus anavezet an hevelep klemmoù diwar an hevelep abegoù. Ret eo kredif e voe levezonet tud zo gant ar c'hlemmoù-se peogwir e kavas mat "Gwalarn" gwechall gozh embann un dastumad troioù-lavar poblel evit talvezout emichafis d'he lennerion ha d'he skrivagnerion. Hogen kaer e voe din klask goude ebarzh niverennoù ar gelaouenn na verzis nemet dister roud anezho. Ma vije c'hoarvezet ar c'hontrol eo e vijen bet souezhet. Rak ma oa bev an troioù-lavar poblel evit skrivagnerion boblel o skrivañ evit ar bobl ne cant ket mui bev evit skrivagnerion uhel o skrivañ evit un nebeut tud desket hepken; ouzhpenn kemm an testennoù e oa ivez an dra-mañ a vire outo da implijout an troioù-lavar poblel ebarzh skridoù ordinal : o stumm e unan re zilorc'h ha re hir koulz lavaret. Skeudennusted ha livusted a oa o ferzhioù anataf, hogen dizseun oa o doare-displegañ. O c'heñveriañ a c'heller ouzhan an troiennoù implijet e galleg gant ar "Précieuses" un nebeut kantvedoù zo. A zo muioc'h, kredif a ran ne vo ket brasoc'h lod an troioù-lavar poblel er brezhoneg da zont eget n'eo bet hini an troiennoù "précieus" e galleg. Da lavarout eo e chomo er yezh un nebeut lavarennoù evel e galleg "mettre la question sur le tapis", hogen neuze o devo kollet ar blaz hag al liv - hini al lec'h hag an amzer - a ra o dudi evit an dud a vourr enno hiziv. Ne dalvezint mui nemet ur soñj ha netra ken.

Rak eaunded, sklaerded ha berred eo kentañ perzhioù ur yezh.

N'eus ket mui ahendall a wir yezh poblel a hiziv. Marteze e oa unan er c'hantved tremenet. Hogen ast eo da get, ha war un dro eo deut marv al lennegezh poblel diwar daou dra : diouer a lennerion ha diouer a skrivagnerion; ha d'an daou dra-se ez eus an hevelep abag : marv eo speredegzh ha sevenadur kozh gwerin Vreizh. Lazhet int bet gant pevar ugent vloavezh deskadurezh c'hall. N'o deus ket mui tud ar bobl e Breizh-Izel ozhomm eus skridoù pe kentoc'h oberennoù, savet aratozh ovito o-unan; gwechall e oa al lennegezh dre gomz-se unan eus o didualloù. Bremañ avat e c'hell pep hini lenn levrioù ha kazatennoù gallek. Ar re a zo o chom e kêr pe e bourc'hioù bras a-walc'h a vez bep sizhun o vont d'ar fivvskoudenndi, ha dav eo deomp gouzout ez eo ar fivvskoudenn an doare lennegezh - rak hac'h heñvelast a c'heller ouzhan c'hoariva - en deus ar muiañ a levezon evit stummañ speredegzh an den boutin. Dre welout an hevelep filmoù e teu ar "c'henn-den" war dachenn ar stad c'hall hiziv d'em em furmif war an hevelep patrom. Ha bez ez eus ivez ar c'hazatennoù ar skingomz, al levrioù boutin, ar strolladoù politikel gall, dezho speredeg-

ezhioù estran a-grenn ouzhip. Pobl Vreizh n'emañ tamm abet en hon dalc'h-ni Brezhoned hiziv, e dalc'h ar C'hallaoued amañ ha gallekaet eo; didalvez eo komz eus speredegzh peogwir he deus he c'holllet evit an ampoent. Ho dezastum a c'heller diouz testennoù kozh, hogen marv eo hi hac'h-unan, pe da nebeutañ gwall doc'hor. Tremenet eo war un dro gant hol lennegezh poblel. Anez e vefe eta klask ken e Breizh-Izel ar spered a awene gwechall an dud o deus savet ar gwerzhioù, ar sonioù pe ar pasionoù.

Petra eo dres ahendall ar speredegzh vreizhat ? Maodez Glandour an deus skrivet n'eus ket pell zo ur pennad brudet diwarbenn se ebarzh "Studi hag Ober". M'em eus komprenet mat, e veize ar speredegzh evel un doare gouenn speredel : da lavarout eo hor bafa tehoù spered zo, empennadurioù zo, dre ouenn, dre berzh m'omp ganet Brezhoned. Eviti da vevañ reizh dre vras, e c'houlenn ar soñj-se diskleriadurioù ha displegadurioù zo. Da gentañ ne gav ket din en defe an hererezh glan un dra bennak da welout gant ar speredegzh. Marteze e vo feuket tud zo gant pezh a ziogelan amañ : hogen it da Paris da skouer hag eno e kavot ur bern Brezhoned pe bugale Brezhoned savet pe chomet pell tre e Paris ha n'eus ket mui tu da ziverzout enno an disterañ merk a vrezhonelezh.

Hevelebekaet int bet gant Paris, evel maz a war gendeuzif an holl ouennoù ast d'ober o annez er Stadoù-Unanet. Amañ eo e c'heller meizañ spis divizoù bevaf ar speredegzh hag he gwir anien : skiant-prenet ur ouenn ez eo, - dre ouenn e intantan ur gevredigezh o vevañ diouti hac'h unan abaoe milvedoù - he c'henvenozioù, he c'hredennoù. Anat eo ne c'hell ket ar skiant-prenet-se, ar c'henvenozioù-se, lakaet war an hiniennoù gant ur gevredigezh, dreist hag en diavaez dezho eta, padout pelloc'h eget ar gevredigezh hac'h unan, dre nerzh an hererezh hepken. Sot put e vefe hon kredif ha den ne ra e gwirionez. Kement-se a zisplegen evit diskouez ez eo kentañ dload ar re a fell dezho ad-sevel hor gouenn speredel, hor speredegzh, adaozañ kevredigezh Vroad Vreizh. Anez a-grenn e vo o strivoù ahendall. O tagemar ar galleg o deus hor c'henvroiz degemeret holl venozioù ha tehoù spered ar C'hallaoued. Ha gouzout ervat a reomp n'o deus graet nemet dre m'en em santent izili eus kevredigezh Vro-C'hall ha n'eo ket mui eus kevredigezh Vreizh.

Skrivet eo bet endeo ur pennad ebarzh "Galv" diwarbenn kefridi hol lennegezh. N'oañ ket da gentañ a venoz gant skriver ar pennad, pe da nebeutañ ne c'hallen ket degemer e ali penn-da-benn an doare m'hen displege : ne vevz penaos e ranko Breizh kaout ul lennegezh voutin e brezhoneg evit an dud voutin hag un arzour ne c'hell biken plegañ da lakaat e arz e servij ur soñj, aratozh kaer. Bez ez eus ouzhpenn al lennegezh ledañ-deskamant, ma ro M.M. kement a bouez dezhi. Daoust da gement-se holl e kreden he deus hol lennegezh ur gefridi, hag ar gefridi-se a zo doareet gant m'eo piaou broad Vreizh, ha m'he deus Breizh he c'hefridi. Ne c'hell ket eta hol lennegezh uhelañ - an hini a stumm sperezoù tud ur vroad hag a zo o magadur e gwirionez - bezaf nep-tu, ha didalvoudegezh. En he c'harg emañ paourgetket mirout ha saveteif hor sperezegezh kollet gant ar werin hiziv. Bez e tle hol lennegezh bezaf feal d'hor gouenn ha d'ar pezh he deus difennet betek hen. Bezomp sur ne c'hell Breizh kaout un talvoud bennak, nemet ma tegas un dra bennak nevez ha dibar da beadra sperezel en denelezh. Ne c'hell hen ober avat nemet o vozañ faloun d'he sperezh hi. Melezour sperezh hag ene ur bobl eo avat al lennegezh; muioc'h eget ur melezour ez eo zoken : hi eo o mir dre reif ur c'horf dezho.

Al lennegezh a zo graet da gentañ evit ar vroad, ha dileadoù e keñver ar vroad he deus eta, pe evit komz ez rasisoc'h, ne c'hell ket ur skrivagner bezaf ur skrivagner hepken : bez e tle da gentañ bezaf un den hag e Breizh ur brogarour; ergas a zleomp eta skouer ar skrivagner gall na vev nemet evit e arz, gouez dezhañ. Ne greden ket, pe nemeur, e termenadur gant Goethe eus ar barzh pe ar skrivagner:

"Ich singe wie der Vogel singt" hag a zo bet degemeret gant R.H. pe da nebeutañ e kav din n'eus nemet un tamm o wirionez en termenadur-se. N'eo ket p'emañ hor bro o vezvel e c'hellomp chom hepken da c'hoari gant gerioù ha pa vefent re hor yezh. N'eo ket va soñj-me da vihanañ.

Miz C'hwevrer 1946

An Tremener

N'emeur e soñj er pennad-mañ nemet rezizañ ur wech muioc'h pal "An Avel". Graet eo bet dija, nemet merzet hon eus ne oa ket meizet mat atav hon diskleriadurioù; a zo muioc'h, tamallet e voe ouzhipm bezaf diwirion d'hor ger kentañ hag ober meneg en hor c'hellaouenn eus traoù difennet hag eus gwirionezioù arvarus - evit an neb o displeg, anet eo - elec'h chom strizh war dachenn ar sevenadurezh santel; da lavarout eo al lennegezh eo hor bafe dleat pleustrif warni hep muiken; embann a rankjemp barzhonegoù, kontadennoù, sorbiannoù, romantoù, studiadennoù hir, pizh hag enoës diwarbenn an densoù ha me 'oar me. Evelse betek kouezhañ e belbi. Hervez tud 'zo n'eus nemet an tu-se da saveteif Breizh. Gwell a se dezho m'hen kredont, evel ma lavare unan.

"Eürus an neb a oar huñvreal..."

N'hellomp ket huñvreal avat. Dihun mat omp siwazh, lagadet lemm omp ivez, ha pa garfemp en em zallañ ne c'hellfomp ket. Ne c'hellomp ket chom hep gwelout emañ ar brezhoneg, mammenn hor sevenadur o vont da get. Netra ne c'hell bezaf trec'h d'an anataenn-se. Hi eo a ren hor menozioù hag hor youl. Drezi e ouzomp n'eo ket ar sevenadurezh un dra peurzieub diouzh ar reterioù douarel, hogen siwazh stag mat ouzh ar bed-mañ hag e zivizoù bezaf; evit komz fraes-hoc'h n'eus ket tu da ziforc'hañ a-grenn ar sevenadurezh diouzh an arboellerezh ar politikerezh ha buhez klok ar Gevredigezh. N'eus ket ezhomm mont pell evit kavout ur skouer; lakaomp e vije bet stag Bro-C'hall ouzh Bro-Al-emagn pe Vro-Saoz pe n'eus forzh pe vro all apad pemp kant vloaz; lakaomp na vije bet desket morse er skolioù d'ar C'hellaoued vihan nemet yozh hag istor ar vro estren; kredif a ra deoc'h e vije bet ken bras berzh ar yezh hag ar sevenadur gall ? N'eus nemet e Breizh e gwirionez e ranker pouezañ war traoù ken splann.

Arabat souezhiñ eta ma kaver anv en "Avel" eus traoù estreget lennegezh c'hlen. Maz eus tud en hon touez a erbed an diskoulm-mañ-diskoulm da gudenn Vreizh ne c'hellomp kavout abeg ebet enno, rak oc'h ober se ne fell dezho nemet difenn sevenadur Breizh. Darbariañ a vannont dezhañ an ti n'hellfe ket kreskiñ heptañ, na bleuniañ. Gouzout a reont n'int ket tud a ijin ha n'eo ket i a vo gouest c'hoazh da zegas an uhel-oberoù a sevenadurezh a rank kaout Breizh evit dellezout bevañ. Bezaf servijerien ha n'eo ket krouerien ar sevenadurezh eo o mennad. Bretonek vat int, brogarourion, ha n'hon eus abeg ebet da nac'hañ embann o ali "en Avel" : dre zegouezh e vo atav ahendall hogen evel an holl o deus ar re-se ar gwir da gacut ur soñj ha da embann o soñj; ma'z eus tud all a grad eo ar gwellañ tu da sevenadur Breizh mont war gresk eo skignañ ar galleg pe ar papoueg dreholli hag e pap lec'h en hor bro hag

harluañ ar brezhoneg diouzh ar skolioù hag ar mererezh, o deus ar gwir ivez da gaout ar soñj-se ha d'hen displegañ egiz ma karont. Breizhiz kar-o-bro, a zo fur a-walc'h evit merzout gant piv emañ ar wirionez. Aes eo d'ar re-se kompren ahendell, da skouer, e vo talvoudus-tre da sevenadur Breizh kaout ur skinva d'e skoazellañ. Hogen se ne c'heller tizhout kaout nemet dre bolitikerezhiañ, n'eo ket ta ?

Reif ur skoudenn wirion eus buhez klok ar broioù hag ar sevenadurioù keltiek a vennomp ober hepken. Ne vezomp ket ar sevenadurezh avat evel un dra miret evit plijadurezh un nebeut istrogelled emger ha siek n'o defe da ober nemet lennegezhiañ endra ma varvfe o fobl gant an dienez. Tra ur bobl a-bezh ez eo sevenadurezh. Evit pobl Vreizh hag he sevenadurezh eo e stourmo "An Avel".

Gouere 1946

"An Avel"

O B E R

An nerzh hepken a zo e wir d'an den, hag ar goulen taerfañ, n'eo ket an hini reishañ en devez berzh en diwezh. Diouzh an daou venoz-stur-se eo e rankomp ni Breizhiz embregor hor stourm er mare-mañ, pa welomp ur wech ouzhpenn hor gwir disterañ nac'het gant ar gouarnamant gall; nevez zo eo bet taolet d'ar bloedoù gant ar ministr Nâgelen, pe gant e vurevioù, ar pezh a zo heñvel, ar goulenadegoù graet gant ar studierion ha paotred "Ar Falz" evit ar brezhoneg; ne vernas ket pegen uvel ha pegen dismegansus evidomp e oa ar stumm anezho. Adarre e rankomp gortoz ha gouzafv ur reoliadur a gas hor yezh d'ar marv. Gwashañ tra 'zo : n'eo ket dre zarvoud eo bet graet an nac'h-se; darn eus ur politikerezh enep-breizhat kozh dija n'eo ken ha n'ous ket da spiañ e vefe dilezet an un taol kreonn en amzer-da-zont.

*
* *

Arabat krediañ ez eus aze youl fall aberzh ar C'hallaoued. Ar re-mañ a zo krefvoc'h egedomp, setu hall, ha tennañ a reont o mad eus o nerzh. Didalvez eo souezhiañ ha feukiañ, ha didalvesoc'h klemm, rak hor gwanded hepken eo a ra galleud hon enebourion. Istor ar bloavezhioù diwezhañ-mañ en deus diskouezet e oa gouest ar C'hallaoued da reif o goulennoù da bobloù o doa sujet, ha deskiñ a re deomp ivez persk o deus asantet plagañ d'ar reizhdad; n'eo ket hi a zoujent, hogen nerzh ar re he difennent. Netra ken. Deomp d'hon gouzout.

An ober eo eta hor c'hentañ dlead hiziv. Ober a rankomp pe verval. Bez e tleomp kaout ar youl d'ober eus emsav un nebeut brogarourion o deus gallet terrif droukvoem Bro-C'hall, emsav ur bobl a-bazh e-kerzh an dekvedoù da zont. Neuze hepken e c'hellimp goulen ha bezañ sur e vimp selaouet. Ahendall e vo gwann hon holl strivoù; gallet hon eus prenañ skiant a se en amzer dre-menet? N'eo ket hor goulennoù, hogen ^{eo} ni a zispriizer. Ha ne deolor pled d'hor gwir nemet pa aonor rak hon nerzh. Lezann an istor eo, ha n'eo ket ni hon eus he graet.

*
* *

An doare pennañ evidomp da labourat avat eo ar bruderezh. Ne laverin ket eo mat ne vezn pe vruderezh ha krediañ a ran eo fur aliañ paotred yaouank an emsav da chom hep empennif ez eo lakaat enskrivadurioù enep-gall war vogerioù hor c'herioù, evel ma c'hoarvez adarre bremañ, an tu gwellañ da c'hounit tud

ar bobl d'hor menozioù. Argas a zleer ar bruderezh nac'hus ha kuzh. Gouzout e ran n'eo ket peurzidalvoud kement brud a vez graet endro da Vreizh. Hogen, pa c'heller, gwelloc'h eo dibab an doareoù-ober gwellañ. Evit ar poent eta e vo ar bruderezh broadel andro d'ar sevenadurezh an hini efaduseñ, ma ouzomp hen embreger gant reizh. En ur ger berr, dav eo ha gallus eo adsevel adal bremañ un doare "Gaelic League" giz Padraig MacPiarais. Anat eo na spiro ket seurt strollad ouzh holl ezhommoù Breizh. Ret e vo e adaozañ en ur stumm all a-benn ur pennad, pe sevel un all en e gichen. Hogen tro a roio deomp da genurzhiañ labour ar stourmerion n'o deus ket bet tu ebet da genober abaoe ouzhpenn daou vloaz. Taolomp ovezh mat ivez e vo ret en em reiñ a-zevri d'al labour, ha n'en devo ket ar strollad-se ezhomm eus tud diok pe digenesantus, pe treuzdispac'hus. Goulenn a reomp eta digant holl lennerion "An Avel" sellout outo o-unan evel ouzh servijerion Vreizh. Ret eo dezho, bemdez, diouzh ma c'hallont, klask degas un den d'ar menoz broadel. N'eo ket marteze ken diaes ha ma kreder. Meur a zoare a zo da lakaat ur Breizhad da emskiantañ e vroadelezh; e henchañ da zeskiñ ar yezh, e gelenn war istor Breizh, e goumanantañ d'ur gelaouenn vroger. Hogen droistholl en amzer-da-zont e vo esaet o labour gant ar strollad sevenadurel a savo kevrennoù e pep kêr hag e pep bourc'h eus Breizh hag a zarnaouo dezho danvez brudañ; ef a vo hor pennañ benveg dihunañ Breizh. Gantañ e vo gelllet saveteañ ene Breizh, he broadelezh enkorfet en he yezh, hag notren dezhi seveniñ ar c'halvedigezh m'eo bet krouet eviti gant Doue.

Here 1946

"An Avel"

G W E R I N R E N O U R I E Z H

I

Kont a zo alies bremañ eus gwerinrenouriezh : deut eo da vezañ kenster d'an "Hollvad" e bed ar politikerezh. N'eus ket pell zo n'eo ket heñvel : epad pevar bloaz, e Bro-C'hall droistholl, ne voe greset nemet dismegasañ ar werinrenouriezh hag ar genvreaouriezh evel doare gouarn.

Abred eo evidomp-ni Breizhiz, marteze, klask gouzout pe reizhadur a vo ar gwellañ d'ar vro en amzer-da-zont. Mat e vo koulskoude er pennad berr-mañ burutellañ, pe kentoc'h pouezañ ar menozioù endalc'het er gerioù-se : gwerinrenouriezh ha gwerinelouriezh, hag a zo talvezet gant ur ger hepken e galleg, egiz ma ouzer.

Gwerinrenouriezh a dalv en em c'houarn ar bobl hec'h-unan. An uhelpal a vefe en em c'houarn war-aeun evel en Aten gwachañ pe e Bro-Helvetia hiziv. N'eo ket tizhet an uhelpal-se avat e darn vuiañ broioù bras Europa, dres en abeg d'o ment. Ar bobl a ro dezhi hec'h unan mistri a zle seveniñ he youl. Kentañ tra anat a verzomp eta eo n'hell ket bezañ ur werinrenouriezh c'hlan en ur stad vras.

I I

Dezo ar werinrenourion, evel ma ouzer ivez, eo mirout na ve lakaet war ar bobl lezennoù na blijfent ket dezhi. Ret eo neuze avat empennañ al lezennoù evel divizadurioù hepken; n'eus ket da zerc'hel kont eus ar vadolezh pe ar falloni anezho. Da skouer e c'hell bezañ savet ul lezenn o c'hourc'h-emenn d'ar c'hirri-dre-dan bale war an tu kleiz (ha n'eo ket war an tu dehou evel a broioù all). Er reoliadur-se n'eus nemet divizerezh. Padal eo aes meizañ ne c'hell ket galloud an niver muic'h eget hini an hinienn reishaat pep tra. Rak, maz eus tachennoù zo n'o deus mann da welout gant ar vuhez-ouriezh, ez eus degouezhioù all avat n'hell ket al lezennoù tremen hep kejou ganti. N'eus eta nemet an divizadurioù rik a zo reishaat gant an niver. Ahend-all, mad ar gevredigezh eo a laka al lezennoù da vezañ mat pe fall. Groñs eo talvoudegezh al lezennoù gwirion. Bez' e tleont reiñ tu d'an den frammet er gevredigezh da seveniñ ez klok e c'halvedigezh a zen. N'atra muic'h, n'atra nobetoc'h kennebeut.

Setu eta anien ar werinrenouriezh an difetis, ma c'heller lavarout. Ret mat eo din merkañ "an difetis" rak e gwirionez, evit bezañ peurvat e rankfe al lezennoù bezañ degemeret gant an holl gwitibunan. Emañ diazez o reizhded en unvaniezh an holl geodedourion. Asurif a c'heller avat ne c'hoarvez se nepred, hag e chom ar "gwerinrenerezh" gwirvoudel en Amvoud Bro-Utopia. Skouer Bro-C'hall hiziv han diskouez anat; reoliadurioù 'zo n'int bet degemeret nemet gant un tammig ouzhpenn an hanter eus ar geodedourion. Gwaskañ an niver vihan trec'het ne ray ken ar gostezenn grevfañ, kaer 'vo arguiñ. Digarez ar werinrenourion, eval dres, eo e ranker dilenn plijout kentoc'h eget displeijout d'an darn vrasañ. Ret eo mac'han an nebeutañ a dud ar gwellañ. Mat eo an arguzenn, hogen n'eo ket un digarez. Rak evit bezañ disi et tlefe ar gwerinrenerezh skarzhañ dioutañ e-unan pep elfenn a vac'h-omerezh. Ahendall e vo gwelloc'h c'hoazh an unrenerezh gant ma vo degemeret gant an holl; rak n'ous ket a duranelezh elac'h ma kerer an turan. Ha gwerinrenouriezh ha kenvreutaouriezh n'int ket peur-genster(1).

Arabat mont dreist evelato. Aes eo dizoleiñ mankoù reizhadur ar werinrenouriezh. Met gwelout a raimp bremaik e ranker forzh penaos ober diouti - ne vezn e tegemerfod pe get ar kenvreutaouriezh evel doare-gouarn, n'eo ket dre m'eo an doare-gouarn-gwellañ, (marteze eo an hini fallañ evit dispac'herion dreistholl) hogen dre m'eo an hini a ro ar muiañ a frankiz d'an den. Ha diogeliñ a c'heller eo dreist doujañ frankiz ha dellid an ded da bep barzh politikel.

Rak unan eus doareoù mat ar werinrenouriezh eo dres er perzh a gemer enni ar bruderezh - ha n'hell ket bevañ ar bruderezh hep diubiozh evit an den da zifenn e soñj ha d'he skignañ etouez ar bobl. Ra daolur pled mat avat ez eus anv amañ eus ar stourmerion, da lavarout eo eus un dibab a dud o deus gouestlet o buhez da seveniñ un uhelvennad. Rak emañ ar bruderezh poll a-

(1) Hiziv an deiz e c'hell ar werinrenouriezh kas war-eeun d'an unrenerezh. Ma ne deo ket dieub izili ur strollad, hag e gennaded da vouazhiañ evel ma karont, e c'hell ur strollad trec'h mat diogeliñ e verzh da vat. Dre an dilennadegoù eo deut rener kozh Bro-Alamagn a-benn eus e daol. Anat eo ne c'hoarvez kement-se nemet paz eus dispac'herion oc'h en em dremen da werinrenourion.

walc'h diouzh e uhelval pa ra wardro ur bobl dizek hag hedro a-walc'h. Safset ne zlefe nemet klask kendrec'hiñ an dud. Nemet o gounit dre douell a ra alies. Skouer ar gounisted pe hini an emsaverion e Broizh a zo splann a-walc'h : ne ziskuliont ket o gwir vannadoù nag o gwir soñjoù. O gwelout a reer an eil re hag ar re all oc'h ober gant ar banniel trilliv, diouzh ret, evit degas an dud d'o uhelvenez, ha gouzout a oar an holl pegen bihan a forzh e ra an daou rumad-se a dud eus Bro-C'hall. Ar bruder peurliesañ ne briz ket kalz natur Mab-den. En em harpañ a ra war e berzhioù disterañ ha displetañ : an aon, ar werizi, ar gounner. Anavezout a reer strivoù ar gounisted evit lakeat ar vicherourion da gasaat ar vourc'hizion, ha re an emsaverion evit lakeat ar Vretoned da emskiantañ o sklavelezh ha da gemer kas ouzh o mistri. Tamall a raor din droklivañ ar bruderezh amañ. Ne gradan ket e ran. Resizeañ e zivizoù ober berzh ne ran ken. Ur bruderezh "mat" pe kentoc'h talvoudus a implijo holl drivliadoù mat pe fall, holl venozioù faos pe wir an den evit e c'hounit. Arabat rebec'h outañ zoken lavarout gevier : gwelloc'h eo hejañ ar banniel trilliv eget bezañ tremenet da fallakr, pa n'eur ket; ret eo doujañ fazioù ha touelladurioù an dud ma kerer o lakeat da resev un nebeut gwirionezioù.

Hogen evit ar "stourmerion" dreistholl eo graet ar werinrenouriezh, egiz m'em eus lavaret uheloc'h. Aotren a ra dezho skignañ o menozioù hep bezañ rediet da ober gant ar brezel. Rak pe n'ous ken tu d'ar stourmer d'ober gant ar gomz e ra gant an nerzh. Gwashoc'h zo : hep gwerinrenouriezh, hep bruderezh ne vefe diskoulm ebet d'ar strolladoù nemet al lezhadegañ. N'echufe an emgann nemet pa vefe kaset da get da vat stourmerion ar strollad trec'het. Kroaziañ a rankfemp war an doneliezh avat, ha haoloc'h a vefe neuze dilezel an ober eget plegañ da saurt stourm digened ha sakr. Bez' e c'heller dezastum eta eo an damantif d'an holl a vefe an talvoud gwirion nemetañ eus ar werinrenouriezh. Arabat e vefe neuze d'ar strolladoù bezañ displeal en o stourm, ret e vefe dezho chom hep implijout doareoù-brudañ dizenoruz, evel an tamall e goue h.a. (kv. pezh a zo c'hoarvezet a Bro-Gembre nevez zo, pa voe tamallet da Strollad Kembre gant ar Strollad Labour bezañ a-du gant ar fachistiezh). Arabat e vefe dezho ivez kaout uhelvennadoù re enebet, na mennout o c'has da wir koustat pe gousto. E berr, bez' e tlefant peuzzegemer ez leal reolenn ar werinrenouriezh evit gouzout piv 'vo trec'h. Hogen pe strollad a asanto chom trec'het da vat ivez ?

V I

Kement-se a ziskouez mat avat ne c'heller ket bezañ en gortoz da gavout gwerinrenourion wirion elec'h ez eus dispac'herion. Bez' e c'hell an dispac'her bezañ a-du gant ar werinrenouriezh a wir galon, gouez dezhañ - hag ober diouti. Hogen ma vez un deiz n'eus mui nemet un tu dezhañ da drec'hiañ, ar brezel, ne dermo ket evit hen ober. Evel bruderezh zoken n'eo ket falloc'h ar brezel eget un all : bemañ a ra tud ar bobl ouzh ar galonegezh. Amañ e kavomp ur menoz reizh : n'heller ket e vezn pe vro, e ne vezn pe amzer tremen hep ar bobl. An enep-kenvrentourion zoken a rank ober van ouzh ali ar bobl. Kaout dre gaer digant ar bobl hac'h unan kofje d'he chadennañ ha d'ober ganti pezh a garo eo a venn an dispac'her. Ne gehel ket ar werin avel ur mestr, ha n'eo ket he servijañ eo a venn; gouzout a ra ne c'hell nemet sentif d'an hini krefavañ a gavo krog enni, hag ez eo an hini krefavañ an hini en devo ar muiañ a arc'hant, rak hennezh hepken a c'hell magañ ur bruderezh efedus. Mestr ar bruderezh eo an arc'hant, ha mestr ar bobl eo ar bruderezh e pep stumm. Ne drec'h ket ur menoz dre m'emañ ar wirionez gantañ hepken, hogen dre m'emañ ar binvidigezh gantañ ivez. Elac'h lazhañ pe vac'hañ stourmerion ar strolladoù enep e lamer o arc'hant diganto. Aes eo kas ur menoz da netra pa ne c'hell ket mui bezañ displeget nemet ebarzh ur gelaouenn viziek. Pennaos e c'heller herzel ouzh ur strollad enep trec'h o piauñ teir pe beder kazetenn bemdeziek ? Ra soñjor e Breizh. Ret eo kontañ gant kalon ar stourmerion, gwir eo; hogen, evel ar brezel a vremañ, n'eo ket a-walc'h kalon an dud evit reañ an trec'h dezho.

V I I

Ar werinrenouriezh wirion eta ne c'hell ket bleuniañ da bep mare eus istor ur vroad. Ne zivizer ket en em c'houarnio ur bobl en doare-mañ-doare. d'ar mare-mañ-mare. Trec'h d'an dud eo an dazvoudoù. En un enkadenn, d'ur c'houiz diskoulmus eus hec'h emdroadur, n'en em zeno ur vroad nemet dre ar re oberiantañ hag ar re godernañ eus he mibion. Ne c'hell ar werin neuze nemet heuliañ ar re a oar petra e veznont pa ne oar hi ket. Marevezhioù an dispac'hoù hag ar brezelioù eo ar re-se; lanv a zo ma karer. Pa vez tre, pa n'o devez ket mui ar sturvenzioù hag ar mennadoù start kement a bouez, pa vez peoc'h diabarzh ha diavaez, e teu endro ar werinrenouriezh lezennel, gant ar bruderezh reizh hag an dilennedegoù. Hogen ret eo da c'hred ar stourmerion bezañ aet da heek, ret eo d'o feiz bezañ distanet, ha d'o c'halon bezañ kollet, pe neuze d'o uhelpeal bezañ sevenet.

Forzh penaos dalc'homp soñj e tle ar werinrenouriezh zoken d'ar mardoù reverzi, herzel ouzh an dispac'herion d'en em daoul er brezelioù gwadek hag hollreuzius. Mont diouto ne c'hellint avat nemet ma esantont da lakaat o goulennoù hag o mennadoù da genglotañ. Ahendall evito da vezañ gwerinrenourion safset, lorbif ha n'eo ket karout ar bobl eo a rafent. Deskiñ da stourmerion kostezennoù dishefvel damantif an eil d'egile ha d'en em glevout evit mad ar bobl e tleo ober ar werinrenouriezh. Ahendall ne vo nemet gaou he touell.

Miz Gwengolo 1946

An Tremener

PENAOES EMBREGER HOR STOURM

EN AMZER DA ZONT

I

Gwalet hon eus abarzh niverenn diwezhañ "An Avel" penaos e oa ret ad-
kregiñ gent an ober a-zevri hag an abretañ ar gwellañ. Spisaet eo bet ivez
peseurt doare stourm a oa an hini gwellañ evit an ampoent : an hini embreget
war dachenn ar sevenadurezh. Emaon o vont da zisplegañ bremañ petra a soñjan
diwarbenn ar stourm politikel.

Ret eo deomp anzav e vefomp tuet da gentañ da zilenn ar stourm politikel;
en diwezh ne c'hell ket ur sevenadur bevañ hep ar stad, ha gwir naturel ar
vroad eo forzh penaos, an dieubiezh. Ar reolenne-se a zle chom hon hini. Ret
e vo deomp kaout a-benn ur pennad amzer ur strollad broadel bennak a c'houez
d'an holl, egiz hini Kembre pe hini Euskeriz Vro-C'hall hag o deus kinniget
ur roll e-kerzh an dilennadegoù diwezhañ. Ma 'gred e c'hell ur strollad,
dezhaf spered broadel ar strolladoù politikel kozh, ober berzh en amzer da
zont, ma oar chom hep bezañ re daer en e vruderezh hag en e embannadennoù.
Ha Bro-C'hall ne c'hell ket lakaat berzh war ur strollad a c'houlenn evit
Breizh statud an Unvaniezh C'hall, statud anzavet ganti, ha lezennel, evel
ma c'houlenn Strollad Kembre ar statud dominion evit Bro-Gembre.

I I

Gouzout a ran e kred da lod ne vo gallus biken lezennelaet da vat ur
strollad broadel a c'houez d'an holl. Hogen respont a rin dezho eo ret holl
e ve lezennelaet dez pe zeiz, ha disklerieñ a rin perak palloc'h em pennad.
A-ziarak klaskomp meizañ poelloù ha digarezioù ar re a erbed deomp distreiñ
da sturiennoù politikel kozh eus penn-kentañ ar c'hantved-mañ pa oa ar rann-
vroelouriezh en ha barr uhelañ er vr-mañ.

A-dra-sur ne zislaverin ket ar re a asur e vefe mat kaout - da nebutañ
ma n'hellomp kaout netra gwelloc'h - ur strollad rannvroelourion e Breizh.
Sur a-walc'h e vefe aes a-walc'h seurt strollad : ne spontfe ket an dud, ne
hegasfe ket ar gouarnamant gall kennebut. Erfin diarvar eo e rafe berzh
kalz didennoc'h eget ur Strollad Broadel. Hag hon tud vat a soñj : nag a
dud a vefe tu da douellañ gentañ ! Mat-tre eo kement-se. Hogen, da gentañ,
e ranker gouzout ez eus bet arak ar brezel-bed kentañ tud o deus soñjet e

oa hennezh an doare stourm efedusañ. C'hwitet o deus. Ne zeñ ket bremañ
klask abegoù o droukverzh. Anavezet hon eus ar politikerezh ar "Bretagne"
epad ar brezel. Dias eo deomp ha barn peogwir n'an deus ket pedet pell
a-walc'h an arnodad-se evit turel frouezh anat. Koulskoude e c'hell ur rener
padout pell da gomz a-enep d'e soñj - diskouez doujañ Bro-C'hall pe ne ra van
outi - pe da nebutañ chom hep diskuliañ e venoz en e zonañ. Hogen ne c'hell
ket ar stourmerion - komz a ran eus ar re en em ouestlo a-grann d'un emsav,
ha n'eo ket eus ar re a roio skor dezhañ dre zegouezh hag a chomo emsaz
anezhañ - ne c'hell ket ar re-se eta kenderc'hel da stourm en anv menazioù
na zegemeront ket penn-da-benn. Ha gouzout a reer ez eus ur broadelour dre
guzh pe a c'houez d'an holl eus kement stourmer breizhat gwirion zo. Dre ar
ger stourmer e veiz an un den a zo prest da vont d'an toullbac'h pe da washoc'h
evit e uhelvennad. Anat eo avat n'eo ket ur rannvroelour gwirion evit degemer
seurt anv. Neuze e vo tonket ur strollad rannvroelourion da chom hep kaout
harperion mennet start. Ha dias e vefe dezhañ kempouezañ ar gwander hag an
diouer-se.

Un dra a zo ahendall hag a laka diboañ ha diezhomm ur strollad rann-
vroelourion e Breizh : da gentañ sevel ur strollad seurt-se a-ratozh evit
Breizh a vefe anzav eo digenvez kudenn Vreizh e Bro-C'hall hag en em ziskouez
broadelour eta. D'an eil evit goulenñ pezh a c'houlennont n'eus ket azhomm
sevel ur strollad ispisial : an adaozadurioù a c'hoantaont a c'hell aes tre
bezañ kenket evel adprogram ebarzh roll goulennoù ar strolladoù gall e Breizh.
Evel-se o doa graet ahendall ar rannvroelourion betek hiziv : soñj hoc'h eus
eus an "talbenn breizhat", h.a. Merkit mat, m'ho ped, ne lavaran ket ez eo
peurzilvez seurt doare stourm. Kredañ a ran ne spir ket ouzh holl doberioù
Breizh; setu holl.

I I I

Ahendall ez eus c'hoazh un doare stourm all evit ar rannvroelourion pe
ar gevredadelourion : fremañ o strollad e diabarzh ur gevredadigezh. Tu a
vefe evel-se da sevel un doare talbenn evit broadelezhioù bihan ar stad c'hall.
Mat e vefe ar menoz-se ma c'hellfe bezañ kaset da wir, hag hervez divizoù zo
ivez : gwelloc'h e vefe d'hor soñj ober un talbenn strizh na endalc'hfe nemet
ar broadelezhioù estren gwirion eus ar stad c'hall : Breizhiz, Elzassiz, Eus-
keriz ha Flandreziz. Etre an tri rummad kentañ e vefe aes ober an unvaniezh,
rak bez' o deus - pe bet o deus - o zri strolladoù broadel. Marteze a vefe
mat degemer Korsikiz. Evit Okkitaniz eo disheñvel ar gudenn rak o broioù n'o
deus bet morse emsavioù broadel gwirion. Rannvroelourion int bet a viskoazh
hag e chomint da viken, kredañ a c'heller. Eveljust, tu a zo d'en em glevout

diwarbenn ur roll goulennoù disterañ. Hogen ne c'hell ket un talbenn bezañ gwall grev paz eus re a gemm etre pep hini eus an dalc'herion anezhañ. Ne vern penaos e tlefe pep strollad mirout e zishualded e diabarzh an talbenn-se.

Talvoudus e vo, hep mar ebet, seurt Unvaniezh Etrevroadel eus bihan-niveroù Bro-C'hall, ha mat e vo he sevel. Gouzout a rankomp avat n'eo ket se diouzimp hepken hag e vo hor soñj diaes a-walc'h da seveniñ, kredapl eo, peogwir n'eur ket deut a-benn d'ober netra sirius war an dachenn-se etre an deou vrezel pa oa emsav Elzassiz en e greñvañ, pe da nebeutañ ne voe graet netra e-keñver dilennadegoù da skouer. Dalc'homp soñj ivez penaos e c'hwites ez vantrus "an tan" e penn-kentañ ar brezel-mañ evitañ da vezañ graet ur bruderezh koustus e pep rann eus ar stad c'hall (ha c'hwites a reas peurgetket dre ma klaske bezañ un dreiststrollad kentoc'h eget un talbenn) - Ur fazi e vefe eta gortoz ma vefe urzhiet un talbenn evit sevel pep a strollad d'ar broioù o deus ezhomm anezhañ. Kerkoulz e vefe lakaat en doenn arak ma vefe mozeziou.

I V

Forzh penaos, ne vern pe emglev a vefe da skoulmañ gant strolladoù o stourm e diabarzh ar stad c'hall, e chom ar gudenn-se digoulz evit ar mare. Rak da gentañ e vo ranket sevel ur strollad broadel hag a roio tu d'ar vroadelourion da stourm evit o uhelvennad hep touellañ den. Ne ouzon ket piv en deus sanket e penn tud zo e oa ar gaou hag ar gwidre kentañ perzh ar politiker. Me gred er c'hontrol eo al lealded e berzh pouezusañ. Ret eo distrujañ stad spered broadelourion yaouank zo a gred n'eus tu ebet da gaout peoc'h digant ar gouarnamant gall ha ne vo ket tu deomp da stourm evit Breizh egiz ma karomp. Ahendall e vint degaset da ober gant strolladoù kuzh, na c'hellfent bezañ nemet strolladoù digiriek ha kement-se a vefe drastus evit en emsav dre vras.

V

Menegiñ a ra tud zo ahendall e vefe talvoudus kaout meur a strollad broadel breizhat oc'h heuliañ kelennadurezhioù an emsaviou politikel hallvedel. Unanet e vefe ar strolladoù-se endro d'ar menoz broadel, hogen mirout e rafent a hengounioù o speredegzhioù hag o feliou dezho o unan. Tu a vefe d'an hall Vretoned da stourm evit Breizh en ur zerc'hel d'o frederouriezh ha d'o bedvoizadur. Ret eo anavez' o devez kertri Bretoned zo da zont ebarzh ur strollad ma vefe tuet darn vuiañ an izili anezhañ da venozioù diwarbenn

kavredigezh da skouer disheñval diouzh o re. Ar pezh gwellañ hag aesañ a vefe embreger e Breizh, evel e Katalounia strolladoù komunist, socialist ha broadel. Hogen, siwazh, n'ouzon ket ha prest omp da gaout ur c'h-Connolly e Breizh. (Merkomp e-keñver-se e vefe gwelloc'h d'hor socialisted kemer skouer diouzh Labouridi Vro-Saoz eget diouzh socialisted Vro-C'hall).

Rak ma c'hell fougasiñ hor socialisted da vezañ torret meur a idol, ret eo anavez' e azeulont unan atav : Bro-C'hall an hini eo. Keit ha n'o devo ket dilezet ar vrizh-kredenn-se, diaes e vo embreger un dra bennak war an dachenn-se. Tud kalz re lent, kalz re spontidik eo Kleiziz Vreizh : keit ha ma aonint re rak mistri o strollad e Paris ne vo ket gallet sevel netra. Ur strollad broadel nemetañ a rankomp kaout eta.

V I

Eus an amzer da zont em eus komzet a-ziagent ahendall. Evit bremañ e c'hell mat tre ar vroadelourion en em strollañ endro d'ur gevredigezh nann-politikel a raio a-zevri wardro ar sevenadurazh. Rak meur a abeg a zo da chom hep embreger diouzhtu un emsav politikel rik : ar mare, an diouer a arc'hant, hag an diouer a renerion kozh a-walc'h ha dezho skiant-prenañ.

Ne dalvezo adkregiñ gant an emsav politikel nemet en deiz ma c'hallimp stourm a-zevri en dilennadegoù. A-dra-sur e vo kalz abretoc'h ager na gred da galz. Hogen, da c'hortoz, n'eus ket amzer da goll da labourat evit ad-dihuniñ ar vrogarantez hag an emskiant vroadel e-touez ar Vretoned dre zeskiñ dezho o yezh hag o istor. D'al labour eta, paotrad.

Miz Gwengolo 1946

An Tremener

STADELOURIEZH

I

N'em eus ket c'hoant er pennad-mañ muioç'h eget er re all studiadenñif pizh diwarbenn kudennoù a c'houlennfe levrioù evit bezañ meret ervat, nemet reif va ali berr ha fraezh diwarbenn kudennoù o deus dedennet evezh an emsaverion abaoe ugent vloaz : anien ar vroad, star ar vroadelouriezh, darempredoù ar stad hag ar vro, talvoudegezh ar yezh. An nebeut testennoù-se a gavor meret amañ hag ahont ebarzh levrioù R.H. pe V.M., da skouer - pa lavarar meret ahend-all, n'on ket gwall reizh, rak klisiañ an testennoù-se ha n'eo ket o studiañ a-zevri eo o deus graet ar skrivagnerion-se peurliesañ.

Kudenn ar stad a zo sta unan eus ar re o deus teoget ar muiañ spered en emsaverion. R.H. en deus gouestlet ur pennad da zarempredoù ar vroadelezh hag ar stad, hep diogelif netra resis diwar o fenn, prederiet dreistholl, war a seblant, gant m'eo bet dizoloet nevez zo hepken talvoudegezh ar vroadelouriezh e buhez ar stad. Evit M.M., e ouzer ez eus anezhañ un enep-stadelour hag en deus erbedet dreistholl hag a-viskoazh, al labour prevez, giz ar Saozon, an emgenreizh, an "emgandibab" h.a. O daou ahendall a hanval bezañ bet feuket gant re-c'halloud ar stad, ha disfizout awalc'h outaf : ret eo lavarout eo en abeg d'ur stad amañ ken fall an traoù gant Breizh hiziv.

Didalvez eo burutellañ menoz an daou skrivagner-se amañ. Graet e vo en ur pennad all marteze. Displegaf an nebeut abegoù da chom hep bezañ a-enep d'ar stad, hep bezañ stadazeulour, ne vannan ken ober er pennad-mañ.

I I

Roparz Hemon en deus termenet ar stad gant ar ger "galloud"; difazi eo an termenadur, ma soñjer en he ferzh diavaez anatañ, hogen ne ziskuilh ket ar gwir anien anezhi : hounnezh a vefe talvezet kalz gwelloc'h gant ar ger "ken-urzhierozh". Pal ar c'henuzhierozh eo diazezañ kensenterezh hag urzhaz e diabarzh ur gevredigezh e sell kenvad an holl izili anezhi.

Hogen anat eo neuze n'emañ ket kudenn ar stad dres en e anien, hogen kentoc'h e ment he galloud. Rak ne nac'her ket en defe an den ezhomm eus ar stad. Ma kemeromp avat skouer Bro-C'hres kozh ez omp souezhet gant rannet ma oa ar vro ez diret etre stadoù bihan o dije gallet aes en em gevredif evit kenvad an holl geodedourion anezho elec'h brezelif an eil ouzh eben. Koulskoude e vefe diboell re souezhiñ : ur gevredigezh evel ar stad a zo ur boud

bav, dezhi hengounioù m'eo diouto hec'h emdroadur - ha ne c'heller ket terrif aes he c'hresk natur. N'eus ket bet epad pell-tre a grouidigezhioù politikel a-ratozh kaer. Den ne soñje en adaozañ ar gevredigezh hag ar stad en Henamzer, hag ar gristenien ne raent ket zoken. Betek nevez awalc'h zo n'o deus bet ar stadoù da lozenn nemet o mad hag o berzh-int. M'en deus kresket tamm ha tamm ment ar stadoù n'eo ket dre ma soñje ar ronerion anezho e vije se mad an den-elezh hag an dud. N'o deus graet nemet sentif ouzh lozenn ar "stourm evit bevan".

Kreskiñ a zleent, pe vervel. Epad hir amzer n'he deus bevet ar stad nemet eviti hec'h-unan, hep ober forzh eus he finvezh, kollet ganti zoken skiant hec'h anien hag he zalvoudegezh : harpañ an dud ar muiañ ar gwellañ dre he c'henuzh da vezañ tud. N'eo ket hep abeg e krede Platon e oa kelenn kentañ kefri ar stad. Hogen war a hanval, epad peurliesañ an istor eo an termenadur gant R.H. eus ar stad a oa gwir : ren an dud evit o ren, o ren da neb lec'h avat, eo a rae hepken ar stad.

I I I

Ar stad-se eo a c'hellomp envel ar stad rik, an hini na ra nemet wardro derc'hel an urzh, hag a laz ar muiañ a frankiz d'an dud prevez, d'en em genuzhiañ en he diabarzh. N'eo nemet an deiz m'he deus mennet ar stad "kelenn", m'eo deut da vezañ mac'hom, avel m'eo hiziv. Dont a reas neuze da vezañ ur benveg etre daouarn tud a felle dezho adaozañ ar gevredigezh hervez o zregorfoniezh. Bet hon eus evelse ar stadoù katolik ha protestant er XVIvet hag er XVIIvet kantved; stad dispac'h gall 1789; erfin stad komunist Rusia 1917, stad ar vroadelourion iwerzhonet e 1921, h.a.; hiziv an deiz hon eus stad an "Unan ha-dirannus" e Bro-C'hall. Perzh pennañ ar stadoù-se eo bezañ diazezet war bep a vuhezouriezh ha pep a dregorfoniezh disheñvel war ur meizadur dezho o unan eus an den hag eus ar bed.

I V

N'eus netra naturoc'h eget se ahendall; ne c'heller ket ar stad bezañ nep-tu, ha n'heller ket ober anezhi ur gompagnunezh asurasoù hepken, gouest da baeañ kargidi ha da zifenn an dud ouzh al laeron hag ar vuntreion. Evit mad an dud eo graet ar stad; perak herzel outi da reif dezho ar mad groñs nac'hell ket bezañ anavezet hep derc'hel kont eus tregorfoniezh ? N'eus ket ur stad a vefe diazezet startoc'h hiziv war ar reolenn-se eget ar stad komunist e Bro-Rusia, elec'h e c'hourc'hemener d'ar skrivagnerion "kelenn" ar bobl hervez

prederouriezh reizhkredennek Lenin. Ur stad, emskiantek ganti he fal pouez-
usaf - hervez Platon - ne c'hell ket chom hep dont da vezañ hollvac'hom (ma
kav eneberion mennet start, rak n'eus nemet ar re-se a c'heller mac'hañ : ne
wasker ket an dud na reont forzh a-benn ur pennad amzer, evel n'eo darn an
dud). An diskoulm a vefe neuze, da skouer, tremen da hollvad an dud, n'eo
ket ar wirionez kavet, met ar c'hask eun. Kement-se a dalvezfe evit renerion
ur stad, diwar dispac'h avat, arvarifi diwarbenn o gwirionez-i, ar pezh na
c'hellont ket ober. Stourmarion kendrec'het mat avat, prest da en em gannañ
er brezel evit o uhelvannad ne c'hellont ket asantiñ ma vefe lamet o zrec'h
diganto ne vezn pe dre aoz.

V

Dre ma kred re en he gwirionez eta eo e vez degaset ur stad da waskañ
an dud. Anet eo ahendall. Rak-se eo ivez e klask distrujañ an holl zanveziou
stad, kement kenurzhierzh a zo ermaez anezhañ, - evel an Ilizoù, ar stroll-
adoù a bep doare, an arc'hantioù a zalc'h darn eus ar galloud o zlefe bezañ
dezhi - pe ma n'hell ket o distrujañ, e ra he gwellañ evit o sujañ strizh
dezhi; ma asant ar c'hevredigezhioù-se da vezañ kasat da get, ne vo ket re
a reuz. Ahendall e vo brezel diabarzh, gant kement krizder a zeu da heul.
Ar gudenn diaes-mañ eo hon eus da zirouestlafiñ amañ : daoust hag e c'hell ur
wirionez bezañ tra an hinienn hepken. War a seblant, ne c'hell ket alies.

Gwirionez ar c'homunist n'he deus ster nemet ma vez lakaet da dalvezout
war ar bed a-bezh. Hag hor gwirionez -ni emsaverion n'he deus ster nemet ma
c'hellomp he lakaet da dalvezout war bobl Vreizh a-bezh. Se avat ne c'hellomp
ket tizhout hep ar stad. Kaout krog war bobl Vreizh en he fezh a rankomp,
pe neuze n'hor bo da ober nemet dilezel hon ober.

V I

Lavarout e c'heller tizhout ar pal-se hep ar stad a zo sozr'henn hepken.
Tud zo a grad e c'heller adskignañ ar brezhoneg e Breizh hep ar stad. Gwell-
oc'h eo deomp chom hep barn o spered. Un huñvre n'eo ken. Ar pezh a ra pre-
vezidi zoken ne reont nemet dre sevel ur stad e-kreiz ar stad all : rak ken-
urzhierzh eo ar stad ha ne saver netra hep kenurzhierzh. Arabat e vefe
kredif e c'hello padout an div stad-se pell amzer kichen-ha-kichen. Deiz pe
zeiz e ranko unan plegañ d'eben. Gouezomp mat forzh penaos e fell deomp
adaozañ ur gevredigezh, hag ez eo ret deomp implijout ar stad e stumm pe
stumm evit-se. Ma fell deomp chom prevez ha kroaziañ war levezonañ hor pobl

hag he lezel da vont da get evel broad, ne vo ket dav deomp eveljust ober
gant ar stad. Hogen daoust hag en devo hon ober un dalvoudegezh bennak neuze ?

V I I

N'eus ket da gredif ha n'eus ket da hetif kennebeut e taufe endro amzer
ar stad rik na rafe forzh nag eus sevenadurezh nag eus prederouriezh : rak
gwelloc'h eo c'hoazh o re-brizout eget o disprizout; ur stad varc'hadourion
hepken ahendall a rankfe kaout he zregorfoniezh. Gwan e vefe ar stad-se avat
ha ne vefe ket gouest da herzel prevezidi da waskañ prevezidi all : evel ar
gapi-talourion an dud didra (1). Ahendall diwirhefvel eo e c'hellfe seurt stad
nep-tu he frankizour bezañ savet endro. Nevez zo c'hoazh hon eus gwelloc'h
penn kentañ ar c'hantved-mañ stad Vro-C'hall difenn dre gefridi ar pezh a
anve al "Likouriezh" hag a zo ur feiz nac'hus ma kerer, hogen a zo ur feiz
evelato. Evit ma c'hellfe ren ar gendamantiz er stad e vefe ret ma vefe holl-
arvarourion eus an dud ha na gredfent mui en uheltalvoud ebet, nag er reizh-
ded er gevredigezh zoken, da skouer, nag er reizhdad etre ar broadoù. An di-
reizhderioù-se n'eus nemet ar stad a c'hell o c'hompezañ avat.

V I I I

Gouzout a ran - hel lavaret em eus endeo - e c'hell ar stadelouriezh
taerañ bezañ reuzius evit ur vro p'en em gav enni daou zammad dispac'harion
krenn enebet a fell dezho implijout ar stad evit seveniñ o mennad. Neuze eo
ret d'an daou strollad bezañ fur awalc'h evit degemer raolenn ar warinren-
ouriezh ha mont diouz ar brezel. Gwelloc'h e vo dezho klask en em glevout
war poent-pe-boent boutin strezo, maz eus. Ret eo avat e ve youl vat a bep
tu, evit sevel un emglev bennak; dilezel a rankint eta, diouz ret, goulenn
pe c'houlenn. Swir eo n'eo ket an diskoulm-se an hini gwellañ, rak n'eo nemet
un diskoulm da c'hortoz. Hogen marteze eo talvoudec'h hag haoloc'h chom hep
re c'hoantaat an efedif : mont dre hag evit seveniñ ur soñj a gas an den da
goll e skiant ha da wastañ e nerzh en un emgann peuznac'hus ha difrouezh.
Goude holl, gwelloc'h eo kredif e reizhdad hor stourm hag en lealdad hon
eneberion a hiziv.

Miz Here 1946

An Tremener

(1) Gwashoc'h mistri eget ar stad eo ar brevezidi alies. N'eus nemet gwelout penaos
e veze graet ouzh ar vicherourion 100 vloaz zo. Ret eo bet d'ar stad lakaet ar gapi-
talourion da zoujañ un tammig ar re a labourer evito. Hogen anez ar stad o dije ar
brevezidi kendalc'het da waskañ, pe kentoc'h dre ar stad hag ar politikerezh eo deut
a-benn an dud didra da gaout o gwir.

B R O A D E L O U R I E Z H

I

Nevez ha diwezhat awalc'h eo stumm ha meizadur ar vroad evel m'emañt bremañ. E-touez Henamzeriz sevenaet n'anaezed nemet ar goaded, kreizenn ha mamenn ar vuhez politikel kenurzhiet. Ne glask ket Platon gouzout penaos eo diwanet ar "vroad" hogen penaos eo bet ganet ar stad : diaes eo kañveriañ ar goaded-se ouzh ar broadoù a vremañ bihan zoken, ken en abeg da gemm ar vent e zo etrezo ken en abeg d'an diforc'h a zo etre kenurzhiaourioù diabarzh ar c'hevredigezhioù-se; ar sklaved ne gemerent perzh ebet er vuhez politikel, nag estrefjourion zo kennebeut, staliet abaoe pell koulskoude er goaded; un darn vras tre eus ar poblañs a oa ermas eus ar vroad koulz lavaret. Hag heñvel e voe e-keñver-se an impalaeriezh roman daoust dezhi bezañ kenstumm diouzh meur a du gant ar vroad vras, ar falsvroad a vremañ; evelato e oa talvoudegezh ar Gêr dreist da hini an dachenn douar ma reomp anezhi "ar vro" hiziv; ar skrivagner latin-galian Ausonius a fougas da vezañ keodedour eus Bourdel ha Roma, ha n'eo ket eus Gallia pe an impalaeriezh roman. Gwir eo e teued d'ar mare-se ivez da brizout ha da intent ar vro evel ma reomp bremañ : ur skrivagner galian-latin all Sidonius Apollinaris a implij ar ger "patria" evit talvezout gwech Bro Arvernia, gwech an Impalaeriezh hec'h-unan, tra n' an deus ar ger-se peurliesañ en oberoù Ausonius nemet ar ster "kêr c'henidik". Daoust da se ha petra bennak ma c'hourveule skrivagnerion zo eus ar rannvroioù evel Prudentius ha Rutilius Namatianus Roma da vezañ graet ur vroad hepken eus an holl ouennoù he doa trec'het, ret eo anzav ne c'heller ket lakaat ar "Romania" e skoaz hor broadoù-ni; re vras e oa niver ar sklaved, ha divent hini ar poblañs di-wir ha di-vrent na gemere perzh na preder ebet e buhez ar stad. Sioù damheñvel o doa ar broadoù rak-roman keltiek h.a. N'oa gwir unded ebet enno, rannet ma oant etre renkadoù tud re ziforc'h, hag unan eus o sauz-iusañ mank e voe ar gwander-se. Evaljust e c'hellad asurif e oa eus ar vroad-endo : bez e oa eus ar yezh, eus ar sevenadurezh, eus an hengoun politikel, eus an dachenn douar. Hogen n'he doa ket tizhet he stumm nag he ment natur; trec'h d'ar vroad e oa c'hoazh ar ouenn d'ar mare-se, divroadeg ar gouennoù e voe an aloubadegoù bras; ar ouenn n'he deus ket ezhomm eus un dachenn douar evit kenderc'hel da vezañ. Skouer ar Yuzerion hen diskouez anat.

o o o

I I

Epad ar Grenn-Amzer e voe gwashoc'h e meur a lec'h : e Bro-C'hall da skouer elec'h n'oa mui broad ebet koulz lavaret, hogen div ouenn distag mat, dezho pep a lezenn ha pep a wirsouriezh. Ne voe ganet Bro-C'hall nemet d'ar mare maz eas da get an elfenn c'hermanek anni hogen gouzav a reas kalz ar vro edoug pell emzer diouzh he rannidigezh kentañ : un islonk a voe epad meur a gantved etre renkadoù tud ar vro, ha da soñj Voltaire e unan, n'o doa ur vro nemet ar re a biaeou douar. Ar re all ne oant ket eus ar vro. En un doare e voe an dispac'h gall eta ur striv evit ober unded ar vroad en diwez.

Breizhiz er c'hontrol, er penn-kentañ, a oa ur vroad klok kenurzhiet mat; pa zivourzjont e Arvorig e oa embraget start tre o urzhaz; renerion a ouenn ganti he doa ar warin. Hogen diwezhatoc'h, dreistholl goude aloubadegoù an Normaned ez eas an traoù war fallaet : da C'hallaoued ez eas ar vrientinon, torrat e voe unded ar vroad - evel en Iwerzhon maz eas an uhelidi da Saazon, pa ne voze ket kemeret o lec'h gant an drec'hourion. Gwelout a reomp efed an disundad-se bremañ ; warnes mont da get eo Broad Breizh. An tu nemetañ d'he savetañ, eo dres adober an unded, ha reif endro d'ar warin brientinon ha renerion anavezet ganto istor o gouenn hag o tennañ o orin eus ar warin hec'h unan.

N'o deus ar relijion pe ar braderouriezh pouez er vroad nemet ma teuent da vezañ banniel ur renkad tud a c'hoari ar roll brasañ en he buhez. Bretoned zo da vare an dispac'h, bourc'hizion dreistholl, a zo aet da C'hallaoued dre m'o doa kemeret menozioù gall ar gre-se. Epad ar brezel-mañ hon eus gwelet er c'hontrol Gallaoued war-nes mont da Alamand dre ma oant tuet d'o menozioù; kement-se a ziskouez hepken a c'hoanta an den bezañ kenklet en ur gevredigezh a warez e venozioù, ar pezh a zo natur. Reif nerzh d'ur vroad, pe he bliñast a c'hell ur gredenn ober. Hogen nepred ne vo ur gredenn ur vroad.

I I I

Diskouez a ra an istor pegen bresk eo buhez ar broadoù. Bras-tre eo niver ar pobloù hag ar broadoù aet da get, ha koshañ pobloù Europa n'int ket koshoc'h eget 1.500 vloaz. Ganet eo bet an darn vuiañ anezho da vare aloubadegoù ar Varbared, Breizh, Kembre, Lituania, Bro-C'hall, Tchekia, Katalonia, h.a. Reoù anezho avat evel Bro-C'hall, Bro-Saoz, Bro-Spagn, erfin broioù bras pe sañset, Europa ar C'hornog a zo deut da vezañ ken disañvel diouzh pezh e oant, ken ez eo arvarus asurif ez int an hevelep broioù ha gwechall; kreskiañ a c'hell ur vro, hogen ma ra re, eo euzhusaat a ra. Ar Vro-C'hall a vremañ ne

heuilh ket Bro-C'hall an XII pe an XIIvet Kantved. Kemendall a c'hoarvezas gwechall gant ar Roma gozh : n'oa mui keñver abot etre Latium ar Vvet kantved arak H.S. hag impalaeriezh ar Vvet kantved goude H.S. Ar Vro-C'hall a anavezomp a zo bet ganet da vat da goulz an Dispac'h. Gouzout a ran e c'helled diverzout abaoe ur pennad amzer dija graidigezh c'houstat ar vroadelouriezh c'hall nevez. Ur Gall evel La Bruyère a gemmeske ar stad c'hall gant Bro-C'hall. Hogen ur Provansiad evel Vauvenargue a rae "ma Patrie" eus Bro Brovans en XVIIvet kantved hag ar ger "Patriote" e unan a implijas de Saint-Simon da vat evit ar wech kentañ e derou an hevelep kantved. Goude ma voe krouet ar "Vroad" c'hall e 1789 e teuas Bro-C'hall da gouezhañ e dalc'h Impalaerourion, hag evel Roma he deus klasket, hag e klask c'hoazh bremañ en em vogañ hag en em vezañ gant korfoù marv, ha peurgetket hini Breizh. Re lonkañ a noazh avat, ha mervet eo Austria gouz dicuzh seurt boued.

I V

Ur c'hemm a zo eta etre ar broadoù kozh - ouzhpenn 1500 vloaz o deus an darn vuiañ anezho - evel Kembre, Breizh, Iwerzhon, h.a. - hag ar broadoù nevez evel Bro-C'hall, Bro-Saoz ha dreistholl Bro-Alamagn ha Bro Italia n'o deus heuliet skouer ar re-mañ nemet etre 1870; war-raok ha war-gresk ez a dalc'hmat ar broadoù nevez-se, ha ret eo anzav o deus leñs war ar re gontañ. En em astennet int evel krignoù diwar goust broadoù o deus lazhet pe danvez broadoù o deus mouget. Hag e gwirionez ne gav ket din e vefe ken klodus-se o istor rak n'eo gwiet nemet gant torfedoù politikerezh. Ouzhpenn o enor o deus kolllet ahendall, o gouenn ivez o deus ranket diouerifañ : darev eo ar C'hallaoued hiziv da ober "Gallaoued" all, braudeur dezho, eus an holl estrenion a zo deut da chom en o bro, hag o deus kavet labour enni, eus an holl drevedennidi m'o deus alcubet ar broioù anezho, du pe wenn pe velen. Rak, soñjal a re dezho evel m'em eus merket e lec'h all, e vint seul uheloc'h ha seul ouestoc'h ha seul ampartoc'h ma vo muic'h anezho. "Follentezh ar veurded" eo diazez brogarouriezh ar broadoù nevez.

V

N'eus ket nemet al lorc'h klenvedel se da vezañ merk anat broadelouriezh ar stadoù bras : unan eus he merkoù all eo ar gasoni. Peogwir emaint atav e soñj tagañ pe dindan eon bezañ taget e fell dezho derc'hel o c'heodedourion e ratre mat, korf hag ene, d'ober brezel; kent deskiñ lazhañ avat e ranker deskiñ kasaat. Soñj hoc'h eus eus bruderezhioù ar broadoù bras e-pad ar brezel-

mañ, eus an dud, en daou du, oc'h euvriñ komzoù ar radio a brezega ar gasoni sakr dezho, laouen holl o c'houzout euzhusterioù ha torfedoù o enebourion, surc'h ma gant ne oa ket tud anezho, hag e c'hellfent o lazhadegañ gant reizh ha bennozh Doue warno. Ha pa n'oa ket a-walc'h eus ar wirionez evit atizañ an "tan sakr-se", e c'houlenned sikour digant ar gaou. Rak ar gaou ivez eo en deus startaet "emskiant" ar vroad vras ; penaos krouif ahendall ar c'henasant hag a zo, gouez d'ar farouell Renan, arouez anaout ar vroad ? Daoust ha n'eo ket dre ar gaou skignet gant he skolioù hollc'halloudus he deus lakaet Bro-C'hall Okkitaniz ha kalz Bretoned da gredif e oa Gallaoued anezho ? Fazi ar C'hallaoued avat, faltaziañ e kenvez dalbec'h ar vuhez gant an emskiant.

V I

Arvarus ha gwall-arouezius eo evelato evit ur vroad koll hec'h emskiant ha rak-se e argasomp an holl vroadoù bras pere bennak e vent; n'eo ket dre maz int falsvroadoù dreistholl, rak siwazh merkoù ar vroad eo deut da gaout ar broadoù bras, hag an emskiant vroadel peurgetket; hogen dre maz int euzh-vroadoù i eo o deus degaset ar vuiañ reuz d'hor bed-ni. E vrainet hag a wastet o deus gant o c'hoantegezhioù diraizh. Hag, hel lavarout a ran e lec'h all, o finvidigezh eo a zo abeg d'ar brezelioù spouronus o deus drastet Europa hag Asia a-c'houde 1900. Skouer ar vroad a chom evidomp broioù evel Norvegia, pe Vro-Sveden, pe an Danmark, pe Iwerzhon, na vevont nemet evit mad o zud hag avit ar sevenadurezh : rak seul vui a sevenadurioù bihan krouet gant broadoù bihan dister o foblañs a vo, seul walloc'h e vo ar bed gant an denslezh. Ne dalv ket addisplegañ amañ arguzennoù Meven Mordiern a-du gant ar broadoù bihan, merkañ a ranker, avat, pezh na ra ket Meven Mordiern, e tle ar broadoù-se kaout ur spered broadel yac'h ma fell dezho mogañ ur sevenadur talvoudus; n'eus sevenadur ebet hep pobl, ha pobl ebet hep broadelouriezh e ster kentañ ar ger. Ma kollfe Breizh da vat ha da viken hec'h emskiant vroadel - broadelourion vreizhat eo ar re a glask hec'h adenaouiñ - e kollfe ivez he sevenadur ha klask a renkfe neuze ar gouloù e Paris, pe e lec'h all : mervel a refe neuze ha ne vefe mui anezhi. Hogen kollus evit ar bed e vefe he marv ivez, rak e baouraat a refe : pep a ziskuliadur ha pep a c'halvedigezh o deus ar pobloù ha n'o deus ket ar gwir d'o dinac'haf egiz ma karont.

o o o

V I I

N'hon eus ket c'hoant evit liesaat ar sevenadurioù adsevel broadoù marv bramañ marteze evel re Okkrania, ha kredif a reomp e vefe artifisiel rannañ Bro Alamagn endro : mat eo a-dra-sur kinnig ar gevredadelouriezh evit ar vro-se, ne c'houlennomp ket muioc'h, hogen gwelloc'h e vefe c'hoazh he lakaat da dalvezout e Bro-C'hall. Hetañ a reomp evel just e taufe da wir mennad kevredadelourion an euzhvroadoù-se, rak o tisteraat nerzh ar stadoù bras kreiz-ennet e roint war un dro muioc'h a zieubiezh d'an hinienn hag e pellaint diouzhip gwalenn an naziouriezh zo klevet dihebare an euzhvroadoù (n'eo ket an Alamaned o deus ijinet an naziouriezh). Hogen bez e fell deomp forzh penaos mirout bev hor broad-ni, rak n'eo ket marv c'hoazh. Klafv eo, gwir eo, hag hor sevenadur n'eo c'hoazh nemet ur groueall koulz lavaret; hogen den n'en deus ar gwir da lazhañ ur c'hlaflavour dre m'eo dinerzh nag ur groueall dre n'he deus ket bev c'hoazh. Boudoù bev evel an dud, "personed", eo avat ar broadoù, hervez an istorour gall, Michelet, e-unan, hag un torfed eo o lazhañ. C'hoazh e c'hellfed kompren disfiziañs Bro-C'hall ma vefe bezañs ur vroad vreizhat un danjer eviti evel er Grenn-Amzer, en amzer ar stourm evit bevañ. Hogen n'eus ket mui kont eus kement-se hiziv en amzer ar vombezenn elvtarzhus. Pe daoust hag he defe Bro-C'hall ar gwir da sujañ Breizh dre m'eo talvoudus dezhi d'en em zifenn ? Neuze avat e vefe dav digarezif Bro-Alamagn da vezañ aloubet Bro-Tchekia dre m'oa ret dezhi he ferc'hennañ evit en em wreziañ. N'eo ket Bro-C'hall avat evit meizañ mat spered-hor brogarouriezh; rak ma vefe gallus deomp zoken dont da vezañ ur "vroad vras", e nac'hfemp. Stag eo hor broad ouzh ledenez an Arvorig, ha ma kemmeskfemp poblañsoù estren gant hor pobl ez afe hor gouenn da get. Ar yezh ne dalvezfe da netra en afer-se. Ne gredan ket e vefe ar Stadoù Unanet ur Vro-Saoz nevez.

V I I I

Diaesoc'h eo a-dra-sur lakaat ur bobl da zegemer ur vroadelouriezh a seurt gant hon hini eget an impalaerelouriezh hag a zo diazezet war sioù kreñv Mabden, al lorc'h hag ar gasoni. Ne ra forzh an dud eus ar sevenadurezh peurliesañ, ha dibañ-tre eo ar C'hallaoued a zo en em gannet eviti er brezel-mañ (er-maez eus ar re a zo marvet evit ar gomunistiezh hapken); darn vuiañ eus an dud a oa a-enep d'an Alamaned ne oant nemet dre m'o doa aon rak ur sklavelezh vateriel, (ha war ho-mañ dreistholl e poueze bruderezh ar skingomz saoz), n'eo ket dre m'o doa aon rak koll o yezh pe o sevenadur. Klevet em eus nouspet tud eus ar bobl c'hall o lavarout din e vijent aet a-walc'h da Alamand ma vijent bet sur da gaout gwarioù kevatal da re ar geodedourion aleman

all. Dres goude drouziwezh 1940 e ris anaoudegezh gant ur skolaer eus Hanternoz Bro-C'hall; deut e oamp da gomz eus an darvoudoù ha pa oa bet kemennet nevez oa e vije graet ur rannvroad ispisial eus departamantoù an Hanternoz e tisklerias din e tistroje d'e vro evelato. "Gwazh a se ma teuan da vezañ alaman" emezañ, "deskiñ a rin an alamaneg d'ar vugale, setu holl". Mat eo menegif ne oa spi ebet d'ar C'hallaoued er mare-se. N'eus forzh: sebezus eo pegen aes e c'halle ar gall-se daoust dezhañ bezañ tremenet dre skolioù ar stad c'hall e-pad keit amzer dilezel e vroadelezh en un taol. Arabat bezañ sabatuet eta kennebeut m'o deus diegi c'hoazh ar Vretoned d'hon heuliañ da stourm evit sevenadur o bro, pan n'int ket bet lakaet c'hoazh en un doare anat da grevif gant an naon gant ar C'hallaoued. Hogen daoust da se e tleomp mirout hor broadelouriezh, rak enni emañ haalded hor stourm, ha kroaziañ warni a vefe trañsañ hor galvedigezh ha galvedigezh hor bro; n'eo ket deskiñ d'hor c'henvroiz ar gasoni ouzh ur vro bennak evel ma ra ar C'hallaoued e tleomp ober, hogen deskiñ dezho karout o bro ha netra ken. Sur on hor selaouint en diwezh.

Miz Du 1946

An Tremener

N I H A B R O - C ' H A L L

I

Diaes ha danjerus marteze eo merat kudenn hon darempredoù gant Bro-C'hall hag ar stad c'hall. Koulskoude e kav din eo un dra ret sklaeraat da vat an tamalloù a reomp d'ar vro a añver Bro-C'hall ha d'ar c'henurzh-ierezh a añver stad c'hall. Eus ar goulou e teu ar c'homprenerezh hag eus ar c'homprenerezh an emglev en diwezh. Rak-se e kavan mat displegañ ar barrañ ma vo gallet abegoù hon droukrañs ouzh Bro-C'hall.

Sofjet em boa da gentañ ober ur c'hemm etre Bro-C'hall hag ar stad c'hall. Hogen un den am lakaas da verkañ eo ar C'hallaoued goude holl ar re o deus empennet ha savet ar stad c'hall. Ne c'hellen ket lavarout ar c'hontrol. Hag e gwirionez, hiziv en deiz eo rouez meurbet ar C'hallaoued a zo gouest da verzout er stad c'hall ar mankoù hag an nammoù a verzomp-ni hon unan. An hevelep maizadur eus o bro o deus an holl C'hallaoued - nemet un nebeut re evel Phileas Lebasque da skouer - hag ar maizadur-se eo da gentañ a gas hor bro d'ar marv. En em c'houlennet on meur a wech ha kiriek e oa ar C'hallaoued; en diwezh ne gredan ket : kaset int bet endro gant ur froudad menozioù a zo en em fennet d'an hevelep mare e Bro-Spagn ha Bro-Saoz ha diwezhatoc'h e Bro-Italia hag e Bro-Alamagn : klevet an unvanif hag an Impalaerialouriezh. Tizhet int bet arak ar re all. Setu holl.

I I

Koulskoude n'eus nemet ar ger torfed a c'hell doareañ ervat efedoù kelennadurezh a-berzh-stad an unvanif a zo bet degemeret gant Bro-C'hall kerkoulz ha gant Bro-Spagn ha broioù bras all ar C'hornog. Rak en anv an unvanouriezh-se, hag abalamour da spez er veurded - talvoudegezh ur c'heod-edour a zo diouzh niver e genvroiz, ha braster ha pinvidigezh e vro ! - ez eus bet klesket lazhañ broadoù bihan o doa ar gwir da vevañ kement hag ar re vras. Falloni un torfed n'eo ket diouzh an doare ma vez sevenet, pe nebeut; ne laz ket amañ e kasfed ur vro da get dre al lazhadegañ pe an hevelebeakaat : hevel eo. Lavarit din peseurt kemm a zo etre lazhañ un den dre e goñtellañ pe dre e varnaoniañ ? N'eus ket, d'am soñj. Heugusoc'h, ha, siwazh, ampartoc'h eo doare ober Bro-C'hall amañ eget hini Bro-Alamagn, da skouer, e Bro-Bolagn pe ellec'h all : teogif Breizh he deus graet Bro-C'hall, ha gounit warni en em lazhañ hec'h unan. Bro-C'hall he deus krouet - kaeret

penn-oberenn - an euzh-Vreizhiz-sè, na anavezont ger eus istor o bro, a zispriiz anezhañ, a zizesk o yezh gant gred, hag a gasa anezhi zoken, a heug ouzh kement perzh pobl o deus c'hoazh ha na vennont ket reif degemer d'o brogarourion. Labour ar C'hallaoued eo he deus graet an euzhtud-se; en o skolioù, en o c'hezarnioù, - gant o arc'hantourion, gant o c'hargidi, gant o c'helaouennourion, int bet strilhet ha stummet. Arabat kontañ daomp n'eo ket a-ratozh e ra ar C'hallaoued an torfed-se. Komzoù Doumergue e 1909 ha re de Monzie e 1922 a ziskouez deomp ar c'hontrol. Ne reont forzh eus Breizh, rak gouzout a reont eo ni Breizh, hag ez omp distank, ha gwan, tra m'o deus polised ha spierion diniver evit hor bac'hañ, hor bourrieriañ hag hol lazhañ diouzh ret. En o ziez-bac'h emañ o gwir, hag en o'barneriezh" o reizhdad !

I I I

Penaos souezhif eta mar deo darev stourmerion zo da ziskiantif, pa welont ne vez ket roet zoken un eurvezh bep sizhun d'hor yezh e skolioù hor bro ! Ha n'eus ket nemet an droug graet da ene hor bro - daoust maz eo hennezh an hini pennañ - a c'hell o lakaat da c'hlaac'hariñ ha da gounnarif. Ar gwall graet d'he c'horf a zo ker gwazh. Piv a zaskoro daomp ar c'hantmiliadoù a Vreizhiz kouezhet e brezelioù ar c'hanvet-mañ, aberzhet ouzh aoter an Idol ? Gant arc'hant piv e vo adsavet hor c'herioù distrujet ha devet ? Setu darn eus ar priz hon eus paeet betek bremañ eus hor "c'heodedouriezh c'hall". Bravat brent an hini a zo bet roet daomp gant ar C'hallaoued ! Ne gas nemet d'ar marv ha d'an distruj. Ne gomzan ket eus hon ijinerezh haudet, pe kouezhet etre krabanoù kapitalourion estren, eus hor c'henwerzh hualet gant lezennoù diboañ; n'eo ket evidomp eo graet eveljust ar maltouterezh, evit stad Vro-C'hall eo, ha, war a lavar daomp "rannvroelourion vat" zo, e paeomp div wech muicoc'h a dailhoù eget ar geodedourion c'hall voutin. Un dra a zo, avat, hag e tisoñje ar "rannvroelourion" hel lavarout, eo n'hon eus ar gwir da glemm nemet dre maz eo Breizh ur bobl, hag he deus ar bobl-se ar gwir d'en em gaozañ e sell eus he mad hepken. Ma ne vijemp ket Breizhiz, ma ne vije ket Breizh ur vroad, n'hor bije nemet serrif hor genou. Ar pezh n'eus ket anezhañ n'en deus gwir ebet.

I V

Si brasañ Bro-C'hall, ez anat, eo bezañ ur vro a zo bet savet a-drugarez da dorfedoù brezel digastiz c'hoazh hiziv. A-dre-sur n'eus ket nemeti a zo bet graet evelse : Bro-Saoz ha Bro-Spagn o deus implijet an hevelep doareoù

ober evel m'hon eus diskleriet uhelloc'h. Hogen Bro-C'hall eo marteze an hini he deus skoueriet ar re all, hag he deus graet ar muiañ implij eus politikerezh an nerzh hag ar gaou. Mat-tre e oa krougañ an Nazied abalamour da vezañ graet gant ar politikerezh-se, ha reizh eo ar reolenn a varn d'ar marv tud o deus miret lezennoù o bro, pa oant fall. Displijout a ra deomp avat e vefe bet kendaonet an dorfadourion vrezel-se gant tud a gehel o unan an dorfadourion vrezel o deus graet unded ha meurded o bro; daoust ha ne vez ket desket d'ar C'hallaoued vihan azeuliñ Loeiz XIV ha Napoleon I ? Daoust ha ne vez ket savet delwannoù dezho o pep lec'h ? Daoust ha ne saver ket levrioù evit o meuliñ ? Hogen Loeiz XIV eo an den a lakaas krougeñ 25.000 eus hor c'hourion, ha Napoleon eo ar gall kentañ a gasas Breizhiz d'ar brezel evit Meurded Vro-C'hall. Gouelioù zo bet graet evit lidañ IVvet kantved ha bloaz eus hor sujidigezh d'ar stad c'hall. Hogen daoust ha n'eo ket deut ar sujidigezh-se da haul torfedoù politikel egiz ar re a zo bet kastizet nevez 'zo; ur brezel mennet ha ragaonet a-ball-zo a-benn sklavaat ur vroad all. Gwir eo ez eus ur c'hamm bras etre torfedoù politikerezh ha brezel ar C'hallaoued ha re an Alamaned; torfedoù brezel an Alamaned a ras droug da Vro-C'hall, tra ma n'o deus graet torfedoù brezel ar C'hallaoued nemet vad dezhi, eveljust ! Hag an idol leun-wad-se eo e c'hourc'hemnener deomp azeuliñ war hon daoulin noazh.

V

N'eus netra sakr eta e Bro-C'hall; graet eo bet Bro-C'hall gant tud, hag he distrujañ a c'hell an dud ober. Marteze eo bet skedusoc'h berzh ar sevenadur gall en abeg da verzh ar stad. An dra-se a c'hell bezañ. Hogen an eil ne zigerez ket egile. Ar gwir da vevañ he doa Bro-C'hall; hogen n'oa ket dleet dezhi evit se mac'hañ ha kas da get broadoù all. He damzidamall a ranker gwir eo, peogwir n'he deus graet oc'h astenn he beli e kement lec'h ma c'helle nemet heuliañ lezenn "ar stoum evit bevañ" hon eus menaget diagent ("buhez-aged" en un doare eo ar broadoù) hag an torfedoù he deus graet n'int ket gwashoc'h eget ar re sevenet gant broadoù all d'an hevelep poent. Ar pezh a fell deomp merkaf spis avat eo n'hon eus ket muioch a zoujañs outi evel broad eget ouzh n'eus forzh pe vroad veur, pe sañset; rak ar stadoù bras, ar falsvroadoù, a chom avidomp an droug gwashañ e bed ar politikerezh, ha kredif a reomp eo ar walenn-se a zo penn-giriek d'ar reuz divant a zo kouezhet war choug Europa abaoe an azginivelezh. An impalaerelouriezh eo he deus krouet ar falsvroadoù, hag ar falsvroadoù-se eo o deus ganet ar brezelioù drastus divuzul hon eus anavezet e lodenn gentañ an XXvet kantved; ar binvidigezh skrapet ganto n'he deus talvezet nemet da gennerc'hiñ binvioù lazhadegañ bra-

ouac'hus evel ar vombezenn elvdarzhus. Unvanif ar bed eo a vened, hogen e zistrujañ eo a raor en diwezh ha ne c'hellomp ket chom hep gouzout ez eo bet Bro-C'hall unan eus ar re he deus darbarat deomp ar bed modern. Lod a zaolo ouzhin ez oa ret ma ve savet "broadoù bras" kreizannet ha kan-urzhiat start evit ma vefe krouet ar sevenadur materiel burzhudus a anavezomp. Hogen daoust hag ur vad e pep kañver eo bet ar sevenadur-se d'ho sañj ? Evidon-me ne greden ket.

V I

Koulskoude eo ret deomp kemer ar stad c'hall evel m'emañ, hag ober gentañ psogwir n'hon eus framm kevredigezhel all ebet. Rak-se e tegemeromp - da c'hortoz m'hor bo hor framm-ni - ober gant ur benveg fall hogen na c'hallomp ket diouerif : peasañ a reomp an truachou ha mirout a reomp ar reoliadurioù savet gant ar stad c'hall. Ne c'heller ket lavarout ez omp ni broadalourion kaodedourion c'hall fall, rak dere'hal a reomp d'an urzh c'hall. Ne zalc'homp dezhi, ez anat, nemet kement ha ma zo tro deomp da labourat da sevel dindan al lezenn ar goudor hag ar stern politikel a roio tu da Vreizh da badout. An Urzh a zoujomp er stad c'hall, ha doujañ a reomp an Urzh nemet dre na c'heller sevel netra a zevri hepti. Hogen evit an urzh-se (hag a zo fall a meur a gefver) n'hon eus karantez ebet. Bez' e c'hellfe mont da get hep m'hor befe kerse dezhi. Hag en diwezh ne blegomp dezhi nemet evit he reizhañ, pe ez resisoc'h, lakaat un all en he lec'h. Ouzh Bro-C'hall hec'h unan hag he fobl - bremañ zoken - n'hon eus kasoni ebet. Gouzout a reomp e rankint deiz pe zeiz reif hor goulennoù deomp. Ha sur omp n'hor bo mui abeg ebet da virout hon droukrañs hag hon disfiziañs outi en deiz ma vo bet dieubet diouzh tarzhienn lorc'hus an impalaerelouriezh ha distrobinellet diouzh brizhengouen ar Romaned, en ur ger berr p'he devo perc'hennet endro ar spered he doa e penn kentañ ar Grenn-Amzer, pe en amzer Loeiz IX a nac'he stagañ ouzh e rouantelezh broioù pe zannvroioù na oant ket dezhi. Neuze e vo deut da vezañ endro dre ar galon da vihanañ ur vro vihan di-rec'hoant ha bez' e c'hellimp aes en em glevout ganti (1).

Miz Kerzu 1946

An Tremener

(1) Komz a reer eus pilpousezh ar C'hallaoued ha gwir eo ez eus anazhañ : gwaskañ a reont ur vroad vihan, ha bez' e fell dezho bezañ maulet avalato. Hogen gwelloc'h eo c'hoazh ar pilpousezh a zo un hual evito eget ur gwaskerezh noazh evel hini pobloù zo. Rak en abeg d'eo aon rak ar brud eo n'omp ket bet mac'het muioch eget n'omp bet warlerc'h ar brezel-mañ.

P E D C ' H E L O U R I E Z H

I

Gouzout a reer eo ar beoc'helouriezh kelennadurezh anzavet renerion S.B.K. abaoe kendalc'h Abartawe e 1938. Embann a rajont neuze na zegemerent ar brezel e nep doare ha na felle ket dezho zoken ober gant an armoù evit dieubif o bro. Ur fazi a rafed ahendall o kredif eo bet mouezhiet goulenn peoc'helourion ar strollad-se gant an holl gendalc'hidi gwitibunan. Chomet eo kreñv war stourmerion ordinal ar strollad levezon skouer Iwerzhoniz. Ha nevez zo c'hoazh e skrive ar Pastor Euros Bowen en ul lizher d'Y ddraig goch" e kave fall dalc'hmat e virfe ar strollad ar beoc'helouriezh en e brederouriezh politikel. "N'eo ket dre ma kav din e rankomp adal bramañ deskif embreger armoù" emezañ "hogen dre ma kredan e vez distanet gant hevelep kelennadurezh gred ar stourmerion". En ur ger, ur gwir na c'heller ket goulenn dre hag diouzh ezhomn n'eo ket ur gwir. Araok stourm da vat evit ur gwir, e ranker diarvarif diwarbenn e reizhded.

Komunisted ar strollad - pe ez resisoc'h eus an emsav broadel, rak un nebeut anezho a zo - a asur, evel Cyril P. Cule en ur pennad embannet war Y. Llenor 1945, na dalveze divizadur 1938 nemet anzav n'o ket gouest ar vroadelourion da ober gant armoù da sevenif o soñj. Netra ken. Digarez hep-ken oa an arguzenn a vuhezouriezh implijet gant ar beoc'helourion evit diskleriañ o mennad. Anaf eo na nac'h emsav ebet ober gant un tu a roio ez sur an trec'h dezhañ. Ar wirionez-mañ eo en doa merzet Cyril P. Cule : tizhout ur pal "ymarferol" "poblek" dreistholl eo a felle da renerion ar strollad. Merzet o doa e oa ar brezel o tont. En ur ober peoc'helourion a c'houez d' an holl eus stourmerion o strollad e roent tro dezho da vont diouzh ar servij soudard. Rak e Breizh-Veur ne vez ket kaset dre hag a-grann an dud d'ar brezel. Pezh a oa divat en afer-se eo na nac'he ket Kembreiz mont d'ar brezel evel broadelourion hogen evel peoc'helourion. Hag evel-se e voe graet kalz nebeutoc'h a vrud endro d'ar menoz broadel eget na vije bet dleet ober e-keñver se egiz ma verke dres ar Pastor Euros Bowen en e bennad. E gwirionez e voe kavet tud evelato evit nac'hañ mont da soudarded saoz en abeg d'o broadelezh ha netra ken, evel ar c'helenner J.E. Daniel a anzave dirak e varnerion e oa prest d'en em gannañ evit e vro diouzh ret - e 1943 - hogen a zisklerie ouzhpenn na c'helle ket kemer perzh en ur brezel saoz. Roet e voe e c'houlenn d'ar c'helenner abenn an eil gwech. Hogen ne voe ket niverus ar re a reas eveltañ, ha ret eo lavarout e oa arverus a-walc'h, rak n'eo ket ar vroadelouriezh kembrest degemeret muic'h gant ar Saozon eget ar vroadelouriezh vreizhat gant ar C'hallaoued.

I I

E Breizh n'eus ket a wir beoc'helourion, dre reolenn, evel e Kembre; hag ar re a zo a-enep d'ar brezel du-mañ ne dint nemet evit abegoù a aessed; dic'hallus eo ha na dalveze da netra. Ahendall ne bouez ket warnomp al levezonioù protestant o deus stummet speredegzh kalz stourmerion gembrest; meulif ar brezel eo a zo bet graet, kentoc'h, e Breizh, ha n'eo tenn meizañ perak : n'eo ket bet ganet ha n'en deus ket kresket an emsav en hor bro e degouezhioù heñvel ouzh re hini Kembre : emzoug ar gouarnament gall a nac'h ouzhipp pep goulenn reizh ha didaer, hag en deus heskinet a viskoazh ar stourmerion eo en deus lekaet da ziwanaf ar stad spered enep-pellañ-se. Frouezh an dic'hoanag eo ar brezel alies, an tu diwezhañ d'ober berzh p'o deus c'hwitat ar re all, un anzavadur eus gwended un emsav, hag eus dispi e stourmerion. N'eo ket kement-se ur reolenn nag ur sturvenoz peurliesañ (nemet evit tud evel M. Piarais a ziazeze e veizadur eus ar brezel war soñj kristen an emaberzh). E Breizh eta eo bet krouet an enep-pallouriezh vreizhat gant enep-pallouriezh ar gouarnament gall, ha da gredif ez eus e padint keit-ha-keit o div. Ma n'eo ket tust stourmerion Gembre da ober gant an nerzh eo dreistholl dre ma c'hellont labourat e peoc'h, dre n'int ket gwasket gant an diouer a amzer eveladomp-ni a garfe saveteif pep tra arak ma vefe kollet pep tra. Rak gant kelennadurezh ar c'hembraeg er skolioù e c'hell ar stourmerion gembrest gortoz; ne gilo ket ar yezh etouez tud ar werin en un taol, evel m'eo c'hoarvezet e Bro-Iwerzhon, hag evel ma c'hoarvezo marteze e Breizh, ha forzh penaos e chomo bav buhezak etouez un dibab a dud a c'helle diwezhatoc'h adskignañ o yezh er vro dioub ha dizalc'h. Pep bloaz e dreñmen e Breizh avat a lake diasuroc'h dazont ar yezh; penaos souzhiñ e vefe droukhalet tud zo en hor mesk da gemer an hent berraf da saveteif ar vro, d'o soñj da nebeutañ, ar brezel ?

I I I

Ouzhpenn an di-emvestroni diwar dic'hoanag hag ouzhpenn an aon na ve re ziwezhat a zo abeg d'ar stourmerion da asantiñ d'ar brezel ha d'e wal-ennob ! Bez' e ouzont da gentañ e c'heller ez reizh goulenn pep gwir dre hag hag ez eo distroc'h droug evit ur vro ar brezel eget ar sklavelezh. D'an eil n'eo ener marse ur brezel, zoken pan eo kollet : doujañ a reer gwir an dud gouest da verzvel evitañ, ha siwazh ! skouer Iwerzhon hag ar Vietnam, nevez zo a gadarnafe ar soñj-se kentoc'h, war a sablant. Er brezel bruderezh graet gant ur vro vihan e c'heller tennañ mad diouzh traoù all : sazeuziñ a ra tud ar werin an harozed, hag en o spered e vo dreist atav an hini en em

gann evit e uhelvennad d'ar gopriad bourrevier ha flatrer. Erfin kemmeskañ a ranko an enebour deziz pe zeiz ar werin gant ar stourmerion, ha dre se en em zivrado a-grann en he sell. Met eo merkañ eo seurt poellatadennoù ha seurt arguzennoù a veze implijet gant ar resistanserion epad ar brezel-mañ. Ne dalv ket ez int gwelloc'h na reishoc'h evit se.

Ahendall ez eus c'hoazh ur c'hraf a dalv d'ar vroadelourion a-du gant ar brezel : gwelloc'h eo d'ur vro gouzafv ur brezel bihan evel hini Iwerzhon eget unan a seurt gant an daou re he deus anduret Breizh er c'hantved-mañ; hag asurif a c'haller zoken e vefe kant gwech gwashoc'h ur brezel gant bombezennoù elvtarzhuz egiz ma vo an hini kentañ. Sklaer eo neuze e vefe un dlead evit ar vrogerourion en em aberzhiñ evit mirout ouzh seurt gwalenn da gouezhañ war Vreizh. Gwelloc'h e vefe da vil den mervel eget d'ar vroad a-bezh mont da get korf hag ene. Chin e oa Bleimor o nac'hañ ar gwir d'ar vrogerourion da vervel evit o bro hag oc'h asantiñ goude-se da varv kantmil-iadoù eus e genvroiz evit an estren.

I V

Ha koulskoude a kredan e tleer diberdifiñ ar brezel, ha dres dre m'eo da gentañ evit ar re a zo a-du gentañ un doare bruderezh - rak tu a zo atav da zrac'hiñ ur vro vihan - ha dre maz eus bruderezhioù all ken mat, digoust-usoc'h atav hag efedusoc'h alies. Gwir eo e tleomp mirout ur spered harozerozh ha bezañ darev da c'houzafv n'eus forzh petra evit Breizh; ma kollfemp hor gred e kollfemp pep tra. Hogen - an holl her goar - n'eo ket harozed hepken a ra ar brezel, tud laosk a ra ivez, ha gwashoc'h, tud kriiz ha dizenel. N'eus ket ezhomm ahendall da vurutellañ ar brezel; graet eo bet kant gwech dija. Aesoc'h e vefe kouezhañ en digenveizañ ouzh hen mañliñ. Hogen perzhioù ar soudard meulet gant tud zo a c'hell kaout stourmerion mennet diblegus ha peoc'hkar koulskoude. Me gred zoken e ranker kaout muioc'h a nerzh kalon evit padout ouzh an heskinerezh hep koll mestroni warnañ an unan, eget evit lazhañ enebourion; muioc'h a reas Mac Swiney evit e vro oc'h asantiñ da vervel eviti hep muiken eget re all oc'h en em gannañ, ha ma tleomp heuliañ ur skouer, gwelloc'h eo deomp dilenn hini Mac Swiney eget hini Dan Breen.

Abegoù ispisial em eus ivez da gavout fall ar "spered soudard" ma vour stourmerion yaouank zo ouzh hen magañ enno. Broudañ un hufvze ha mersofjal ne reont ken alies. Anavezet em eus paotred yaouank zo a zisklerie grofs e felle dezho en em gannañ evit Breizh hag a oa re lezirek evit dispign un devezh da werzhañ keleouennoù pe levrioù. An hevelep re a veze digalonkaet net pa vezent degemeret fall en ur vouc'h elac'h e oant deut d'ober bruderezh; soudarded iskis na oant ket evit gouzafv ur c'hoapadenn, hag a felle

dezho deaef ar marv. Anzav a ran n'oant ket holl hefvel ouzh ar re-se. Hogen en despat da bep tra ne blij ket din gwelout tud o c'hoari gant ar marv hag oc'h ober anezhañ un danvez bruderezh hepken.

V

Dre ma kredomp ivez e reizhded hor stourm eo ne fell ket deomp ober gant an nerzh. Diarvar eo ez eo splann awalc'h kudenn Vreizh evit ma vefe maizet peseurt diskoulm a ranker reif dezhi gant an neb en devo prederiet un tammig diwar he fann. Diskredif war vadelezh hor stourm pe war saunded darn vuiañ an dud a rankfemp ober ma n'hor befe ket mui spi er bruderezh boutin evit kendrec'hiñ hor c'henvroiz. En abeg na fall ket deomp kennebeut koll tud priziuz eo na c'hellomp lakaat war var o buhez hep gwir ezhomm ebet. Reizh eo estlammif ouzh kalonegezh paotred emsavadeg fask 1916; hogen ankounac'haat a reomp ivez peseurt gwall-goll e voe evit Iwerzhon marv lod vuiañ eus he fennnerion. Ma voe diaes d'ar vro-se yac'haat warlerc'h he dishualidigezh eo dre 'n arbenn ma vanke dezhi ar vlenerion akuit, uhelsperedel, ha gant skiant prenet he doa dioueret e 1916. Kement-se a zle bezañ ur gentel evidomp. Follentezh eo ne vern panas ar brezel, rak ne gemm netra er c'hudennoù a zleer diluziañ. E gwirionez e kredan ez eus tu - ma asant ar C'hallaoued d'hol lezel da stourm evit hor bro hervez reolenn ar werinrenouriezh ha da reif hor goulennoù tamm-ha-tamm deomp - da saveteif Breizh an un doare fur ha poellek⁽¹⁾.

V I

Ar beoc'helcuriezh a zleomp kemer eta, n'eo ket evel prederouriezh, rak ne gredan ket e c'hellor distrujañ ar brezel diouzhtu, ha n'ouzon ket zoken hag hen distrujañ a c'hellor biken, rak kemm a rankfemp evit-se spered Mab-den, - hogen evel stumm spered; bez a tleomp deskif an habaskif hag an emvastroniañ dirak an heskinerezh zoken. Ret eo deomp bezañ uheloc'h hag haeloc'h eget hon enebourion - pe neuze, keer hor befe o zrac'hiñ na vefemp ket droist dezho, ha ne zellezfemp ket muioc'h egeto ran pobl Vreizh. Met eo soñjal marteze e skouer ar gristonion gentañ, "dispac'herion" heskinet eveldeomp; dre o nerzh kalon, ha n'eo ket dre nerzh an armoù o deus eilpennet ar bed. Evalto kredomp awalc'h en hor gwir evit herzel ouzh temptadur an nerzh.

Miz Du 1946
An Tremenez

(1) Anet eo n'hon eus ket da gemer perzh evit nep digerez ar brezelioù euzhus stravoadel gant kenenebiezh ar Stadoù braz impalaerour kement ha kement an eil hag eben.

KUDENN AN OBER

I

Alies ez eus bet tamallet d'ar gristenion chom hep ober forzh eus ar bed-mañ ha lakaat o holl freder ar bed da zont. Damwir eo an tamall marteze evit kristenion zo evel Pascal gwechall - nemet mat e vije bet resizañ n'eo ket d'ar gristenion hepken e c'heller hen ober hogen da gemant den a dremen da zister an holl zarvoudoù peogwir n'int nemet touell ha skeud; n'eo ket dre maz eus pe dre ma vo ur bed gwelloc'h eo dibouez hor bed-ni, hogen peogwir e ranko mont da get ne varn penaos evit reiñ lec'h d'ur bed nevez pe d'an Netra. Heñvel eo stad ar gristenion ouzh hini ar re all; ken aner eo strivoù an holl peogwir ne c'hallint degas netra stabil en diwezh. Gouzout e ran e fougas an digristenion da ober a-zevri wardro mad a vremañ an denelezh peogwir n'eus nemet hounnezh a zo diogel, hogen fougaserezh didalvez ha damlu n'eo ken o hini, rek, goude holl, n'he deus ar reizhded a fell dezho diazezañ ster ha talvoudegezh nemet maz eo gwirizienet en un Urzh groñs ha dreist bennak; pa gomzer avat eus Urzh ar bed, da lavarout eo, eus mennad ur C'hrouer war ar bed, emeur war dachenn an dragorfoniezh. Hag amañ dres eo e verzer splann pegen emsav eo hor savboent deomp-ni kristenion. Rak pa c'houlennomp gwirioù Breizh, ne reomp nemet stourm avit ma ve doujet menoz Ragevezh Doue en deus krouet ar broadoù, hag hon ober en deus eta ur ster resis : kempenn ar gevredigezh hervez raktres Doue; ma nac'hfemp hen ober e tilezfemp hor galvedigezh a emsaverion, kiriek e vefemp d'an droug a vefe desammet war bobl Vreizh hec'h unan, ha d'ar gwall a zeufe war an denelezh en he fezh dre varv ur vroad. Krediñ a reomp e vefe displetaet ha disteraet holl izili pobl Vreizh, ma kollfent o broadelezh, nebeutoc'h "tud" e vefent, paourzet e vefent, hag erfin ne c'hellfent c'hoari er bed, evel Breizhiz ar roll a zleont c'hoari. Displeget em eus ar soñjenn-se meur a wech dija. Kentañ dlead ar c'hristen eo klask reiñ d'an dud, da gentañ, leundel klok ar vuhez naturel. Kement-se 'zo hervez urzh Doue, rak eviti eo e stourmomp en diwezh; un dlead eo evidomp an ober, ha ne c'hellomp ket en em zigenvezañ, rak n'eo ket ac'h-anomp ni hepken omp kiriek.

I I

E gwirionez n'eo ket eno amañ an dalc'h evidomp-ni oberourion gristen. Gouzout a reomp e tileomp stourm; penaos stourm avat ha perak stourm ma c'hwiter en diwezh, setu ar goulenn nec'hus hon eus da respont.

Ar gudenn gentañ a sav dirazomp eo gouzout hag-ef e c'hellomp implijout

avat an hevelap armoù ma ra ganto hon eneberion. An hini diaesañ eo marteze, rak anat eo ne dalv ket un arm dre m'eo hervez ar vuhezouriezh pe get. Hep menegiñ ar brezel hag a zo war un dachenn all, e c'heller kompren e rafe strolladoù zo gant gevier talvoudus dezho da c'hounit an dud. Un arm displeal all eo an tamall e gaou, hag ur skouer splann eus an doare stourm-se hon eus er vrozenn skignet gant tud al "Labour Party" a enep d'ar vroadelourion e Bro-Gembre da vare an addilennadegoù e 1946. War a hafval d'ar c'hentañ sell e vefemp di-amsavet kalz ma ne rafemp ket gant hevelap armoù. Koulskoude e kav din e tileomp en despet da bep tra derc'hel pizh da reolenn eus ar werin-renouriezh. N'eo ket hepken dre maz eo arm ar gaou da skouer un treuzarm a ra kement a zroug d'an hini hen implij ha d'an hini ma vez implijet a-enep dezhañ; hogen dre ma tileomp argas forzh penaos kement doare ober a louse hag a zislaber an den, hag unan eus ar re-se eo ar gaou. Ne c'hellomp ket asantif d'en em vrainañ dre garentezvro. Ma argasan ar brezel ivez eo dre ma aonan e vefe ken distrosus all da demz-spered darn vuiañ an dud ha n'eo ket en abeg d'ar reuz material ha d'ar gwasterzh a zegas gentañ; ne c'hellomp ket kontrolañ ar brezel hag hen ren egiz ma kerfemp. Eñ eo hor c'has andro kentoc'h.⁽¹⁾ Ar werinrenouriezh eta, hen adlavarout a ran, a zle chom hor reolenn stourm. Ret eo kaout fiziañs en hor gwir. Diskiantif betek implijout an nerzh ne dalv-ezfe nemet an zav gwanted hor stourm. Dre gaer eo e c'houlenez an dud, ha ne gredan ket e c'hell padout pell ur gouarnerezh m'emañ ar sichenn anezhañ er polis. Sad pezh a zlefe kounan ar C'hallaoued bremañ ha pezh a zleimp kounan an amzer da zont.

o o o

(1) Ne c'hellan ket asuriñ na vo graet brezel nepred avit dieubiñ Breizh, rak kement-se n'eo ket diouzhimp hepken. Ma ra implij hor gelenion eus o nerzh evit hor sparlañ pe m'en em harpont da viken war o soudarded hag o folised evit nac'hañ pep gwir ouzhimp, eveljust na c'hellomp respont eus netra. Na gav ket din eta e vo ur brezel rakvennet e Breizh. Doust din bezañ bet dedennet kalz gwechall gant skouerioù Padraig Mac Piarais ha Connolly e teuan da vezañ yenoc'h ouzh o c'helennadurioù bremañ. Anzav a zle an ne c'hell ket ar c'hristen bezañ a-enep d'ar brezel reizh - in abstracto - tud drouk a zo hag en em zifenn outo a ranker, ne c'hellomp ket goulenn burzhudoù digant Doue, ha ma vefe sod kontañ warnomp hepken e vefe ken nay all gartoz pep tra digant Doue. Hogen an dra-se ne dalv ket ne c'hellomp ket efediñ anez brezeliñ, pe gaouiñ.

I I I

Al lentegezh washañ hag an direizhpoell diotañ a zleomp c'hwedif avat eo hini kristenion zo a anzav o deus Breizh hag ar brezhoneg ar gwir da vevañ hag a nac'h gwelout ne c'hell ket ober hep divizoù zo. Bourrañ a reont o randoñf o c'harantez ouzh ar yezh kozh, hogen ne fell ket dezho mezzout ez eo ken kozh m'emañ warnes mervel. Euzhiñ a reont ouzh ar vroadelourion hag o c'hunujañ bewech ma kavont tro; koulskoude n'eus nemet ar re-se hag a saveteo ar brezhoneg, ha n'eo ket dre albac'henn e raint, evelto, hogen dre ma ouzont eo ar yezh koulz lavaret, ti ar vroad. (E ti an estren e rank chom ar vroad n'he deus yezh ebet).

Pep si a zo gouzavvus en den, nemet ar pilpouserezh, hag ar si-se eo a damallan d'an dud-se; bez' e fell dezho sioulaat o c'houstiañs - rak doujañ a reont ar mad hag ar reizh - ha war un dro mirout ar rakvarnioù, ar eoñjennoù dibocell hag ar brizhhuñvreoù o deus moumounet a-hed o buhez, hag a gas Breizh d'ar marv. N'int ket kalonek awalc'h evit soñjal nag evit ober. Heugif a ran ouzh o frezegennoù ma lavaront enno e karont Breizh pa ne reont netra a-zevri evit he saveteñ, pa n'int ket gouest da gomz ar yezh kenetrezo. Afer o deus ouzh ur c'hlañvour marnaoniet, ha kredif a reont, pe ober a reont neuz da gredif eo awalc'h reif dour dezhañ evit e azbavaat. Ne fell ket dezho lazhañ ar brezhoneg a-dra-sur; awalc'h eo dezho e lezel da vervel. Bez' e tlefent gouzout koulskoude n'eo ket gant komzoù hepken e saveteer ur bobl. Anat eo dezho eo reizh hon emgann; hogen gwelloc'h eo ganto plegañ d'ar gwasker, rak re a reuz a vefe o herzel outañ.

I V

N'eo ket hepken d'ar gristanion-se e tamallan bezañ pilpouzion ha di-nac'hañ "ober"; kemendall e rebechan ouzh an holl - likourion zo dreistholl - hag a embann stoum evit ar yezh, pe ar sevenadurezh hepken (nemet e vefe dezho un doare-stoum evit Breizh). Ne fell ket mui deomp kaout e Breizh ar rannvroelourion-se na ouzont ket petra a vennont hag a re kement a zroug da Vreizh dre chom hep lakaat splann ar gudenn; touellañ a reont an dud; meskañ a reont an traoù. En diwezh, an diskoulmoù a erbedont a zo gaouiat ha diefedus. An dra-se eo dres na c'hellomp ket degemer; rak kentañ dever an oberour eo dres efediñ, da lavarout eo gouzout petra e fell dezhañ tizhout, ha dre belec'h mont betek ar pal. Aman ne lavaran tamm ebet eo mat an tu a gas d'ur pal mat. Bez' e lavaran hepken e tle ar mezeg gouzout peseurt remed a zle degas endro ar yec'hed d'ar c'hlañvour, anez bezañ kiriek eus e varv. Ha n'eus nemet an dieubiezh e c'hell pareañ Breizh.

Miz Du 1946
An Tremener

BARNEREZH HA REIZHOED

I

Paour ha gaouiat en abeg da se, eo alies ar yezh c'hallek, ha n'eus droukveskerezh steroù gwashoc'h enni eget an hini a gaver er ger "Justice" a dalvez e galleg, egiz ma ouzer, barnerezh ha reizhded war un dro. E gwirionez e ouzon mat tre eo dever ar barnerezh bezañ reizh, ha reif da bep hini e zleed. Hogen c'hoarzhus eo d'am soñj gwelout tud o klask pouezañ a-zevri kiriegezh un den, ha kemer lec'h Doue, hag i tud, ha tudigoù alies; nikun n'en deus ar gwir d'en em dremen da zoue ha goulenn evitañ un azaouez na zellez ket muioùc'h eget n'eus forzh pe garqiad all eus mererezh ar stad.

Rak kefridi ar barnerezh n'eo ket bet ha ne vo biken reif da bep unan pezh a zo dleet dezhañ ha ne gastiz ket un den peogwir en deus graet droug. Emañ an droug war dachenn an dregorfoniezh. Diouzh ar barnerezh eo avat mirout an Urzh. Ma kastiz al laer n'eo ket dre m'en deus torret lezennoù ar vuhezouriezh, hogen peogwir en deus lakaet an argoll bezoud ar Gevredigezh n'hell ket an den bezañ den hepti. Gwashañ pezh a zo eo e vez miret gantañ en arbenn da se recliadurioù mac'hus : gwarantet eo bet edoug pell gant al lezenn treuzgwirioù ar gevalavourion a c'houeuz ar vicherourion. Ha bez' ez eus torfedoù politikel ha kavredigezhel, evel ma welimp diwezhatoc'h n'emañ dindan krog lezen ebet.

Diglok tre ha di-spis eo alies al lezenn eta, ha kentañ tra a c'hellomp dastum eo n'he deus mann da emellout gant ar reizhded rik. An tu nemetañ d'he reishaat evel m'hon eus merket uheloc'hik, eo reif da garg dezhi dero'hel en he sav ar Gevredigezh : houmañ avat he deus ezhomm eus an Urzh, hag an Urzh eus divizedurioù resis miret pizh.

Neuze n'eo ket mui bezañ reizh a fell d'ar barnerezh : dero'hel war sav an Urzh a venn hepmuiken. Evit se eo e ra gant ar c'hastizerezh. Neuziet dishefvel e teu da vezañ ar gudenn eta. Rak ar c'hastiz diforc'h diouzh ar vuhezouriezh ne c'hell mui bezañ nemet sponterezh. Er Grenn-amzer e oa splann tre ar perzh-se ennañ, en Hen-amzer ivez, hag aes awalc'h eo da ziskleriañ : tennoc'h oa spontañ an dud neuze. Abaoe eo ast an dud war wakaat ha war savanaat a-wechoù; sed m'eo bet divarclhet al lezennoù kastizañ. Ne vern ket kalz ahdall; rak n'eo ket gwellaat an torfedour, nag e gastizañ hervez ar reizh a c'hell ober ar barnerezh. Hogen mirout outañ a noazhañ. Awalc'h eo dezhañ. Gwir eo he deus afer ouzh tud a vuhezgezh fall peurliesañ. Hogen goude ma vent mat holl ha santel, o c'hastizañ a rafe hefvel.

I I

Setu penaos e c'hellomp kompren treuzimplij ar barnerezh politikel. Eñ ivez ne ra forzh eus madelezh pe falloni wirion an den. Ober a ra wardro gwarezif an urzh, met taolomp pled mat, n'eo ket an Urzh hec'h-unan a zifenn, nemet ur stumm ispisial anezhi. Rak n'eo ket stourm ouzh tud a venn distrujañ an Urzh a fell dezhi, hogen ouzh tud a glask hec'h adaozañ. Eno emañ avat e si gwashañ : implijet eo gant dalc'hidi ur strollad pe ur renkad a gemer da zigarez diwall an Urzh evit mirout o dreistgwirioù. Alies awalc'h eo c'hoarvezet seurt tra en istor, ha nevez zo hon eus ni brogarourion ranket reuzif ouzh hevelep barnerezh mac'hom. C'hoazh hor dije asantet aes awalc'h d'ur gwaskerezh seun ha dizolo. Ar pezh hon eus kavet dic'houzafvus avat eo ar pilpousezh m'eo bet gwisket gantañ; n'oa ket awalc'h d'hon enebourion hon dizarbenn dre o barnerezh, ober o mad eus ar mererezh-se evit dismantrañ hor c'hanurzhiaour; fellet en deus dezho hor rediañ da anzav e oant reizh ouzh hen ober hag e oamp ni tud hakr meurbet kollet ganto o enor (!). Ha brouezif ha kounnarif a raent pa nac'hemp o c'hredif, hag hor c'hastizañ gwashoc'h a raent p'hen diskleriemp dezho; gwir eo ez eo bet talvoudus deomp o filpousezh hag en abeg dezhañ eo n'o deus ket kredet hor gwaskañ betek ar penn. Goude holl n'o deus ket hol lazhet holl betek bremañ, n'eo ket ta ? Nemet me 'gred eo o aon rak ar gwall-vrud ha n'eo ket o c'halon vat eo a rankomp trugarekaat. Ahendall o deus soñjey emichañs e vijemp fastet diouzh an ober breizhek gant ar c'hastizoù pounner o doa lakaet warnomp. Ne dalve ket ar poan hon drouklazhañ eta. Braouac'het awalc'h omp bet ganto evit kemp bremañ hent ar furnezh.

Bezañ ur sponterezh eta eo a demallomp da gantañ d'ar barnerezh politikel. Netra avat ne c'hell digereziñ barnerezh a gendaon tud onest n'o deus graet nemet stourm evit o menozioù. Gouzout a ran eo bet gwasket gant re all un deiz ar re hor mac'h hiziv; dialerezh kerkoulz ha sponterezh eo o barnerezh. Hogen torfedoù un den n'int bet gwennet gwech ebet gant re e enebour. Hag en em venjif - gant reizh pe get - n'eo ket barn ervat eo(1).

o o

(1) Faltaziek ha froudennus awalc'h eo bet doare kastizañ ar varnerion c'hall. Hervez ar mare hag al lec'h e tarnaoujont ar c'hastizoù. Erfin, prosezou evel hini ar gelaouenn bemdeziek renet gant Fouere pe hini Hoparz Hemon ne oant nemet farserezh. Anat eo n'eo ket ar varnerion o unan a oa kiriek eus ar farserezh-se : tud onest int. Hogen n'oant ket peurzioù, ha ret e oa dezho sentiañ ouzh kemennadurioù peurzioù.

I I

Estreget bezañ direizh e rebechomp d'ar barnerezh-se; dilezennel eo bet ivez. Daoust d'an diazlezenn eo bet graet divizadenn-stad 1936 m'eo bet kondaonet ganti brogarourion zo an amzer-se Gwarantet a oa an dieubozh brudañ gant an diazlezenn-se. E 1945 eo bet gwashoc'h an dilezennelezh. Kroget ez eus bet gant ar c'hastizerezh gant ur gouarnamant n'en doa da lezenn nemet e nerzh, ha na voe ket anzavet epad ur pennad mat a amzer gant ar broioù estren. Ar gouarnamant-se avat kefridiet e nep doare gant ar werin eo an hini en deus savet lezennoù evit barn ha kendaonif tud. Dises oa gouzout e gwirionez ha di-ziazlezennelezh e oant peogwir n'oa diazlezenn ebet d'ar mare-se. Marteze eo abalamour da se ez eus bet lakaet da dalvezout ganto reoliadurioù kastizañ peurzireizh ha mezhus evel an harlu diabarzh : n'omp ket di-efvor evel ar C'hallaoued ha soñj hon eus penaos e kavas tu Saozon ha Gallaoued d'ur mare droukvredañ Bro-Rusia en arbenn da seurt doareoù ober implijet ganti. Rak emañ n'eus ket mui kont eus kastiz end-seun; hogen klask a reer mirout ouzh tud da genderc'hel da stourm evit o uhelvennad : berzh a lakaer war ur menoz. Marteze e c'hall bremañ ar C'hallaoued lezennelaet seurt reoliadurioù. O reizhaat ne c'hallint biken avat. Awalc'h em eus lavaret evel-se diwerbenn ar barnerezh politikel rik a vuz ar dud en abeg da vezaf skignet o menozioù hep muiken. Met eo ivez, avat, spisast hor savboent diwarbenn barnedigezh an dud o deus graet brazel avit o menozioù. Dre vras, ha n'eo ket es resis e fell din komz ahendall. D'am soñj eo ur fazi stourm dre an armoù pa c'heller hen ober dindan al lezenn, ha resev a ran penn-da-benn reolenn ar werinrenouriezh. Kavout a ra din avelato e ve bet gwalloc'h trugareziñ ouzh ar soudarded politikel gwirion n'o deus graet nemet en em gannañ. Kenderc'hel a reer avat d'o lazhañ evel gwechall ha Padraig Mac Piarais, soudard gwisk-amentet avit e vro a zo bet fuzuilhet 20 vloaz zo gant ar Saozon goude bezañ en em gannet ez leal. Aze avat n'eus netra reizh na lezennel ez rik. Boazet eur a-viskoazh da lazhañ an enebourion peurdrec'het. Daou vil vloaz zo e oad kustum da lemal ar vuhez digant an holl brizonidi vrezel n'oant ket mui gouest da dalvezout d'un dra bennak d'o zrec'hourion. Evit soudarded ar strolladoù peurflastret e talvez hiziv ar reolenn kriz-se eus ar c'hentamzervezhioù. Setu holl.

I V

Splannoc'h eo kudenn an torfedoù politikerezh ha n'eus mar ebet ez eo reizh o c'hastizañ evel maz eus bet graet er prosez brudet diwezhañ e Bro-Alamagn. Reizh e oa ar prosez-se ma n'oa ket lezennel. En difetis eta ne c'hellomp nemet tuif a greiz-kalon. Dispar eo zoken ar reolenn engalvet :

hini ar gwir etrevroadel a warez dieubiezh ha buhez an holl vroadoù a-enep d'ar stadoù mac'hom. Ha divurutellus eo ar sturienn a girieka ur c'hargiad abalamour da lakaat da dalvezout ul lezenn fall; rak en anv ar sturienn-se hag ar raolenn-hont e c'hellfemp garvel Bro-C'hall dirak ul lez etrevroadel da vezañ torret hep digarez feuremglev 1532, da vezañ klasket a-zavri bev hag a-ratozh-kaer lazhañ hor yezh ha pep alfenn eus hor broadelezh. Mat e gwirionez dav eo deomp gouzout n'hor bo ket ezhomm eus 'al lez-se en deiz ma c'hellimp ober gantañ.

Kredif a ran eo peurzidalvoud ur barnerezh n'eo ket gouest da virout ouzh an droug da c'hoarvezout. E politikerezh ahendall n'eus keffver ebet etre an den ha ment ar gwalennoù a c'hell dichadennañ war ur bobl pe war an den-lezh a-bezh. Daoust ha paeañ a c'heller seurt torfedoù ?

V

Mat eo ar barnerezh dre vras en e anien, evel m'hon eus displeget, rak derc'hel a ra ar Gevredigezh en he sav, mirout a ra an urzh, ha pan'eo mat an urzh-se ne c'heller nemet e vaulif. Keuz bras hon eus eta na vije ket bet gallet sevel hag embreger da vat kenlezeñ ha kenwir ar broadoù, dezho galloud ha beli da saveteiñ ar re vihan anezho diouzh gwall-waskerezh ar re vras. An diwezhañ prosez en deus kemeret lec'h ne c'helle hor c'halonekaat e nep doara; mac'homerion oa an holl varnerion; gwaskañ ar broioù baltek a ra Bro-Rusia (peurgetket), Bro-Gembre Bro-Saoz, Breizh Bro-C'hall. Gwir eo e plegfe aes awalc'h broioù evel Bro-Saoz dirak an nerzh a-du gant ar gwir ken dre leziregezh ken dre vorc'hed, ar pezh na rafe ket broioù evel Bro-Rusia mar-teze. Pezh a zo diarver ivez eo ez eo prest an holl vroioù-se da n'eus forzh pe dorfed evit gwarantañ o surentezh. Peurc'hlen e tlefe bezañ avat ar barnerezh.

Ahendall, ret eo merkañ e vez divarrekaat alies barnerezh diabarzh ar stadoù gant sioù Mab-den. Gwellet hon eus penaos eo bet implijet evel ur berveg stoum a-enep deomp gant ar C'hallaoued; ho pet soñj avat ez eus bet graet heñvel a viskoazh ouzh an dispac'herion n'int c'hoazh nemet ur bihanniver. Hag e gwirionez n'omp ket sabatuet na feuket gant m'omp heskinet. Degemer a reomp zoken bezañ mac'het gant ur barnerezh direizh, rak n'eo nemet dre c'houzafv e tiskouez an den e faiz, ha ne greder nemet ar re a zo darev da vezvel evit o menoz. Ar pezh avat na c'hellimp morse degemer eo ma vemp dismeganset gant ar barnerezh. Hol lazhañ a c'heller, hogen hon doujañ a zleer, muioc'h eget hor buhez e prizomp hon enor, ha dreist d'an droukgaou eo ar pal a vukomp. Quzhpenn-se, ret eo d'ar varnerion soñjal n'eo ket o galvedigezh servijout ur urzh fall, hogen an Urzh. Gwelloc'h eo d'ar gouarnamant gall chom hep implijout e varnerzh a-enep deomp, rak goude holl, n'omp ket sent

holl, ha warbouez hon hegasif hor pennfollor. Mat eo kounañ se. Ahendall, muioc'h eget un torfed, ur fazi e vefe, rak krouiñ hengoun an dispac'herezh enep-gall e Breizh dre sotonioù seurt se a vefe gwashañ diotach a c'hellje Bro-C'hall ober c'hoazh.

Miz Du 1946
An Tremener

o o o
o

RESIZADURIOU DIWARBENN AR

STOURM SEVENADUREL

I

Gouzout a reer ez eus tud na fell ket dezho kemer perzh er stourm evit Breizh evit abeg pe abeg, evito da verzout ne c'hellor saveteiñ Breizh da vat nemet pa vo bet kenurzhiet en ur stad vroadel gant ar vrogarourion. Ar re-se a zispleg neuze e fell dezho en em enkaf war dachenn ar sevenadurezh. Hag, e gwirionez, anzav a rin dichipot-kaer eo mat awalc'h o arguzennoù awachoù : ne dalv da netra rañf da Vreizh renerion nevez ma n'o deus ar re-se deskadurezh vreizhek ebet, ma n'avezont netra eus sevenadurioù ar broioù keltiek all c'hoarezed d'hon hini. Kavout a c'helled etre an daou vrezel da skouer renerion vroadel zo hag a oa dic'houest da dremen an Trec'h Meur. Kargidi zo eus Strollad Broadel Breizh zoken epad ar brezel a oa ken dister all o deskamant breizhek, ha ken tanav all o anaoudegezh eus ar sevenadurioù keltiek all. War ur gelaouenn eus an emsav embannet epad ar brezel "Stur" e kaved pennadoù gouestlet d'ar pezhioù-c'hoari displeget e Paris. Marteze e kave mat da rener ar gelaouenn moulañ seurt skridoù evit diskouez pegen ledan a spered e oa. N'ouzont ket. Pezh a ankounac'hae avat eo n'heller ket ober ur C'helt eus ur Breizhad a ya da gerc'hat peurvuiañ e lennadurioù e Bro-C'hall. N'em eus lavaret morse n'oa ket eus an dud-se a oa re duet da garout sevenadur Bro-C'hall servijerion vat eus Breizh. Nemet he servijout evel estrenion ha n'eo ket evel broiz eo a raent. Ha goude holl, emañ ar gwir gant Roparz Hemon pe lavar e tleomp disofjal ar galleg, rak ar galleg eo a laz Breizh, n'em eus diskleriet biskoazh e tleomp dizeskif a-grenn ar galleg ha peurzi-~~an~~avezout ar sevenadur gall pa c'hellomp chom hep hen ober; pezh a fell din merkañ hepken eo e tleomp da gentañ peuranaout hor bro hag ar broioù keltiek; ha goude se ar broioù estren; aes eo kompren perak; warbouez d'emprediañ un estren hepken e teuer da vezañ heñvel outañ. Ha mar deo estren ouzh Breizh ar vrogarourion, daoust ha n'eo ket lu o ober? Neuze eta eo reizh ar re a gav dezho eo ar stourm sevenadurel an hini pennañ, pe ez p'evashoc'h, an hini kentañ; arak stourm evit Breizh, dav eo deomp dont da vezañ Breizhiz hepken. Ha marteze ivez eo an hini pouezusañ, nemet n'eo ket, ma gred, en doare ma intentant-i. Emaon eta o vont da ziskleriañ penaos eo marteze ar stourm sevenadurel ken ret hag ar stourm politikel, ha retoc'h marteze.

o o o

I I

Da gentañ e resizin n'eo ket evidon skrivañ e brezhoneg oberennoù a lennegezh rik stourm evit Breizh war dachenn ar sevenadurezh. Meneget em eus dija e sigur Bro-Brovañs n'oa ket awalc'h embann levrioù evit saveteiñ ur bobl. A-dra-sur ne nac'han ket eo talvoudus al lennegezh rik d'ar re a stourm evit ur vro. Mat pezh a zlefe skrivagnerion ur vroad trec'het evel Breizh soñjal ennañ eo emaint war var da skrivañ evito o unan hepken. Ha kaer en devo Roparz Hemon arguiñ, ne zeuio abenn morse d'am c'hendrec'hiñ n'eo ket pal kentañ ar skrivagner eo ar c'hengomz gant a genvroiz da gentañ, hag e gendud da c'houde. Mar he deus pouez hol lennegezh uhel a vremañ evelato eo en abeg ma vo Breizh dieub un deiz, ha ma vo stummet speregezh ar Vretoned da zont gant studi ar skrivagnerion vrezhonek a vremañ dianev da bobl Vreizh hiziv. Hogan skrivañ evit 500 den d'ar muiañ, daoust ha talvezout a re ar boen? Evel m'em eus merket endeo, sevenadurezh evit skrivagnerion ne c'hell bout nemet hini ur "c'helc'hiad" ha n'eo ket hini ur bobl; ha neuze didalvez eo.

Emañ diskouezet eta n'hell ket ur skrivagner e Breizh bezañ un arzour hepken. E zlead kentañ a-se, ouzhpenn skrivañ; eo stourm evit ma teuo ar sevenadur a grou da vezañ hini e bobl. Ne dalv ket displegañ an doareoù-ober a c'heller implijout; ar pal a chomo bepred an hevelep hini : daskorif d'ur vroad e beadra speredel hag addeksif dezhi soñjal drezi hec'h unan.

Ne c'hellimp kas da benn seurt mennad avat nemet dre ober gant ar bruderezh, ha gouzout a ouzer eo ar bruderezh pennañ berveg ar stourm politikel. A-benn neuze avat, n'eo mui ar stourm sevenadurel nemet ur skour hag ar stumm eus ar stourm politikel; da gentañ kefridi o deus o daou addihuniñ emskiant vroadel Breizh.

I I I

Bez' ez eus avat un doare stourm sevenadurel a zo pouezusoc'h c'hoazh eget an doareoù meneget uheloc'hik; ret eo deomp a-benn bremañ krouiñ ar skol-veur a advrezhonekay Breizh. Kefridi gentañ ar skol-veur-se e vo stummañ ha kelenn ar muiañ ma vo gallet a vistri-skol hag a dud barrek da ober skol pe da genteliañ a brezhoneg. Ne sonjan ket hepken emañ er re a bled gant ar vugale vihan. Eveljust e vo pouezus labour ar re-se; nemet ret eo lavarout e vo aes awalc'h o furmañ pa gerimp deiz pe zeiz. Soñjal a ran dreist-hall er re a gelenno er skoloù pe er skolioù uhel. Kroget ez eus bet d'o stummañ edoug ar brezel. Bez e oa da skouer e Roazhon ur Skol-Uhel Emil Ernod. A-dra-sur ne voe ket dispar he berzh marteze; koulskoude, er penn-kentañ e voe skedus awalc'h he buhez. Ne vern emañ pezh a c'heller tamall dezhi, - chom a

ra ar Skol-Uhel-se ur skouer eus ar pezh a vo dleest ober en amzer-da-zont e pep kêr eus Breizh. Unan eus palioù ar skolioù-se a vo deskif d'hor paotred yaouank kelenn e brezhoneg. Ur pal all e vo o broudañ d'al labour ha d'ar studi; ret a vo dezho en em varrekaat war an dachenn-mañ-tachenn, pe vedisinerzh pe wiraouriezh, pe lennegezh rik. Niverus-tre eo ar strizh-kefridioù a c'hellint dibab. Ret e vo dezho kevezañ ar ouizision c'hall e kement skiant zo. Neuze hepken e c'hallimp sevel ur skolveur gwir vrezhonek (1), ha diouezañ ar skolveur c'hall. Ha dav eo meizañ pegen pouezus eo ar pal-se da ziraez; ne c'hello morse Breizh bezañ yac'h keit ha ma chomo ur skolveur c'hallek enni. Ra soñjor pegen mantrus eo stad Iwerzhoniz kar-o-yezh gant ur skolveur a gendalc'h daoust da bep tra da skignañ ar spered saoz dre ar vro : a-boan m'eo gwelloc'h ar yezh gant an dieubiezh. Ha penaos e c'hellfe bout pan eo debret gant ar c'hriagn-bev-se, ur skolveur saoznek a gelenn ar peurvuiañ eus brientinion ha sterneterion ar vro ? Ar reuz a rafe ur skolveur c'hallek en ur Vreizh dishual a vefe ken gwazh. Drezi e padfe buhez Bro-C'hall d'en em fennañ e Breizh ha da vougañ hini hor Bro. Hor c'hentañ mennad eta a zle bezañ he distrujañ ar buanañ ar gwellañ : ne c'hallimp hen ober avat nemet pa vimp gouest da lakaat ur skolveur vrezhonek koulz hag hi en he lec'h. Divent dreist-muzul eo al labour a chom dirazomp da seveniñ; hogen, evel m'hon eus hel lavaret, dibreiz eo, ha ne c'hellomp ket kilaf raezñ hep trañsañ Breizh ha dreist holl hep en em douellañ hon unan rak sevel ur Vreizh c'hallek ne vefe nemet dioterzh put ha follentezh rik. Ha Breizh a chomfe gallek hep ur skolveur vrezhonek.

(1) Ne vefe ket mat d'am soñj krouif ur skolveur vrezhonek e-kichen hini Roazhon a vanfe gallek evel maz eus bet graet en Iwerzhon. Riskl a vefe dezho padour da viken evelse. Gwelloc'h a vefe brezhonekaat tamm ha tamm holl gevrennoù Skolveur Roazhon ha kaout hounnezh hepken. Evit kaout kelennetion awalc'h, er penn-kentañ ma ne c'hellfemp ket kavout an holl e Breizh, e vefe dav deomp pedif estrenion desket zo a zeskfe buan ar yezh hag a vefe gouest da gelenn enni hepdale. Graet eo bet kemendall er broioù baltek da skouer hag a zo hanter bihanoc'h eget Breizh. Arebet a vo argilaf d'hen ober, rak ar skolveur hepken - brezhonek a-berzh stad evel m'eo gallek hiziv - a c'hello brezhonekaat holl vuhez kevredigezhel Breizh, ha saveteiñ Breizh en diwezh. Notomp ahendall eo kudenn an embann a zo an diaesañ evidomp, rak hennezh a zo diouzh niver al lenneion; dav eo deomp moulaf eveljust ar muiañ a oberannoù a lennegezh hag a ouiziegezh. Ret eo kaout tud evit o lenn avat. Ret eo ivez eta, diouzh un tu krouif hor skolioù-ni - egiz re Ober - ha diouzh un tu all ober bruderezh etouez ar bobl evit rediañ ar gouarnamant da zigeriñ dorioù ar skolioù d'ar brezhoneg. Muic'h-mui e vo dises dezhañ nac'haf en amzer da zont. Tamm ha tamm ahendall eo e teuimp a-benn da vrezhonekaat Breizh dre an hent-se, ha dav e vo deomp eveljust damantif ouzh an dud. Evit meizañ mat pezh a intentomp dre "Stoum sevenadurel" hag ar pouez a zomp dezhañ n'eus nemet adlenn pennad R.H. ebarzh "Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh".

I V

Fazi kalz tud etre an daou vrezel eo bet ober ur c'hemm re c'hrofs etre ar stoum sevenadurel hag ar stoum politikel. N'eo ket dres rebech outo en em ouestlafi kentoc'h d'an oberenn-mañ-oberenn eo e ran, hogen tamall a ran dezho da gentañ bezañ lezet da ober wardro ar stoum politikel tud amvarrek pe n'o doa ket awalc'h a zeskadurezh vreizhek pe geltiek evit bezañ dileuridi ha renerion ur vro geltiek. D'an eil e tamallan dezho ivez bezañ stourmet evit ar sevenadurezh en ur implijout doareoù-ober ar rannvroalourion; glac'h-arus ha c'hoarzhus eo o strivoù da ziskouez d'ar C'hallaoued na raent nemet wardro ar yezh. N'eus emgann mezhusoc'h evit ur vro eget an hini a zo bet renet e Breizh evit ar brezhoneg. N'eus ket brasoc'h truez eget lenn ar goulennadegoù anez a zo bet kaset d'ar gouarnamant gall hag a zo bet taolet bewech d'ar blodoù; ar pezh a zo ur gwir grofs a aspeder d'hen reif evel pa vije un trugarez. Hag evit chom hep feukif ar Mestr ne gaver netra gwelloc'h eget kunujañ ar vroarourion o deus lakaet en argoll o dieubiezh hag awechoù o buhez evit saveteiñ o bro. Kement-se eo na c'hellomp ket gouzañv. N'eo ket hepken dre m'eo dismegafus evit Bro-Vreizh a-bezh seurt doare goulenn, hogen ivez dre m'eo di-efedus; petra zo disoc'h et hiziv diouzh kement a c'houlennadegoù ? Netra. A-walc'h eo d'o barn.

Dever ar vroadelourion eta eo kemer penn a-c'houez d'an holl ha dindan o anv eus an emsav sevenadurel hag eus an emsav politikel. Bez ez eus daou abeg pouezus evit ma rafent evelse. Da gentañ ne c'heller disrannañ a gwirionez an daou emsav-se : unan eo ar stoum evit Breizh ha n'omp ket ar re gentañ ouzh hen asurif. Diskouezet hon eus ahendall penaos ar stoum sevenadurel n'eo nemet ur skourr eus hor bruderezh broadel. D'an eil ret holl eo d'ar re o deus dastumet ar muiañ zeskadurezh vreizhek ha geltiek bezañ e penn ar stoum evit ar vro, ha warc'hoazh e penn ar vroad. N'eo ket d'an dud a gendalc'h da c'hallekaat eo ren Breizh. Ne brou ket ur Breizhad e garantezvro dre gasaat Bro-C'hall hogen dre ober anezhañ e unan ur gwir Vrezhon. En ur ger berr, blienierion speredel ar vroad, ar re a zle gourc'hemenn hiziv war ar stoum sevenadurel kerkoulz hag an hini politikel, a zle bout Kelted ken a galon ken a spered. Ha ne gradan e c'hall an den fougasif da vezañ ur C'hall pe vez divarrek da ober eus ar brezhoneg e wir yezh. Ne fell ket din asurif eveljust e ranker nac'haf skoazell ar Vretoned n'o deus ket desket o yezh dre ziegi pe ziouer e amzer, egiz ma lavaront. Ur c'hemm a ranker ober avat etre ar re-mañ hag ar gentañ. Rak goude holl n'eo ket awalc'h karout Breizh na zoken stoum eviti evit bezañ dallezek ha gouest d'he ren.

Miz Kerzu 1946
An Tremerer

A - E N E P D ' A R V R O A D E L O U R I E Z H R I K

I

Tud zo ne seblantont ket kompren ervat perak ne fell ket deomp klask bodaf an holl Vretoned endro d'ur strollad hepken. Un abeg mat hon eus Koulskoude : dic'hallus a-grenn eo. Emaomp o vont da ziskleriañ perak.

Gouzout a reer n'eo bet ganet da vat emsav Breizh evel hini Kembre nemet e tro brezel bed kentañ an ugentved kantved. Aes eo jediñ an dale a zo etrezek hag emsaviñ evel re Tchekia pe Iwerzhon hag a oa bev buhezek dija e kreiz an XIXvet kantved. Pa n'hor bije nemet an diskleriadur-mañ evit poellañ perak n'eo aet hon emsav ni keit se waraok e vefe awalc'h deomp. Hogen n'eus ket nemet an diskleriadur-mañ : Stourm Iwerzhon n'eo ket bet dreistholl stourm ur vroad dismegaset, er penn-kentañ da vihanañ, hogen hini ur renkad-tud gwasket an abeg d'e relijion. Hag ar relijion-se ha deus roet tu d'ar Vroidi desc'hel soñj eus o broadelazh. Ne voe kont avat eus gwir vroadelouriezh nemet da vare Piarriñ hag ar "Gaelic league". Ma vije bet Iwerzhoniz sujat d'an hevelep lezenn saoz egiz Saozon ha Skosiz, eo gwirhefvel tre e vijent bet hevelekaet dres egiz Kembreiz ha Skosiz. Forzh penaos, darn muiañ Iwerzhoniz araos an dieubidigezh o doa disañjet o yezh. Daoust ha graet o dije m'o dije miret un emskiant vroadel peuryac'h ? Ne gredan ket. Ahendall ma ho ped da verkañ an diforc'h bras a gavomp amañ etre kudenn Vreizh ha kudenn Iwerzhon. Bez' ez eus a dra sur ur gudenn gevredigezhel e Breizh deut diwar he bout stag ouzh Bro-Chall. Nemet da gentañ n'eo ket ken splann ha ken dizolo ar gudenn-se hag ar gwir gwaskerezh a oa hewel d'an holl en Iwerzhon. Ha d'an eil n'o deus ket pouezet awalc'h warni brogarourion Vreizh nemet epad ar brezel diwezhañ marteze. Gouzout a raomp e ra berzh bremañ strollad Kembre dre ma pled da gentañ gant gouli an dilabour deut diwar ar reoliadurioù saoz e Kembre. Ra vo se ur gentel evidomp. Deomp bremañ da gudenn ar relijion e Breizh. Bremañ eo diaes komz anezhi, peogwir ez a Breizh muio'h-mui evel peurrest Bro-C'hall war zigristenaat. Nemet bez ez eus bet anezhi e derou ar c'hantved-mañ, hag asurif a c'hellomp o dije gallet katoliked Vreizh mirout ar c'henuzhiadur evit ar skolioù demhefvel ouzh hini Elsassiz, m'o dije en em savet ouzh Gouarnement Bro-C'hall evel Breizhiz; bez e c'hellent neuze diogelif e oa ar gatoligiezh kredenn vroadel Breizh. N'o deus ket graet peogwir e oant re c'henaouek ha re laosk. Gwazh a se evito; n'em eus tuez ebet ouzh ar c'henaouion hag an dud digalon. Marteze n'eus ket kemant-se da geuziañ, rak o c'hataligiezh a oa dreistholl un hengoun politikel, ha n'eo ket gant hounnezh omp dudiet. Dre ziegi marteze ivez eo e talc'hent dezhi, ur stumm eus o mirouriezh e oa; ha dre se eo e oa tonket da vezañ

trec'h. Rak ne zeu an tu kreviñ en diwezh nemet gant an dispac'herion. O tagañ e trec'h ha n'eo ket o'n em zifenn. Ha fazi katoliked Vreizh eo bet han kredañ. N'o deus ket merzet c'hoazh n'eus chafis na berzh na buz nemet ma teuont da gemer ar pezh pennañ er stourm evit adsevel Breizh. Rak ma n'emaint ket er renk kentañ evit emgannañ, ne vint ket kennebeut ar re gentañ er vro dishual.

En diwezh, setu dres war betra e fell din degas evezh Breizhiz : n'eus ket mui hiziv en Europa a vroadelouriezh hag a bolitikerzh rik, da nebeutañ n'eus ket e Bro-C'hall. An holl strolladoù bremañ a ra dreistholl da gentañ penn wardro ar gudenn kevredigezhel : da gorf ar vroad e fell dezho komz, micherourion dreistholl bremañ, peogwir int kenurzhiet evel micherourion. Marv eo da vat ar c'hostezennoù na c'hellent dudiañ nemet bourc'hizion. Taolomp pled mat avat : daoust ha n'eo ket hon emsav araos ar brezel da zamall amañ : war a seblant ne c'helle ket dedennañ pobl Vreizh dre vras. N'o deus ket e renerion gouezet meizañ gant petra oa prederioù hor gwerin. N'eo ket gant ar yezh emichef, na kennebeut gant an istor, pe ar sevenadurezh. Lod muiañ ar C'hallaoued ne reont ket muio'h a forzh anezho, ha diskouezet em eus penaos bruderion c'hall Londrez edoug ar brezel ne atizent ket ar garantez vro hogen kasoni an dud marnonist ouzh o naonerion. N'eo ket dre ma kredan ez eo didalvez kreñn en em harpañ war an damgarantez o deus ar Vretoned ouzh o yezh hag ouzh o bro hec'h-unan, hogen n'eo ket awalc'h seurt damgarantez evit o luskañ da ober. N'eus ket en ur vro kudenn ar vroadelazh hepken : en diwezh pezh a dregas ar muiañ an den boutin hiziv c'hoazh eo an arboellerezh. Ha kemantez a rankomp gouzout ma fell deomp e rafe berzh hor bruderezh. Hogen n'eo ket en den boutin, den ar werin hepken a fell deomp gounit. An deskiad a fell deomp kendrec'hiañ ivez. Hannezh avat n'eo ket gant kudennoù an arboellerezh hepken eo chalet. Holet eo kentoc'h gant ar sevenadurezh; ha dezhañ e gwirionez e c'hellomp displegañ gwir neuze kudenn Vreizh; meizañ ervat a c'hello eus petra ez eus anv. Koulskoude e kammsoñjemp ma kredemp eo kudenn ar sevenadurezh an hini dalvoudusañ evit pep deskiad; pell a se. N'on tamm ebet a-du gant Roparz Hemon pa lavar en e bennad "Ar vroadelazh hag ar stad" ez eo echu marevezh ar bruderouriezh en istor. Muio'h eget biskoazh eo renet hannezh gant ar menozioù demroligiel, gant ar c'hevriñadegezhioù. En he donañ eo ar gomunistiezh ur meizadur eus ar bed, hag en abeg da se eo he deus gallet dehoalañ kalz deskidi n'o doa ket kemant se a garantez ouzh an daveñtation. Ur strollad evel an M.R.P. da skouer a zo bet savet da gentañ evit dilenn ur c'homprenadur eus ar bed dishafvel kreñn diouzh hini ar varksourion. Hag evit da stourmerion ar strollad-se kenober gant ar re-se war dachenn an arboellerezh hag ar gevredigezh e chomont tostoc'h da strolladoù all a ginnig programoù diforc'h mat er c'hevriñ-se. Kemendall e c'heller merkañ a-keñver ar strolladoù socialist ha komunist. Unanet mat int gant o marksouriezh. Gouzout a reer ahendall e klaskas tud zo e broioù zo treuzfurmañ o broadelouriezh en

ur brederouriezh; ober a rejont anezhi gouennelouriezh. N'hon eus ket d'he burutellañ amañ. Un arouez eo avat ar c'hoant-se da stagañ ar politikerezh ouzh ur peurc'hrofs bennak. Evel-se, me gred, e tle ivez broadelourion Vreizh chom hep bezañ nep-tu ken war dachenn ar gevredigezh ken war hini ar vedveizadurezh. Ma n'hon eus program resis ebet da ginnig d'ar vicherourion, e c'heller lavarout ne reomp forzh anezho : brav eo diskleriañ n'he devo pobl Vreizh da ober nemet dibab hec'h unan ar stumm-gouarn a garo warlerc'h an dieubidigazh. Mat e vefe ma rafemp brezel, ken n'hor bafe ket amzer da bledañ gant kudennoù all. Hogen ne fell deomp stourm nemet er peoc'h; n'eo ket a-walc'h eta kinnig ur stad; c'hoazh e ranker displegañ penaos emaoomp e soñj he neuziañ. En hevelep doare e vefe fall chom hep bezañ stag ouzh ur brederouriezh etrevroadel bennak. Da gentañ evit an hevelep abeg hol laka da bouezañ kement da nebutañ war ar gevredigezhelouriezh ha war ar vroadelouriezh : ouzhpenn kudenn ar vroadelezh a zo en ur vro, evel m'hon eus lavaret endeo. Ha d'an eil e vefemp war var da gouezhañ en naziouriezh, er ouennelouriezh; bez e fellfa deomp sevel ar Strollad Nemetañ; ne c'hellfemp hen ober avat nemet dre an nerzh. Mont a rafemp da vac'homerion; ne c'hellfemp ket saveteif hor pobl a-benn ar fin, rak en em sevel a rafe ouzhimp darn eus hor c'henvroiz. Kredañ start a ran eta eo ret d'ar vroadelouriezh bezañ dreist pep tra un ers etre Breizhiz. N'eo ket gant broadelourion rik e vo saveteat Breizh; dinatur eo stumm spered seurt tud. Gant broadelourion a soñj ez eus er bed talvoudoù all estraget re ur vroadelouriezh.

Miz Kerzu 1946

An Tremener

POLITIKEREZH RANVROEL

PE DISRANNOURIEZH

I

Skrivet em eus politikerezh rannvroel ha n'eo ket rannvroelouriezh, rak hounnezh n'eo nemet ur stumm spered, un trivlierezh, damhefvel ouzh ur c'hatar dizrouk, ha n'hon eus ket da ober war he zro amañ. Afer ar mezeged eo, n'eo ket hon hini. Bez' e fell din diskleriañ hepken perak ne fell ket deomp ober gant ur politikerezh rannvroel da stourm evit Breizh, ha petra e soñjomp dres eus kudenn an disrannouriezh. An danvez gentañ em eus meret endeo, nemet mennout e ran endonaf ervennoù zo eus an destann ha n'oant bet nemet finou-c'hellet ganin.

Merkañ a rin da gentañ ez eus broadelourion eus ar re a stourm evit Breizh hiziv gant ur politikerezh rannvroel, da lavarout eo, kredañ a ra an dud-se ez eo Breizh ur vro; hag ez eo ar vro-se hini ar Vrezhonez. Splann eo kement-se, ha den n'hen nac'h. Koulskoude e kred ar "rannvroelourion" (sesoc'h eo ober gant an anv-se evelato) e c'heller diogelid da Vreizh buhez ha gwirioù ur vro hep menegiañ zoken, gwech ebet, ez eus anezhi ur vro. Stourm a reont evit Breizh dre guzh, hag evel mezhek int ouzh hen ober. Peseurt abegoù o deus eta da vont gant an hent-se ?

Marteze eo en tamelloù a ra deomp ar rannvroelourion e c'hellomp an aesañ merzout pe evit pal e ra ar re-se gant hevelep doareoù-ober. Hogen rebech a reont ouzhimp da gentañ feukif ar C'hallaoued ha bezañ dizampart : ret eo loavañ ar C'hallaoued, ret eo o c'hlufanfa, o moumounaf, o cherisaf evit o lakaat da reif hor gwirioù deomp. Gwan omp neketa; arm ar re wan eo al loaverezh. Ne c'heller ket dislavarout ar re fell, dreistholl pan int hor mistri. Ma empennont en o elfo ez eus Gallaoued eus Breizhiz, arabat lavarout ar c'hontrol; nac'hañ a rafent actren deomp un hanter survezh brezhoneg bep sizhun e skolioù hor bro. Marvel a rafe ar yezh diouzh an taol-se. Soñjit e peseurt torfed a rafec'h. Rak c'hwil an hini eo a vefe kiriek d'an dra-se. Arabat eo kennebeut diskouez d'ar C'hallaoued ez eo difennet gant kenwir ar broadoù lazhañ Breizh hag ar brezhoneg : da gentañ n'han kredint ket, ha d'an eil e vint fuloret, ha n'ho po ket da souezhiañ ma vezit taolet en toullbac'h ganto. Pep gwirionez n'eo ket mat da displegañ. Deskif a ra deomp ar furnezh ez eo "abegoù ar vistri ar re wellañ bepred". Dav eo bezañ skuit eta, ha chom hep goulenn grofs netra; aspedif ha lefvañ a zere hepken ouzh ur vroad sklavez evel hon hini.

Siwazh, aon em eus na ve ampartiz ar "rannvroelourion" netra nemet spont. Frouezh ar spont eo ar gaou, ha si ar sklav eo ar gaou. Rak pezh a garezan start d'ar re-se eo dres stourm evit Breizh, evel ma rafe sklaved. Mat eo dezho kredif e c'heller degas un diskoulm kaer da gudenn Vreizh : hen kredif a reomp ni ivez broadelourion a c'houez d'an holl, hen lavarout a ran adarre. Hogen ur c'hamm-soñj eo dezho faltaziañ ez eo o doare-ober an hini gwellañ evit efedif; ne vez roet e c'houlenn d'an den nemet pa vez krefiv. Ne selaouer ket ouzh an aspederion, rak n'o doujer ket. Bezant krefiv ha kriz eta. Neuze n'o devo nemet komz evit kaout. Ma n'hen gouzont-hi ket c'hoazh, hen gouzomp-ni abaoe pell. Ur vroad eo Breizh ahendall, hag evel pep broad he deus hec'h enor - ne vezn pegen izel e ve kouzhet bremañ. N'eo ket gant tud aonik a zouj gouzafv bac'h pe gwall-vrud e vo saveteet Breizh; gant harozed eo e vo, gant tud meizet ervat ganto e pegen bras riskl en em gav Breizh, ha graet start o soñj ganto d'he saveteif koustet pe gousto. Biskoazh ne voe marc'hadmat salv-edigezh ur vro, ha ne brenez ket he dieubiezh gant gerioù hepken egiz m'em eus diskleriet endeo; gant poan, glac'har ha doan ne lavaran ket. Argas a renkomp ken brezel ken politikerezh rannvroel evit an hevelep abeg; pep a zistresadur dishefvel a zagasant da demzpered an den; ne aspeder ket ur gwir groñs, ha ne c'heller ket gaouiñ evit saveteif ar vro. Bezomp doujañs ouzhimp hag ouzh hor bro. Ne c'hounezer ket un trec'h gant mezh.

Ar pezh a zo fantus awalc'h eo an disfiziñs a ziskouez ar rannvroelourion kaout ouzh ar C'hallaoued (hag a zo tud ken mat hevez a lavaront). Ar re se n'int ket nazied evelato, evel ma reont-i van da gredif. Ledan a spered int, ha c'hwil 'oar ervat ne lakaint barn biken un den en abeg d'e venozioù (eveljust a responto ar "rannvroelourion", da vihanañ hep bezañ graet "irienn" anezho).

I I

Hogen tamalloù all a ra deomp ar "rannvroelourion" : da skouer bezañ disrannourion, an dud euzhus-se a glask diframmañ ar vammvro vihan diouzh ar vammvro vras. Ahendall gouzout a reer n'omp anvet nemet evel-se ganto. Merkañ a rin da gentañ eta, ar pezh a zo kentañ goulenn ar c'hatekiz, ne dalv ket broadelouriezh bepred disrannouriezh. Un diskoulm da gudenn Vreizh eo an disrann, unan eus an diskoulmoù a c'heller reiñ dezhi (ne c'heller ket ober un diskoulm eus program ar "rannvroelourion") me gred ahendall e fell d'ar re-se dreistholl diskouez ne garomp ket Bro-C'hall, pa reont ac'hanomp "disrannourion"; ouzh hon tamall e kredont en em wennañ. Amañ avat e reont grevusoc'h fazi, rak reiñ a reont da gredif da dud hag a zo re dechet d'hen ober ez eo pec'hif chom hep karout Bro-C'hall - egiz pa vefe se diouzh hor youl - pe veizaf en doare-mañ-doare kudenn Vreizh. N'eus ket da welout avat hag-eñ e

kar ur Breizhad Bro-C'hall pe get, hogen ha pesañ e dailhoù ha mirout reoladurioù all ar stad c'hall a ra. Netra ken. Ahendall ez eo keodedour gall, hag evel keodedour gall en deus ar gwir da gaout e ali diwarbenn politikerezh ha da skignañ e venozioù hervez reolenn ar werinrenouriezh. Bez' e c'hell bout disrannour, ma kar; ur politikerezh evel un all eo, an disrannouriezh. Ar gwir da zibab o zonkadur o deus ar pobloù, ha war ar gwir-se eo disezet ar disrannouriezh.

Anzav a reomp n'eo ket ar politikerezh-se hon hini evit an ampoent. Aes eo diskleriañ perak. A-du omp gant un emglev gant ar gouarnement gall. Nemet anavezout a reomp e rakvarnioù, e stultennoù hag e spontoù. Emañ atav a dalc'h an aon. Lavaret em eus endeo eo dre ma toujent bezañ aloubet gant re all o deus ar broioù bras taget ha sujet ar broioù bihan. Dre berzh ar reolenn-se o deus ar C'hallaoued sklavaet Breizh. Hiziv avat eo gwashoc'h c'hoazh : ouzhpenn aonif a ra ar C'hallaoued : touellet int gant kelennadurezh ar "Frañs" gall, ar "C'halla" c'hall. C'hoazh e c'hellimp trec'hif war o lorc'h. Nemet ne c'hellimp chom hep ober forzh eus o aon anez brezelif. Ha diouzh-se e fell deomp mont. Neuze ar pezh gwellañ da c'houlenn evit ar mare eo ur statud hefvel ouzh hini an dominionoù predenek. N'eus tu ebet d'en em glavout bremañ anez kaout kement se da vihanañ. Diwezhatoc'h e vo gweliet.

Rak sellout a ran ouzh an diskoulm-se evel ouzh un diskoulm da c'hortoz; spletif a ra ouzh stad ar bed bremañ, ma ren enañ dalc'hmat disfiziñs, kasoni ha lorc'h nemet ur brizh-diskoulm eo evelato. Kemaromp skouer ar Vietnam hiziv. Fellet en deus d'ar C'hallaoued sioulaet o c'houstiañs ha mirout o goundoù ha n'cant ket reiñ atav marteze; anet eo n'eo ar Vietnam nemet da Vietnamiz ha n'o deus ar C'hallaoued aloubet ar vro-se nemet gant an armoù. Elec'h fiziout a-grenn e Vietnamiz o deus mennet kontrolañ youl-vev ar re-se. Kendisfiziñs zo deut diwar-se, ha gwelout a reer an disoc'hoù anezhañ hiziv. E Breizh ivez e c'hoarvez kemendall en un doare all. Na fell ket d'ar C'hallaoued degemer ar brezhoneg ar skolioù betagoùt na rofent lañs d'ar vroadelourion e Breizh, ar pezh a zo gwir. Kavout a reont gwell lekaat gouli Breizh e go, ha kontañ war doareoù-ober an Nazied evit mirout ouzh Breizhiz kar-ober, da ober. An aon rak ar vroadelourion eo o ren. Daoust avat ha ne vefe ket furoc'h fiziout er re-se, ha tremen hep o redif da vezañ enebourion? E gwirionez n'eus nemet un tu d'ar C'hallaoued da ziskoulmañ kudenn Vreizh: anzav Breizh evel ur vroad. N'eus ket Gallaoued eus Breizhiz hogen Breizhiz. Nemet gwallzalc'het eo bepred ar C'hallaoued gant o c'hleñved kozh. Bez e fell dezho e vefe trec'h o yezh hag o sevenadur er vro-mañ. Dre lorc'h eveljust, n'eo ket evit mad pobl Vreizh, peogwir ne dermont ket da gas d'al lazha-va 250.000 eus he bugale pan eus ezhomm. Ne damallont ket deomp bezañ amranerion-pe disrannourion, met bezañ Breizhiz. Darev awalc'h e vefent marteze da adaozañ melestradur ar stad c'hall ha d'he c'havedredif, da reiñ zoken

emvererezh da Vreizh, ma vefent sur e ve Gallaoued evelto eus ar re a vefe e penn anezhi. Nemet gouzout a reont e vefe bleuniet ur Vreizh emren gant disrannourion dre ar galon, na c'hellfant ober nemet ur marc'had ganto.

Bez e fell avat d'ar C'hallaoued bezañ koret zoken dre heg ha pa reont droug; unan eus o albac'hannoù eo. N'eo ket dianav dezho n'he c'haromp ket; anavezout a reont an droug o deus graet d'hor Breizh keltiek. (Ne vefe ket pareet an droug-se diouzhtu gant an dieubiezh. Peuslazhet o devo hor yezh kent reiñ hor gwir deomp. Plijet gant Doue n'he lazhet ket da vat.) Neuze e ouzont e talvezfe reiñ Breizh etre daouarn tud eveldeomp he c'holl da vat. Emañ an disrann er spered da gentañ. - Ret holl e vo dezho hen ober deziz pe zeiz gwir eo dre gaer pe dre heg. Nemet na gav ket din e vefe fur, pa asanto ar C'hallaoued d'en em glevout ganaomp, d'o re-feukif, ma c'hellomp ober e-gizall hep nozhañ ouzh hor bro. Poursod e kavan brezel diabarzh Iwerzhoniz goude o zrac'h.

An dalc'h n'eo ket kaout ur Vreizh peurzishual diouzhtu, petra a dalv-vezfe se deomp ma vefe renet gant tud hevelebekaet ? Ar pezh a zo e-bouez eo e vefe embreget Breizh gant Breizhiz. Ne lamm ket an istor. Ha ma c'houlenn Bro-C'hall, dre aon rak ar broioù all, ur gwarant bennak evit he surentezh, reizh e vo deomp hen reiñ dezhi, gant na wall-levezono ket kement-se buhez Vreizh e nep doare egiz m'em eus resizet. Diwezhatoc'h pa vo steuziet pep roud a gasoni hag a zisfi etre ar broioù, e ray Bro-C'hall evel pep bro, adkavout he c'hempouez dizaonif, ha soderaat; peogwir ne vo ket mui riskl a vrezel - ne c'hell ket mui ar brezel bezañ gant ar vombezenn elvtarzhuz, pe neuze an hini kentañ a vo an hini diwezhañ - n'he devo mui ezhomm eus gwarant ebet. N'emañ ket diskoulmadur kudenn Vreizh en istor Bro-C'hall ha Breizh hepken, hogen en istor ar bed a-bezh. Dont a ray ur mare ma vo anzavet ha degemeret gant an holl stadoù bras kozh o deus ar broioù bihan bet peursujet kement gwir d'an dishualded klok hag ar broioù bihan n'int bet kabestret gwach ebet, evel Norvegia, Sveden pe Danmark. Mat e vefe ahendall d'ar C'hallaoued prederiañ diwarbenn istor an div vro-se, Norvegia ha Sveden, a zo an em zisrannet a-grenn hep marc'had ebet, hep dispac'h, hag a youl kaer; awalc'h oa dezho fiziout an eil an eil. Ha koulskoude e oant kar nes dre ar ouenn ha dre ar yezh. Setu ur skouer dispar eus pezh a ranko bout darempredoù ar broioù warc'hoazh, pa vint bet distultennet diouzh lorc'h ha c'hoant egezh an impalaerelourion. Degasomp da goun ivez e soñje Lenin o doa holl vroioù bihan an Impalaeriezh kozh ar gwir d'en em zispartiañ diouzh Rusia.

E gwirionez n'eus ket eus kudenn an disrann politikel krenn. P'o devo asantet ar C'hallaoued da Vreizh bezañ renet gant Breizhiz e vo reizhet an afer. Ne vern ket neuze ar gwarant surentezh diavaez a roimp d'ar stad c'hall. Gant istor ar bed o treiñ e kollo seurt gwarantoù pep talvoudegezh : n'o devo da ober nemet mont da get. Ma gred e savo awalc'h a fiziads hag a vignoniez

etre rummoù Breizhiz ha Gallaoued an amzer da zont evit ma chomint hep kaout ezhomm eus gwarantoù dismagafus a-wechoù. Kamm a ra ar speredoù ahen-all. Ma rankomp hiziv kontañ gant rakvarioù ar C'hallaoued, n'eo ket sur e kavo hon nized vihan an hevelap skoilhoù hon eus ni kavet diariet e vo bet kalz a dreuz-kenvenozioù skignet hiziv ar broioù bras. Awalc'h eo gortoz(1).

I I I

Arabat eo kredif e fell deomp dispartiañ evit dispartiañ. N'eo ket rennañ da viken a vennomp : unaniñ na lavaran ket. Nemet ne gav ket deomp e c'hello broadoù ar bed en em gevredif en ur c'henurzhiañ bennak arak ma vo bet pareet diouzh ar c'hriegoù-bev-se a anver stadoù bras hag a zo bet savet gant impalaerelourion a-drugerezh da dorfeoù politikerezh ha brezel diniver. Gwall-strivoù ar re-mañ da sammañ o unvani war choug ar bed eo en deus krouet ar c'hasonioù euzhus a rog ar pobloù hiziv. Disoñjet o deus ne unvaner ket dre heg.

Da betra e talv kemmeskañ Breizh gant Bro-C'hall er stad c'hall, maz eus Breizhiz hag a gasa Bro-C'hall. Ur fazi a ra ar C'hallaoued o chom hep ober forzh eus an dra-se : tiez-bac'h hag ur gestapo o deus siouzh ezhomm neketa ? Elec'h brouezif avat e rafent gwelloc'h o klask gouzout piv ha petra zo kiriek d'an dra-se. E gwirionez e ankounac'haont n'eus nemet ar garantez a zegas an unvaniezh ha n'eus nemet an saundad a zegas ar garantez. N'o deus nemet mont gant an eeun ouzhimp, ha diouzhtu e vo tu d'en em glevout. Ne c'hellomp karout nemet ar re a ra vad d'hor bro, ha n'eo ket ar re he lezh. Petra 'zo disouezhusoc'h eget se ?

Ma gred ahendall e kammemerer an traoù pa vanner reiñ re a bouez da frammoù diavaez an unvaniezh. N'eus ket broioù en em glev gwelloc'h eget ar broioù skandinavek. Ha koulskoude n'o deus bet ezhomm biskoazh da sinañ ur feur-emplav bennak e sell brezel. Keneiliez ar broioù keltiek sklav c'hoazh an darn vuiañ anezho n'he deus ket dober eus raktresoù impalaerelourion a garfe o unaniñ evit o lakaat da sujaf ar bed : un huñvre eo ha n'eo ket zoken un huñvre gaer. Rak, en diwezh, ne unvaner en ur fram nemet a-enep d'un anebour bennak, hag amañ e adkouezhomp e klavved ar broioù a zo deut a dalc'h an impalaerelourion : an aon. Anv 'zo bet epad ur mare eus Unvaniezh ar C'hornou:

(1) E politikerezh ahendall, an neb a c'hell kaout an nebutañ a c'hell ivez kaout ar muiañ. Ne groger da reizhañ ur gudenn nemet pa c'hell ar glemmerion he diskoulmañ en un doare krenn drezo o unan. Kement-se a ziskouez pegen diziazez eo lentagezh ar rannvroelourion a gred e roer aasc'h ur goullenn d'adaer hag uvel.

eus petra eo diwanet ar soñj anezhi nemet eus ar spont rak nerzh Soviediz. An dreist-stad zoken a hiraezher dezhi evit reizhañ ha rafjennañ ar stadoù mac'hom a hiziv ne vefe nemet ur benveg a-enep d'un enebour bennak c'hoazh; ar stad a garfe sevel an dreist-stad-se eviti hec'h-unan. Anzav a rin dizael kaer eo gwelloc'h din an degouezh kentañ; gwell eo kaout meur a vestr eget ur mastr hepken. Nemet an diskoulm-se n'eo ket dispar, rak en diwezh n'he deus an unvaniezh netra da emellout gant an nerzh hag ar re a brezeg a-du gant ar garantez hag an unvaniezh e sell ar galloud ne reont nemet bratellat an dud, evel ar re a wisk gounidoù ar gapitalourion, ha dreistholl re an dreistkapitalour a anver stad-vras gant gerioù brav seurt se : brasoni ha c'hoantegzh ne c'holoont ken a-wechoù.

Arabat eo deomp eta bezañ treuzdedennet gant touellwel an dreist-stad. An direizhded eo ar gloaz kentañ da brederiañ : ne c'halla na fiziañs na karantez nag unvaniezh ren ar bed ken ma vo distrujet a-grenn hounnezh. Pa vo bet graet kement-se e soñjo broadoù ar bed da genurzhañ o arboell-erezhioù; marteze a savint un dreist-stad evit se⁽¹⁾; marteze na raint ket, ha kenderc'hel a raint da vevañ kenetrezo evel ma ra ar broadoù skandinavek hiziv; rak elec'h ez eus kenfiziañs n'eus ezhomm eus gwarent ebet.⁽²⁾

Miz Genver 1947
An Tremener

(1) En dreist-stad-se e tlefe pep ezel kaout gwirioù kevatal : personal eo an hall vroadoù, hag an dellid anezho n'eo ket diouzh ar vent. Ingal a rankfe bout an holl izili. Ahendall maz eus kevredadoù e diabarzh an dreist-stad-se e pouzzeret ouzh Breizh bezañ kenklet ebarzh hini ar broioù keltiek, ha n'eo ket ebarzh hini ar broioù latin. Kement-se am eus merket endeo.
(2) N'emaomp ket a-enep d'un dreist-stad keltiek, eveljust, ma ranker c'hoazh en em zifenn er bed da zont, e vo ret hen sevel, ha marteze e rankfe an dreist-stad keltiek-se bezañ sterniet en ur c'henurzhiaour brasoc'h evit bezañ gwarezet ha diwallet diouzh kenurzhindurioù all ma vefe pelloc'h diouzh hor re o sturvenazioù politikerezh he buhezouriezh da skouer. Hogen anat eo n'eo ket kement-se ar pezh gwellañ a zo da hetiañ.

E SIGUR KEVREDADELOURIEZH

I

Bez ez eus tud bremañ e Bro-C'hall hag a embann ez int a-du gant ar gevredadelouriezh. D'ar c'hentañ sell e seblant an dra-se bezañ souezhus, rak brudet awalc'h eo ar C'hallaoued da vezañ kreizennourion touet. Koulskoude n'eus mar ebet : bez e kaver un toullad Gallaoued a vefe prest da adaozañ Bro-C'hall hervez pennvenezioù ar gevredadelouriezh ma reomp-ni kement a drouz endro dezhi. Eveljust ne c'hallomp nemet bezañ a-du gant an dud-se ha tuif d'o menozioù a-greiz-kalon; ken bamet omp zoken gant ledanded spered ar C'hallaoued-se maz omp anaoudek outo. Ne c'hoarvez ket bemdez ganeomp keout gant estrenion eus ar broioù bras hag a vefe gouest da gompren hor savboent.

Arabat eo deomp evelato alterif gant al levenez ha diskleriañ n'eo ket mui dav "stourm" peogwir ez eo ar C'hallaoued darev da reif hor goulannou deomp. Da gentañ n'eus nemet un niver bihan-tre a dud di-stroll betekhen eus ar C'hallaoued-se.

Ha d'an eil ne weler ket mat-tre penaos e c'hellfent bezañ trec'h un deiz hep traizañ dres ar pennvenezioù ma emgannont evit o sevenif : bez e fell dezho dreistholl hervez o c'hallaouenn "Fédération" adaozañ hag adnevezif hervez diazezoù nevez buhez politikel Bro-C'hall. War a seblant, en diwezh holl, ne vefe mui ezhomm eus ar strolladoù politikel bras e kaver bodet an dileuridi anezho er mare-mañ e Paris, rak kenurzhiet e vefe buhez politikel ar vro ebarzh frammoù bihan ha distag. Ar c'humun eo a gemerfe darn vrasañ eus galloud ar stad a hiziv. Un darn all eus he galloud a vefe roet ivez da frammoù all, evel ar micherioù h.e. Ar pal pennañ eo tizhout ar werinrenouriezh wirion : ar bobl hec'h-unan ha war-eeun a zlefe kontrolañ ha kaout ar veli. Dileenn dileuridi a dalv nac'hañ ar werinrenouriezh. Gwalout a reer ahendall petra zo c'hoarvezet nevez zo e Bro-C'hall : ar gannaded o deus degaset d'ar gouarnamant ur strollad trec'het ha nac'het gant ar bobl. Daoust ha n'eo ket kement-se goaperezh ? Gwir eo n'eo ar werinrenouriezh neuze, evel m'em eus merket, netra nemet un arsav brezel : kaout ar veli e-unan-penn evel an Nazied, evit sevenif e vennañ da vat, hep skoilh ebet, a venn pep strollad gall ober. Ne fell ket dezho ober gant an nerzh evit an ampoent. Setu holl. Ahendall ez int peuzhefvel ouzh ar strollad nazi. Hogen reizh eo ar gelaouenn "Fédération" o lavarout n'eo ket kement-se gwerinrenouriezh; n'eo nemet ur brezel gwenn etre strolladoù dispac'herion hag a glask lakaat an arigrap war ar stad evit gallout kas da wir a-benn ar fin o uhelvennad. Nemet setu pezh a zo nac'hus omaf evit ar gevredadelourion c'hall : enepstadelourion int; hogen evit tizhout o fal e rankint kemer ar galloud, hag implijout ar stad e doare pe zere evit

he distrujaf. Gouzout a reer e oa ivez eus Lenin un enepstadelour; kredif a rae an den-se e c'hellje an dud en diwazh bezañ sevennat awalc'h evit tremen hep ar stad. Da c'hortoz mervel ez eo ar stad en he yac'haf e Rusia, siwazh d'an dud a rank plegeñ dindan he yev. E gwirionez eo damhefvel emgav ar gevredadelourion c'hall ouzh hini ar beoc'hkerourion; ne c'hellje ar re-se sevenñ o soñj da vat nemet en deiz m'o devo lazhadegat pe dic'halloudet dre heg holl vrezelgarourion ar bed. Ret eo lavarout ez eo un degouezh iskis evito. Afer o deus ahendall ar gevredadelourion c'hall ouzh dispac'herion evel ar gomunisted a venn koustat pe gousto lakaat o frogram da dalvezout e Bro-C'hall. Ha da gredif ez eus e tizhint o soñj en diwazh, evit brasaf damant ar re na vint ket a-du ganto. Rak penaos e c'hellje ar gomunisted - a venn efedif - asantiñ da vezañ diberc'hennet diouzh ar stad na c'hellont ober netra hepti, zoken dre gaer ? Ret e vefe dezho koll o feiz. Hogen peur e raint ? Dav e vefe gortoz ma vefent breinet ha "bourc'hizaet" gant o berzh. Neuze zoken e rankfed doujañ aon emgar ar re a rafe o mad eus ar stad komunist-se hag a biaoufe ur veli diharz. Ar pezh a fell din merkañ en diwazh eo ez eo diaes da werinrenourion wirion bezañ feal d'o sturiennoù p'o devez afer ouzh "dispac'herion". Evit trec'hif enebourion e ranker en em hefvelaat outo. Nemet, siwazh, neuze e koll ar stourm e star.

Ret mat eo spisaat ivez n'he deus ar gevredadelouriezh c'hall netra da emellout war-aeun gant kudenn brodelezhioù ar stad c'hall a hiziv. Bez e c'heller lenn penn-da-benn niverenn diwezhañ "Fédération" hep kavout en disterañ meneg pe damveneg e vefe meur a vroad e Bro-C'hall. Bez ez eus peurgetket enni ur pennad gant Daniel-Rops elec'h e reer anv eus Bro-C'hall evel eus ur vro. E nep lec'h ne gaver linenn ebet o reif da gredif o deus ar gevredadelourion c'hall ur program bennak evit brodelezhioù ar stad c'hall. Marteze o deus. Nemet betek hiziv ne c'hellomp ket gouzout. Forzh penaos n'eo ket ret en em chalañ evit se. Da gentañ e c'heller kredif n'eo ket gant ar C'hallaoued se hor bo darempred evit reizhañ kudenn Vreizh, siwazh. Ha da c'houde diouzh hon nerzh hag hor youl, - muic'h c'hoazh eget diouzh youl vat hon enebourion a hiziv eo salvedigezh Vreizh. Nemet hetif a zleomp evelato e rafe berzh buan ar gevredadelourion e Bro-C'hall, rak daoust pe zacust, prestoc'h ha gouestoc'h da vezañ hor goulennou eget ar re all e vefent.

I I

Ne vörn petra e soñj ar gevredadelourion c'hall diarbenn Vreizh, ret eo anzav e c'heller kavout un xrouez mat hag ur skouer en o emsav. Re emellet omp marteze e Vreizh gant hor stourm evit ar vro, ha re dechet marteze, evel m'em eus resizet em pennad a-zivout peoc'helouriezh, da implijout doareoù-ober a c'hell hon dizenelaat; ar brezel a ges d'ar stad dispac'hel, hag hounnezh

a zo diazezet war ar gwaskerezh. Souezhus eo he defe gelllet stad Iwerzhon mont diouzh an dafjer-se. Ne vörn penaos un dra eston eo deomp-ni Vreizhiz deiz bezañ benet diwar ar patrom-se. Klemm a reomp abalamour d'ar Jakobinelezh c'hreizennezh eveljust, - nemet ma vefe lakaet da dalvezout e Vreizh a-du gant ur Vreizh keltiek. Evit lavarout ar wirionez krenn ha krak, meizaf a reomp Vreizh evel ma vez ar C'hallaoued o bro : an istor politikel eo a ra hini "Bro-Frañs" ha gwir eo ivez ez eo hor breizhadelezh un dibab dreist pep tra; ma n'eus ket eus Vreizh ur vroad, n'eus broad ebet, ha ma ne garomp ket Vreizh ne c'hellomp karout bro ebet.

Nemet, evelato, me gred e rafemp mat o chom hep menoziañ Vreizh dres hefvel ouzh Bro-C'hall, evel m'o deus graet Vreizhiz zo etre an daou vrezel, O.M. en o zouez. Henezh eo a lavare e tles Vreizh dont da gaout tregont milion a geodedourion a-benn 105 vloaz da skouer. Ahendall, a ouzhpenna O.M. e vo Vreizh ast da get. Anat eo en doa prederiet war gwerzennoù Goëthe:

"Du musst steigen oder sinken
.....
....Hammer oder Amboss sein"

Nemet evel m'em eus merket, ar wir vroad ne c'hell ket kreskiñ re e vent anez koll hec'h anien. Ar vroad vras a chomo atav evidon an auzhvroad pe vreizhat pe c'hall a vefe. Ahendall tremenet eo martevez ar broadoù kresk-digresk hervez an degouezhioù politikel hag ar brezelioù. Ewel dres e rank ar vroad kaout ur c'horf, un douar hag ur stad evit bezañ. Met ar c'horf-se ne zle ket bezañ ur c'hrign-bev na dont da vougañ ar spered. Dre ar spered eo e vev ar vroad. En em gemmeskañ a ra hounnezh mui pe vui gant he speredgezh, hag hounnezh a zo druistholl skiantprenet ur ouenn a-hed an istor, evel m'em eus lavaret endeo; pep a weladurezh eus ar bed o deus ar pobloù kozh awalc'h dija evel Vreizh pe Iwerzhon (mat eo kounañ ez int kalz mui da zoujañ eget broadoù nevez evel Roumania, pe ar brodelezhioù diniver dizoloat en Rusia). Kement-se a ziskouez n'emañ ket haelded ar pobloù en o finvidigezh pe e niver o foblañs pe e galloud o arme, hogen en o fealded d'o galvedigezh. Hag ar c'halvedigezh-se ne c'hell bout nemet sikour ha skorañ ar wirionez - pouezañ marteze war ur stumm ispisial anezhi - nemet difenn ar wirionez a chomo bepred o dlead. Anat eo ne vez ket ar broadoù evito o unan.

Gwir eo eta n'eo ket gant ar stad e tle bezañ hor pennañ preder. Rak ma c'hell hounnezh bezañ ur benveg a verzh hag a vuz, pa ne vez implijet nemet gant ur strollad trec'h, e c'hell bezañ, ivez, andon a reuz p'an em zrailh kenetrezo strolladoù enep evit he fere'hennañ hag hec'h embreger evito o-unan hepken. Biken ne lavarimp kement-se alies awalc'h. Empennañ a reer mat-tre,

da skouer, e ve unanet an holl Vreizhiz war dachenn ar vroadelouriezh. Ha neuze e komprener mat-tre ivez e implijfent ar stad vreizhat evit azbeveat ar vroadelezh hag ar sevenadur breizhek en hor bro, peogwir e vefe an holl a-du gant kement-se. Hogen ahendall e vefe reuzius da Vreizh marteze bezañ tennet-didennet etre rummadoù dispac'herion hag a glaskfe implijout galloud ar stad vreizhat evit doareañ Breizh hervez o c'hoant; war var da vezañ goueledet en ur brezel diabarzh e vefe Breizh, rak siwazh, da heul dalc'h-idigezh ar vro gant an estren edoug keit all, eo bet torret da vat hec'h unvaniezh speredel. Ar gwellañ da zingeliñ stabilded ha nerzh ar stad a vefe eta he lakaat ermaez eus an tabutoù politikel, ha kesañ ar politikerezh e-barzh framm ar c'humun, nemet evit pezh a sell ouzh an dibabadurioù arboellerezhel bras : sokialouriezh pe kapitalouriezh ha ne c'hellont bezañ graet nemet e framm ar stad. Hefvel evit an deskadurezh a zo stag hiziv ouzh an arboellerezh.

I I I

Forzh penaos, ahendall, ne c'hell ket ar gevredadelezh bezañ diazezet hep dibab arboellerezhel. Kel e vo d'an arboellerezh bezañ aozet en un doare dishefvel kenn diouzh bremañ. Displeget em eus dija er gevrenn gentañ ne c'helled ket kas da wir ar program-se arak kaout asant ar gomunisted, ha n'eo ket gwirhefvel hen rofe ar re-se un deiz n'eo ket hepken en abeg d'o marksiadelezh na c'hellfent ket skignañ ken aes hep ar stad na zoken marteze hep un dreist-stad, hogen ivez en arbenn d'o menozioù diwarbenn arboellerezh : pep perc'henniezh a-bouez a zle distreiñ d'an holl, da lavarout eo, d'ar stad, lakaomp, an ijinerezhioù pounner, hag a sell ouzh kenvad ar gevredigezh. Ha marteze n'eo ket di-ziazez o soñj : degemer a ray an holl, kevredadourion hag all, e tle servijoù zo evel an hentoù-houarn, ar postoù, bezañ meret gant ar stad hec'h-unan. Ha keit ha ne vo ket distrujet stadoù bras an implaerelourion e ranko an holl vroioù kaout un arme d'en em zifenn. Gwelout a reer ivez e rank ar stad saoz hec'h-unan en em emellout war-eeun en arboellerezh ar vro, divizout d'al labourerion douar petra a zleint kennerc'hiañ, ed pe chatal, dezougen micherourion (pe soñjal hen ober) eus ur rannvro d'eben hervez an ezhomm (damhefvel eo o doars-ober amañ ouzh hini an Alamaned edoug ar brezel), peogwir e rankont kaout an danvez-mañ-danvez da ziaevazañ abenn edkempouezañ o moneiz gwall-vrallet gant ar brezel. E E Bro-Rusia ivez ne c'hell ket an hinienn atav dibab ar vicher a garfe. Implijet e vez gant ar gevredigezh hervez m'he deus hounnezh dober. Amañ avat omp degaset da verzout un dra da sabatuñ : n'eo ket hepken na kement-se en abeg da venozioù ez eo moustrat an den hiziv, pe kentoc'h, alies ne vez hesket inet ar menozioù gant ur stad nemet dre ma lakaont an argoll he raktresoù ar-

boellerezh, da lavarout eo, he bezañ en diwezh, peogwir e tenn ar stad he galloud eus pinvidigezhioù ur vro piaouet ganti⁽¹⁾. Anat e teu da vezañ neuze e ranker tizhout daou bal arak diazezañ ar gevredadouriezh : da gentañ kas da get pep riskl a vrezel etre ar stadoù, Lavarout a ra ar gevredadourion eveljust hor bo sevenet ar mennad-se p'hor bo diazezet ar gevredadouriezh. Ne gredan ket avat e asanto ur stad a vremañ gant an aergelc'h etrevroadel a stadoù c'hoazh er brezel, ha pezh hen diskouez anat, eo e klask ar stad saoz lakaat ar servij soudard dre ret war ar Saazon. N'ouzomp ket ha dont a ray a-benn. Arouezius eo hec'h emzalc'h avat. Bez e tleer eta distrujañ spered tleer hen distrujañ ivez evit kas da get an arme, rak hounnezh a zo bet a-viskoazh ur benveg mac'hañ spontus. Hen distrujañ a ranker ivez peogwir ne c'hell an arboellerezhioù kent pe goude brezel (e Bro-Alamagn pe Bro-Rusia arak ar brezel - ha Bro-Saoz bremañ warlerc'h ar brezel) nemet diazezañ ha diaesaat buhez an dud. Ha dreistholl n'eo ket un dra natur e vefe gant ar stad ken bras galloud, evel an hini a zeu diwar he renerezh war an ijinerezh pe zoken al labour douar. Hounnezh a zo deut d'hen kemer peogwir e oa ret dezhi e sell d'ober brezel. Setu ma rank ar c'hevredadour bout ur peoc'h-elour da gentañ.

I V

Ne c'hell eta bezañ kevredadelezh wirion ebet anez urzhiañ en un doare all an arboellerezh. Evel ma rank an dud en ur stad kevredadel kaout krog eeun er politikerezh, e tleont ivez meret ha kontrolañ o-unan an arboellerezh. Ar stad a dalv "an holl" a-dra-sur; hogen "an holl" a dalvez ivez "nikun"; ar pezh a zo d'an holl n'eo da nikun. Elec'h kaout meur a vestr kapitalour, n'an deus mui ar micherour nemet unan ar stad. Ne ra nemet kemm mestr, rak piv ar viro ouzh ar stad d'ober gounidoù diwar labour er vicherourion (maz a fall ar bed ganti da skouer). Eveljust e talvezo ar gounidoù-se d'ar stad, da lavarout eo, d'an holl. Aes eo c'hoari gant ar gerioù e gwirionez. Nemet merrout a reer amañ arvar ar stad hollc'halloudek : lakaat an ungalouriezh elec'h al lias-kapitalouriezh.

Kement-se ne c'hell ket kennebeut eta bezañ un uhelal. N'eus tu d'ar micherour da vont diouzh an diberc'hennelzh nemet ma c'hell hemañ piaouañ

(1) Anat eo e nac'h gouarnant Bro-Saoz anzav ar vroadelezh kembreat, peogwir dreistholl he deus ezhomm eus Kembre en he raktres arboellerezhel goude brezel. Re e zizurzh hag a drubuilh a vefe diwar sevel ur stad kembreat distag.

e unañ binvioù al labour, ha gwerzhaf evitaf e unan ar frouezh anezhafi. Ret eo resizañ ez eus da hatif en em ledfe muioc'h-mui an ijinerezhioù skañv en hor bro, rak ar re-se a c'hell bezañ aesoc'h e dalc'h ar vicherourion. Evit ar re all ez eo un afer all, egiz m'hon eus merket endeo, nemet arabat e vefe avalato o lezal re vuan hag a-grenn etre daouarn ar stad ; regrefv e vefe ar stad, da re bell ez afe he levezon. E gwir n'eo ket dres e vefe krefv ar stad a zo fall. Ma vefe neptu, ne vernfe ket kalz. Nemet tentet e vo atav tud ar strolladoù dispac'hel d'hec'h aloubif keit ha ma chomo ur benveg re narzhus da furmañ ha da verat an engroezioù. C'hoantaat a zleomp eta e vefe enket ar stad, ar muiañ ma vo gellat, d'he c'hefridi natur : harpañ buhez kevredigezhel ur vroad hep en em emellout en he buhez speredel : rak houmañ eo an hini uhelañ hag an hini bouezusañ, hag ar stad ne zle he gwariañ e nep doare : Breizh a vo kristen pe varksiat, hervez ma vo kristen pe varksiat darn unan he renerion speredel, skrivagnerion pe arzourion ; ne vo ket avat abalamour ma vo al liv-mañ-liv gant ar stad. Dreist d'ar c'hostezennoù a tle bout houmañ.

Amañ e kavomp marteze un diskoulm da gudenn ar stadelouriezh am boa diskleriet en ur pennad all⁽¹⁾. (Gant ma vo degemeret gant an holl eveljust ha peurgetket gant ar gomunisted). Diskleriet em boa er pennad-se na c'hellemp ket adsevel ar vreizhadalezh hep ar stad : ur c'henurzhiaour prevez bennak en defe an hevellep pal a zlefe en em hefvelaat ouzh ar stad evit trec'hiñ. Ni ivez hon eus hon dogmann ahendall : bezañs broad Vreizh ; ha ma ne gredomp mui enni, ha ma ne reomp mui diouti, e kollo hon ober pep talvoudagezh. Mont a ra da get ar brezhoneg ahendall dre maz eo bet gallekaet buhez kevredigezhel Breizh. Hogen bez e ouzomp ez eo dres kefridi ar stad ober wardro buhez kevredigezhel ur vroad. Setu eta na c'hellimp advrezhonekaat hounnezh hep advrezhonekaat ar stad da gentañ ! ne c'heller ket adsevel hep ar stad ar pezh a zo bet distrujet ganti. Ahendall ma tierbedomp ar stad "tuek" n'eo nemet pa ne c'heller ket kaout an unvaniezh klok enni hag emeur war var neuze da waskañ reoù zo eus ar geodedourion. Nemet, dre ziviv e vo krouet stad Vreizh gant broadelourion m'eo o uhelvennad uheloc'h adaozañ ur Vreizh keltiek egiz m'hon eus resizet : ne vo ket enni a lec'h a-berzh-stad evit Gallaoued pe Italianed,

(1) E sigur ar stad nep-tu, skrivet em eus em pennad n'he doa bet ar stad da lezenn da gentañ nemet he berzh-hi. Ret eo gouzout koulskoude na oa ket dres nep-tu ar stad en Henanvez ; hengounioù ar vojenneg latin-gresian a oa stag ouzh ar stad roman. Ar pezh a fell din merkañ eo na soñje ket an enebourion - ar gristenion da skouer - en un doare spis hag emskiantet an implijout ar stad roman evit skignañ o relijion. Er Grennamzer e voa damhefvel an traoù. N'eo nemet nevez awalc'h zo ez eo bet meizet an aloubif ar stad evel un doare-emgannañ talvoudus-tre.

pe n'eus forzh pe vroiz all evel ma n'eus ket a lec'h e Bro-C'hall evit Breizhiz pe Tchec'hiz, pe e Bro-Danmark evit Alamaned. Goulakaat a ran ivez - daoust n'eo ket sur e c'hoarvezo - e vo savetet Breizh gant tud a bep liv Lenin - o deus ar broadoù bihan ar gwir d'en em zisrannañ diouzh ar stad vras mac'hom m'oant stag outi ; ha gouzout a ran ouzhpenn e kaved ur strollad komunist broadel e Katalounia da skouer. Neuze n'eo ket evel komunistad e c'hellfe raor din na gar ket komunisted Bro-C'hall o bro ; ne gred kentoc'h n'he c'hartra o menoziadeg komunist. (Setu pezh a laka diwirhefvel ivez e kemerfe pezh adelourion evel d'ar "astenn an dorn" dezho ; ni eo hon eus staget gant an ervenn, ha betek ar penn emichañs e renimp ar c'hrogad. Hogen disiziañs o deus ar Gomunisted ouzhimp, ha neuze ne vefent tuet d'hon harpañ, nemet ma vefent sur d'hon ren).

Petra bennak, lakaomp e vefe adsavet Breizh gant tud o c'hredennoù dishefvel hag enebet zoken. Penaos mont diouzh ar brezel diabarzh, ha mirout ouzh kendrailhadegoù ar strolladoù gall d'en em gavout adarre en hor bro ha d'he drastañ ? N'eus nemet un ode : ober eus stad Vreizh ur stad kevredadel. C'hoazh e ranko an holl Vretoned bezañ a-du ganti, ha dreistholl ar Gomunisted. Pe neuze en em gavomp en hent dall ma sko wardu ennañ ar gevredadelourion c'hall ; penaos rediañ ar strolladoù d'en em genurzhiañ e framm ar c'humon, o enkañ da vezañ kredennoù rik hepmuiken, - pa ne c'hell ar gomunisted lakaat o meizadurioù da dalvezout nemet e stern ar stad, da skouer ? Pe neuze difezañ doare an arboellerezh e stern ar stad evel ma lavaran uheloc'h.

V

Dres, dic'hallus eo goulenn kement-se digant ar strolladoù evit an empoant a-dra-sur. Nemet ur spi e chom avalato : marteze ez aio ar c'hoantegzhioù politikel war zistanañ en amzer da zont. Diskoulmet e vo ar gudenn gevredigezhel rik, ha marteze, e vo gant tud na vo ket marksourion anezho, daoust ma tegemerint al louzoù arboellerezhel aliet gant ar gomunisted. Neuze avat e teuy ar gomunistiezh da vezañ un doare prederouriezh pe speredagezh, ha ne vo ken hoalus d'an engroezioù ; ar re-mañ a skuizho ahendall, ha deiz pe zeiz e tegouezho ur c'hempouez politikel bennak a rpio peoc'h d'ar speredoù hag a aotreo soñjal e' kudennnoù nevez. En deiz-se avat e c'hell ar gevredadelouriezh ober berzh ha trec'hiñ. Hogen ne gredan ket e c'hellfe ober a-ziagent. Ne vern penaos e c'hell pouzhas daomp un tu da dec'hout diouzh an dizunvaniezh speredel a c'hellfe bezañ e Breizh dieub. Darberif e c'hell ivez ul louzoù da

gudenn ar broadelezhioù a greskfe hag a rankje divroañ : bez e c'hellfed degemer o defe tud ur vroadelezh disheñvel ar gwir d'en em vodañ ebarzh kumunioù dezho, gant o skolioù hag o lezennoù broadel ma vefent niverus a-walc'h. An harzoù neuze n'o defe ket marteze kement a bouez; ha setu emichañs e petra e soñje Roparz Hemon en e bennad diwarbenn ar vroadelezh hag ar stad, pa asure e tlefeñt bezañ distag en amzer da zont. Hogen ret eo lavarout e rankfe ar vroadelezh forzh penaos kaout un "oaled". Anez se ne c'hellfe ket padout. Ha pezh a fell deomp sevel da gentañ ni Breizhiz, evel ar yuzevion, eo hon oaled broadel, ma c'hello hor gouenn en em skignañ dioutañ. Nemet ermaez eus Breizh e rankfemp asantiñ eveljust d'ar vreizhadelezh bezañ un dra brevez ha na c'hellfe talvezout nemet e framm ar c'humun. Kenvevaf a rafe evelse kichen ha kichen broadelezhioù disheñvel evel e Bro-Helvetia. Un diskoùl ma vefe degaset evelse en diwazh da gudenn ar vroadelezh hag ar relijion e buhez ar gevredigezh a hiziv. (1)

d'ar 26 a viz C'hwevrer 1947

An Tremener

o o o o

(1) Dav e vefe deomp degemer diouzh hon tu e c'hellfe estrenion en em genaozañ e Breizh war dachenn ar c'humun. Stoum a vefe c'hoazh etre ar broadelezhioù ma karer, hogen ar broadoù ma vefe stank ar vugale enno eo a drec'hfe en diwezh. Eveljust e ranker degemer e vefe dav kaout ur vevenn hag ur reolen evit reizhañ kement-se, evel evit reizhañ kevezerezh ar menozioù hag e diabarzh pep stad.

DISKLERIADURIOU

Kevet em eus mat embann mizher dudius ul lenner evit kaout tro va-unan da reif un nebeut diskleriadurioù a-zivout menozioù zo am eus displeget ebarzh pennadoù araok.

Anzav a rin da gentañ n'eo ket sklaer tre marteze stumm dezrevell ar pennad "A-enep d'ar vroadelouriezh rik". En em zigarezif a ran. Koulskoude ne gav ket din e vefe ennañ dislavarezh. Marteze e c'hello al lennerion hen meizañ p'hor bo resizet ster gerioù zo.

Evit kompren dres petra a felle din displegañ e kavrenn diwezhañ ar pennad-se e ranker adlenn ur pennad all a zo deut ermaez e miz Du diwezhañ "Penaos embreger hor stoum en amzer da zont" (An dibenn dreistholl). N'em eus graet nemet adverat hag addisplegañ an hevelep menoz : un doare aesc'h ha buanoc'h marteze da c'hounit ar Vretoned a zo e dalc'h strolladoù ha menozioù estren eo prezeg ar vroadelouriezh dezho war un dachenn voutintrezo ha ni. N'eus ket tu marteze da gemm menozioù ar stourmerion gomunist pe socialist e Breizh. Nemet evel ma kredan n'eo ket ar c'hallgarouriezh a ya d'ober ar pep pennañ eus o menozioù, em eus spi d'o degas da stoum evit o uhelvennad war dachenn Vreizh. En ur ger barr ne fell ket din ober anezho en araok anebourion deomp, (ha soñjal a raen ivez e skouer Katalonia). Marzet em boa o doa kalz Bretoned disfiziañs ouzh ar vroadelourion en abeg ma seblant ar re-se chom hep ober forzh eus kudennoù pouezus tre evito, evel relijion, pe kevredigezhelouriezh, h.a. N'eus nemet mad ar vro a gont evito; ar peurrest a zo distardra, ha n'eo ket dav en em chalañ gentañ. Ne c'hellant nemet herzel ouzhimp, rak krediñ a raent na vije plas e Breizh da zont nemet evit broadelourion rik egiz ma oad e diwezh ar mared 1918-1939. (O.M. soñj hoc'h eus a glaske degas ar ouennelouriezh e Breizh). An disoc'h splennañ eo e nac'he darn vuiañ ar Vretoned degemer ar vroadelouriezh er stumm-se hag e oant prederiet gant kudennoù all (An XIXvet kantved eo a zo bet kantved ar vroadelouriezh; degoushet omp-ni avat brogarourion Vreizh ha broioù keltiek Breizh-Veur en ur prantad diaes evidomp, hini ar gevredigezhelouriezh. Neuze eo ret deomp klask eren hor broadelouriezh ouzh techoù soñjal a hiziv eus hor c'henvroiz, o vezañ ma n'emaomp ket en ur vro hag ha defe miret un emskiant vroadel yac'h. Ahendall, eveljust, e vefe disheñvel. Rak ar politikerezh hon eus erbedet a zere ouzh ur vroad klañvidik ha na c'heller ket di-huniñ en un taol). Un abeg all em eus : mont diouzh ar brezel diabarzh e Breizh ar pellañ ma vo gelllet, reif tro d'ar vuiañ e Vretoned ar gwellañ da dremen hep bezañ treitourion. Gount warno en em ouestlañ da saveteiñ Breizh daoust dezho bezañ kontammet o spered gant menozioù gall. Da vihanañ e c'hellimp lavarout gant reizh n'hor bo ket o radiet da vezañ anebourion da Vreizh,

egiz m'am eus merket un tammig uheloc'h, ha ne vimp ket bet kiriek d'ar brezel diabarzh a zegouezho un deiz ma chom Bretoned zo a-du gant an estren a laz hor bro.

Bremañ e gwirionez, n'ouzon ket petra a zisoc'ho eus ar c'hinnig a ran amañ. Evit ma taolfe frouezh e vefe ret ma vefe henchet ha kalennet kleiziz Vreizh gant tud eus o zu a-dra-sur nemet komprenet mat ganto don kudenn Vreizh (hag ur gudenn vroadel eo) ha broadelourion da gentañ penn. An dalc'h a chom gouzout hag asantiñ a rafe sosialisted ha komunisted Vreizh da c'horren o brogarantez dreist d'o feiz kozh, ha da zilezel hengounioù gall zo, evel al likouriezh savet gant filosofed an XVIIIvet kantved. Neuze avat ne vefe ken o sosialistiezh pe o c'homunistiezh netra nemet un arliv, evel m'eo un arliv ar gateligiezh evit ar gristenion a zo broadelourion hiziv.

Pezh a zo, eo ne c'heller ket gortoz adaozañ ur vuhez demokratel e Breizh egiz maz eus unan e Bro-C'hall kent d'ar sosialisted h.a. bezañ deut da vezañ broadelourion kendrec'het. Nemet kement-se ne c'hall ket c'hoarvezout anez da gleiziz mont diouzh arroudenn an hengoun gall, evit krouiñ o hengoun breizhat dezho o unan. Ha me gred, na glasko ket diouzhtu ar re-se pa vint deut d'ar vroadelouriezh sevel strolladoù distag, ma vez re start ar stourm evit Breizh. Eveljust em eus epi a vo tu da c'hounit an emgann e peoc'h, ha neuza e vo gallet deiz pe zeiz sevel strolladoù breizhat demokratel. Nemet ahendall e vo neuzeit dishefvel kreñn buhez politikel Breizh dreistholl ma pad pell ar c'had. N'eus nemet gwelout pezh a zo c'hoarvezet gant Connolly : n'en deus ket renaviet he deus e gaset da vervel evit Iwerzhon war un dro gant tud digenfeiz dezhañ e pep keñver a-wechoù nemet a-keñver broadelouriezh. Un dra bennak gwir a zo eta e menozioù D.M. (Ret e vo hen spisaat un deiz). Un hent da zieubiñ Breizh eo ar vroadelouriezh rik; nemet tamall a ran dezhañ bezañ erpedet re un hent diaes ha zisklus. Bez ez eus skouer Iwerzhon eveljust. Nemet bez ez eus ivez hini Katalounia. Hag arabat eo deomp dic'houzout hounnezh. Ret eo deomp klask ar muiañ ar gwellañ un ode d'en em glevout gant reoù zo eus hor c'henvroiz toulllet ha trallet gant an estren. Deiz pe zeiz e zeuio deomp an diskoulm klok hor bo ranket gourzezañ keit all. Ret eo deomp savatañ da gentañ broadelezh ha bezout Breizh. Ha mar deo gwir e rank ur bobl kaout un unded speredel bennak evit sevenañ he c'hefridi ez eo ken gwir all ivez e tleer diazezañ an unvaniezh daoust d'al liesded abarzh ti-zhout an unded-se. En hon darempredoù gant ar C'hallaoued e tleomp ober gant an hevelap damantiz : ma n'eo ket hor rummad-ni a ziluzio da vat kudenn Vreizh e ray an hini a zeuio war hol lerc'h. Gwelloc'h eo amzeriñ eget ober digoulz, ha degas reuz hep ezhomm.

Nemet kement-se holl, hen adlavazout a' ran, a zo diouzh un diviz holl-ret; asantiñ a zle Marksiz Vreizh diouzhtu da stourm evit Breizh evel evit ur vroad. Ahendall n'o devo plas ebet e Breizh warc'hoazh. Dezho da zibab,

pe mont a-du gant an estren pe sikour o bro, hag an abretañ a vo ar gwellañ, ar gapitalouriezh hag a-du gant ar gevredadelouriezh e Breizh - e vo dines-vo, eilpennet ha adstummet Breizh ganeomp. Evit ar wech kentañ abaoe kantvedoù hon nerzh en hon niver hogen en hor youl, hag hounnezh zo divent, egiz m'am eus lavaret ur pennad amzer zo. Ne zalc'himp kont pa vimp trec'h nemet eus menozioù zo hag o deus diwabenn tra pe dra, nemet goulenn a reomp diganto stourm evit Breizh forzh penaos. Kounent.

En diwezh, setu penaos e c'hall bezañ diskoulmet kudenn Vreizh.

1) Pe gant broadelourion rik stadalourion, digristen, evel mox eus bet un dornad anezho etre an daou vrezel. Ar re-se ne raent ket gant ar werin-renouriezh, da lavarout eo, gant ar bruderezh etouez ar bobl; rediet e oant da c'hedal un taol dispac'h bennak a skubfe ar renerion c'hall hag ar rummadoù tud a roe harp dezho. Goude ma vije bet diac'hubet an dachenn e savent ur stad vreizhek krefiv, kreizennet egiz hini Vro-C'hall, a-du gant un impal-aerelouriezh vreizhat, diouzh ma c'hallfe, ha diazezet da gentañ war laosk-antezh hag aon darn vuiañ Breizhiz. Araok ar brezel e oa ret d'ar vroadelourion-se en em skorañ war menozioù estren zo.

2) Pe gant broadelourion a-du gant ur gelennadurezh strevroadel bennak pe kristen pe marksiat (soñjomp er pezh a c'hoarvez bremañ er Vietnam elac'h emañ lod muiañ ar vroadelourion a-du gant ar varksiadeged, ha soñjomp en Iwerzhon a voe dieubet gant kristenion evel Padraig Mac Piarais). Emichefs e rafe ar re-se gant ar werinrenouriezh epad ur pennad evit gounit o fobl d'o menozioù. Nemet ma vefent rediet en diwezh gant ar gouarnamant gall da skouer da ober gant an armoù, ha ma vefent o-unan penn o trec'hiñ, splann eo e rofent ul liv ispisial d'ar vro. Resizomp shendall, koulskoude, ez eo ledan awalc'h tu ar gristenion kevredadelourion hag enep-kapitalourion, "socialisted" a c'heller kavout en o zouez. Strishoc'h eo an tu marksiat, peogwir o deus ar re-se ur program arboallerezhel resis. Pezh a ranker merkañ hepken eo he defe Breizh un dregorfoniezh bennak a-berzh-stad kouls lavaret. Marteze e vefe kostezennoù all, nemet n'o defe ket kalz a levezon war ar vro, peogwir n'o defe ket kemeret perzh bras en he diubidigezh.

(Amañ c'hoazh ne vefe nemet ur strollad o stourm hag o trec'hiñ; goude ma vefe tud a bep seurt liv ennañ, ne vernfe ket kalz, rak ar rener ha darn vuiañ an izili eo a gontfe neuze).

3) Pe neuze gant Marksiz ha kristenion, broadelourion, o kenstourm en un talbenn, hogen kenurzhiat e strolladoù dishefvel. Neuze eveljust ne vefe

ket kenetrezo an enebiezh a gaver bremañ estre ar strolladoù gall, dreistholl m'o defe ranket ar strolladoù breizhat kenstourm pell amzer. Pies e vefe Breizh neuze. Rennet e vefe he buhez politikel, ha c'hoari ar strolladoù a gendalc'hfe egiz gwechall. Ar pezh a rankfemp diwall dicoutañ neuze eo ar brezel diabarzh. Marteze e c'hellfe ar gevredadelouriezh reiñ deomp un ode, gant ma vefe degemeret gant an holl; ar werinrenouriezh "eeun" ivez a c'hellfe. Nemet ur c'hoari dafjerus eo. Ret eo lakaat ar stad dreist d'ar c'hevezadegoù politikel. Implijout ar stad ne c'heller nemet paz eus unvaniezh.

Setu erfin un diskleriadur diwehafi diwarbenn div lavarenn a ziskouez en em enebiañ ebarzh ar pennad "Buzutallerezh".

Skrivat em eus he defe Breizh en amzer da zont kredenn ar re o defe stourmet ar muiañ evit he dieubiñ. Eveljust, en un Europa a lezfe pep bro dieub d'en em aozañ egiz ma karfe. Hogen un degouezh all a zo : Breizh a c'hello bezañ kenklet en ur rannved hag a vo unneuziet he menoziadeg. Lakaomp trec'h ar gomunistad en Europa. Ar pezh a chom gwir atav ahendall eo ez eo diaes da Vreizh kaout ur gredenn ispisial krenn dezhi, ha kement-se a felle din evezhiañ.

d'an 3 a viz Meurzh 1947

An Tremener

A D S E V E L

I

Setu ouzhpenn 6 miz e oa bet harzet A.A.T. Gouzout e ra hol lennerion pe dro-widre o deus implijet ar gargidi c'hell evit mirout ouzh hor c'hel-
aouenn da zont ermaez : sañset abaoe miz Meurzh ez eus gwir da embann ur gel-
roer da neb a garer. Deut eur eta da gounañ deomp, warlerc'h niverenn 6 hon
eil rummad n'hor boa ket an tikadoù paper-se hag e oa dav deomp o goulenn e
Paris. Da lavarout eo e oa ret deomp gortoz 6 miz da vihanañ, - ha marteze
en ener en diwezh, - ebarzh gellout embann A.A.T. endro. Lavaromp diouzhtu
n'omp ket bet re nec'het gant an "ukase" nevez; deut e oamp da vare an shanoù
ha bez e felle deomp dreistholl embann A.A.T. ebarzh ar strollad a oa da
vezañ savet. Hogen ne zujomp ket abenn da gavout tud ar bagad-ren azaoz fin
miz Eost. Kelaouenn brevez ar strollad e vo A.A.T. bremañ eta; ne c'hello ket
bezañ gwerzhet; ha n'eus nemet un tu d'hor mignoned d'he bevañ : kavout izili
niverusoc'h-niverusañ da "Emsav Pobl Vreizh". Ahendall hon eus kavet gwel en
em glevout gant tud all evit lakaat da zont ermaez ur gelaouenn a oa da vezañ
skignet ha gwerzhet e pep lec'h⁽¹⁾; krediañ a ran e vo frouezhus ar c'henlabour
nevez-se, rak dizezet eo war genlealded, ha prometet ez eus bet din a vija
broadel forzh penaos spered ha displegerzh "Le Peuple Breton". Setu gouestl
sklaer ar rener. N'hon eus abeg ebet d'e ziskrediañ, gouzout a reomp ez eo ur
briggerour hag anavezout a reomp e ampartiz kelaouenner. Aet eo faezh hiziv
gant ar politikerezh rannvoel; netra n'e zisrann diouzhip eta. Mat e vo
harpañ "Le Peuple Breton" gant ma ray ul labour broadel yac'h.

E sigur difenn trumm ar pennadurezhioù gall da embann A.A.T., n'eus ket
kalz a addisplegoù da ober. Farsus awalc'h e oa an digarez o doa kavet, ha
lu dreistholl, ret eo hen anavez. Diaes eo reiñ un abeg resis d'o menoz. Marteze
eoa pe klask gounit amzer; m'hor bije gallet stagañ gant ar bruderezh a-zevri
hor bije gallet stourm marteze en dilennadegoù diwezhañ. Na gav ket din o doa
kement-se c'hoant da derriñ lañs an emsav da vat; doareoù all garvoc'h e zou-
jent bezañ kemeret ha ne gredent ket ober. Hogen bez e kreden kentoc'h e felle
dezho hepken daleañ hon emled. Ha dam-spi o doa ivez hor bije fallgalonet.
Warbouez nebeut-tre a dra ez eo buhez an emsav er mara-mañ : awalc'h e vefe
da unan eus ar baotred o deus sammet warno leviañ adarre politikerezh Breizh
wardu ar vroadelouriezh digalonakaat evit ma vefe goueladet an emsav-se, ha

(1) Gant Martray hag ar "Peuple breton".

martereze da vat. Rak stad ar brezhoneg ne c'hell ket gouzefv gourzez. Ahend-
all, marteze awalc'h e voe divizet an difenn gant kargidi isderezh, ha n'o
doe mennad spis ebet, nemet bezañ direbech aberzh gouarnamant Bro-C'hall.
e vije deut ar spierezh zoken un emsavadur aberzh-stad e "bro ar Frankiz".
N'hon eus ket lec'h amañ da gomz eus an enklaskoù a zo bet graet e Kernev-
diwarbenn stourmerion zo hag ar c'helc'hioù keltiek dra vras edoug an hafv-
mañ, Mevelion ar gouarnamant a zo bet spontet ivez gant berzh an hevelep
kalc'hioù. Frouezh o c'hounnar hag o aon eo bet ar pennadoù fuloret, drouk-
youlek ar stumm anezho, hag a zo deut ermaez nevez zo war an "Télégramme".
E gwirionez n'eus netra nevez e kement-se. Brudoù iskis a zo bet lekaet
ivez da redek epad mizioù kentañ ar bloaz-mañ : gortoz a rae ar bolised drouk
dro vat evit hor bac'hañ, h.a.. M'hor bije selaouet ouzh kement gourdrout
a zo bet graet deomp he dije "An Avel" paouezet a zont ermaez adal an niv.
4-5. Ne reomp ket kalz a forzh eus kement-se. Ar pezh doaniasañ a zo, avat,
eo n'hon eus ket kavet ar skor hor boa ar gwir da gaout aberzh an emsavarion
d'ar mare-se. Reoù zo o deus hor pismiget en abeg m'hor boa diskouezet re
splann e oamp Bretoned, ha n'eo ket Galloued. N'eo ket un dra da lavarout
evelato, droistholl p'emeur war var deiz pe zeiz da vont d'an toull-bac'h
en abeg da se. N'ouspet gwach hon eus klavet an hevelep diskan : ret eo lav-
arout gevier rak n'omp ket krefv awalc'h. Hogen n'eus ket fellet deomp plegañ
rak kentañ diviz eus frouezhusted un emgann eo anaoudegezh ar pal. Warbouez
toullañ en em doualler? Rak-se ne c'hell nep bruderezh breizhat bezañ efedus,
ma ne laka ket anat ez eo evit Breizh hor bro, hag hor bro nemeti, eo e
stourmomp. Gouzout a reer na c'hell ket Breizh bezañ saveteet hep emskiant
vroadel : hor pal pennañ eo he dihuniñ - ne vern amañ an doareoù-ober - ;
ha pezh a zo sur eo na vo ket adanaouet an emskiant bobl-se etouez Breizhiz
ma anzavomp, pe ma reomp van da anzev, ez eo Breizh ur rannvro c'hall. Oiaes
e kavan distrañ war en "egwyddor"-mañ, hogen ret eo hen ober hiziv c'hoazh,
rak bez e c'hellfe tud klask adarre sevel kazetannoù gant arc'hant broadel-
ourion evit asurif ez eo Breizh rann eus Bro-C'hall. Egiz m'em eus lavaret
meur a wech n'eo ket gant gevier e saveteer ur bobl.

I I

Rak-se eo hon eus savet hiziv ur strollad breizhat nevet m'eo e bal
diskleriet stourm evit Breizh, hor broad, hag he saveteñ hep klask en em
guzhat nag en em zigereziñ. Tud nevez, yaouank flamm darn anezho, dianav
c'hoazh, hag hep skiantprenet evit ar poent eo ar renerion anezhañ. N'int
bet degaset da gemer ar c'hargoù-se - ha pounner int - nemet dre garantez
vreizh. Anaoudegezh vat a zleomp reiñ dezho, ha muioc'h eget kement-se, -
sikour, ha sikour gwirion ha fetis, n'eo ket avelañ ar c'homzoù hepken.

Rak heptomp ne rajint netra, - ha ni muioc'h egeto c'hoazh eo a ray ar strollad
ni eo a lakay ar strollad da greskiñ ha Breizh da drec'hiñ. Ingal ha kevatal
eo kiriegezh pep stourmer er strollad ha dleout a raimp deskif dres en amzer
da zont pouez da galz tud barrek da gemer parzh e buhez ar strollad, - a zo
muioc'h - na c'hella ket ar strollad ober berzh hep o skoazell, hag a vefe
re dechet da blegañ d'o diegi pe d'o noulantiz, - ne venegen ket aon ha
laoskentez, rak neb a bleg dezho n'hall bezañ ur "Brezhon". Peogwir ez eus
bet roet deoc'h eta ur benveg dieubiñ Breizh, ret eo deoc'h hen implijout;
rak ahendall e vo bet foranet hor poan, dispignet hon nerzh en aner, ha lezet
Breizh en hec'h argoll ur wech ouzhpenn.

Mennad ar strollad hon eus displeget meur a wech : krouif ur vuhez po-
litikel breizhat, evelse adsevel emskiant pobl ar Vretoned, erfin dre-se
lekaat Breizh en he flomm endro. Lakaat a reomp adsevidigezh un emskiant
pobl yac'h etouez ar Vretoned ar c'hentañ penn, rak ezhomm hon eus ag ar
varrenn-luskañ-se evit sevenif hor pal pennañ. A-dra-sur e van bev c'hoazh
ar vreizhadelezh hag ar garantezvro e kalonoù darn vuiañ ar Vretoned, ne vern
a be gorn-bro pe a be renk e vent. "Santout" a ra ar Vretoned da vat ez int
Bretoned. Hogen dav eo deomp reiñ un dalvoudegezh resis d'ar pezh a santont,
da lavarout eo deskif dezho n'o deus nemet ur vro : Breizh an hini eo. Pa vo
graet kement-se, e vo saveteet pep tra. Ha setu amañ kefridi gentañ ar stroll-
ad en amzer da zont tostañ.

Evit he sevenif avat emomp e soñj droistholl da implijout doare-stourm
Kembreiz : bruderezh dre ar wask, bodadegoù kelaouif ha sklerijennañ, dilenn-
adegoù. Daellet ez eus bet ouzhimp nevez zo e oa fall diskouez pegen nebeut a
"vroadelourion" a zo e Breizh - en derou da vihanañ. Hervez ar re-se - hag a
asur bezañ brogarourion - ahendall, e vefe awalc'h evit kaout holl wirioù
Breizh, ha marteze zoken an emenezh, kinnig ur program breizhat da zan-
veziou kannaded ar strolladoù "Gall" en hor bro. Surtellet hon eus endeo
meno an dud-se. Awalc'h e vo deomp spisañ hiziv ne deo ha ne vo biken ar stroll
adoù estrenion, hag an aliesañ enebourion. Gwellloc'h eo anzav n'eus ket tu
ebet da saveteñ Breizh eget kinnig seurt tu d'hen ober. Feiz o deus an holl
strolladoù "gall" an undad hag e digevrennusted Vro-C'hall. Neuze petra a
c'hortozont c'hoazh ? Evel dres eo anat, hag hen merket am eus a-zigant, e
rankor ober gant an "talbenn breizhat" adarre. Nemet ret eo ivez stourm en
dilennadegoù; anez trac'hiñ enno ne c'hallimp kaout netra da vat evit Breizh;
dilennadegoù; anez trac'hiñ enno ne c'hallimp kaout netra da vat evit Breizh;
a zo gwashoc'h, na vo tu ebet d'an em zifenn ouzh an heskinerazh, ma vez dav
un deiz, ar pezh na gradan ket hiziv, keit ha n'o devo ket Breizhiz diskouezet
o fiziañs ennomp. Forzh penaos ez eo ret deomp bezañ degemeret gant Breizhiz.
A-dra-wir e vo ar strollad a zo bet savet ergentaou pennhez an emsaviou breizhek
all o deus dalc'het Breizh bev betek hiziv. Met disheñvel e vo e zoare evelato,

diouzh hini Pontkalleg pe hini La Rouerie da skouer. Rak neuze e oa awalc'h kaout skoazell un nebeut tud, bourc'hizion ha noblañsoù, evit kemm penn d'ar vazh e politikerezh ur vro. Hiziv an deiz avat ne c'heller netra hep ar werin; ne c'heller ket gwellaat he stad ma ne gar ket. Implijout ar werin o deus graet an emsaviou enepdemokratel o un. Dre ma anavezomp kement-se eo ezhomp omp-ni "gwerinrenourion" (hag a c'hell kaout ur ster "oberiant" e brezh-ez oneg) kredif a reomp ez eo moged klask saveteñ Breizh en despet da Vreizhiz, hep ma oufent zoken ez eus ur vroad eus o bro. Evit dezho diskouez e kredont ar vroad-se, ret eo dezho hon dilouriañ e Paris. Ne bad brientelezh ebet ma n'eo ket gwiziennet don er werin.

Bez e kaver tud all avat evit abegif hor mennad da stoum an dilennad-egoù en arbenn da draoù all. Hervezo e tlefeomp lakaat an emgann enep-komunist er penn-kentañ, ha neuze e vefe arabat distaraat e nerzh hag e efedustad dre rannañ ar mouezhioù. Mat e vo d'ar re-se hag a asur bezañ broadelourion teurel evezh d'an div anataenn-mañ. Hiziv an deiz n'eo ket ken stank an enepkomun-ourion dre ma lakafe ar gomunisted en argoll ar feiz kristen, da skouer, ha kement uheltalvoud a zo bet legadet deomp ganti, hogen dre m'o deus aon rak an dizurzh pe evit o finvidigezh. Hag ar re a zo ouzh o broudañ n'int nemet gallgerourion trêlatet ha na demallont d'ar gomunisted nemet chom hep kehelaf o idol Bro-C'hall evel ma reont-i. Ar re-se eo a harpas an Nazied dre ma estlamment ouzh o c'helennadurezh diwarbenn brogouriezh (ur ger all a vefe reishoc'h implijout amañ avat). E servij an dud-se eo en em lakafomp eta, pa ouzomp ervat ne anzavint biken bezoud hor bro, hag e vefent prest d'hor bac'haf ma kavfent tro, evit brasañ mad Bro-C'hall. A-dra-sur e kreden e tleer stoum evit ar sevenadur kristen. Hogen hemañ ne c'hell bezañ saveteñ e gwirionez nemet gant kristenion, ha n'eo ket tud n'o deus nemet o bro evel doue.

Touellus eo ahendall ar stoum enep-komunour. Ne seblant ket e c'hellfe ar gomunisted trec'hif dre an dilennadegoù hepken; ne c'hellint ket kaout muioc'h e bratikou eget n'o deus bremañ er stad c'hall. Arallneuziañ a ray ar gudann a-grenn ma klask ar gomunisted kemer ar galloud dre heg. Hogen keit ha ma chomo an emgann war dachenn al lezenn ne vo abeg ebet da "ganlabourat" gant enebourion Vreizh war nep digarez. Ni eo an dispac'herion nemeto er vro-mañ ha n'eo ket nac'hus hepken o mennadoù hag a zo gouest da "sevel" un dra bennak. Ma tle bezañ man saveteñ ar feiz hag ar sevenadur kristen er vro ne c'hell bezañ nemet gent an emsav, ma chom kristen e unan. Dav eo deomp anavezout hon dreistelezh ha chom hep he gwastañ. Evit klozañ ahendall e l- varin ne c'hellomp herzel ouzh ar gomunistiezh, nemet dre m'eo anep-kristen, hag evel kristenion, ha d'an eil ouzh ar gomunisted c'hall, diouzh ma fell dezho mirout meizadur Bro-C'hall eus paotred 1789. Ahendall dont a rin en-dro ur wech all war ar gudenn-se.

I I I

Hogen un dra hag a zo sur eo na vo ket al labour politikel an hini ne-meti er bloavezhioù da zont. Er c'hontrol div labour ken pouezus all a vo da gas da benn : da gentañ kelennadurezh prevez ar brezhoneg, onni div gevrenn kenstag, an embann, ha stummañ ar stourmarion yaouank. Pouezusoc'h marteze eget ar bruderezh dre vras eo furmañ ar "frammetaerion" yaouank a warc'hoazh, ar re a vlenio Breizh. Ne dalv ket ar boan hir aradennat diwar-benn-se. Sklaer eo avat na c'hellomp fiziout war hini ebet tra n'en devo ket graet eus ar brezhoneg e yezh nemeti. Bez e oar an holl ahendall ne vo ket asur dezont broad Vreizh keit ha n'hor bo ket "gwrvoudaat" ur sevenadur ma vo endalc'het ennañ ur speredegezh gouest da entañ kalon ar Vretoned yaouank hag a advezo Breizh a-grenn en diwezh. Kement-se am eus market dija. Ar c'hammed brasañ hor bo graet wardu ar pal-se p'hor bo "rediet" ar gouarnamant da zegemer hor yezh er skol. Rak dre an hent-se hon eus spi dreistholl da ec'honañ kelc'hiad hon dibab sevenadurel. Re strizh eo c'hoazh hiziv evit bezañ barrek adal bre-mañ da advrezhonekaat Breizh.

Un dra all a rankimp hep dale mui pladif gentañ a-zevri eo ar yaouankiz, da lavarout eo dreistholl ar c'helc'hioù. Enno ahendall ur berveg luskañ dispar hag un drez vras e vefe a lezel da gouezhañ etre daouarn tud ar stroll-adoù estren e Breizh, evel ar gomunisted, war a lavar. Nevez zo ez eus bet klasket atizañ kasoni an dud ouzh ar c'helc'hioù. Diskouez daou dra a ra kement-se : da gentañ e roer pouez bras d'ar c'helc'hioù ha d'an eil ez eus aon na vefe implijet ganesomp-ni ar vroadelourion evit kas da benn hor mennad. Aon hon enebourion a zle hor c'halonekaat da vont betek penn an ervenn hon eus boulc'het eno. Bez e tle ar c'helc'hioù bezañ savet ha renet gant broad- elourion. Ne vo ket dav dezho eveljust ober labour strolladoù all, hogen ret e vo dezho, dreist pep tra, hefc'hañ an dud yaouank wardu karantez Vreizh, o c'helenn war draoù Breizh, en ur ger berr reiñ dezho un deskadurezh vreizhek. Rankout a reomp anzav er c'heñver-se ez omp pell diouzh bezañ tizhet hor mennad; e Kerne, da skouer, elc'h ez eus kelc'hioù eus ar stankoù ne oa ket e penn an darn vuiañ anezho zenerion ha dezho ur spered breizhat awalc'h evit bezañ barrek da ober brogarourion emskiantek eus ar re yaouank a zeus d'o c'havout. Ne c'hall an dansoù eta bezañ nemet un tu. Arabat dreistholl komz eus "folklore". N'eo ket furlukined paotred ar c'hoarilec'h eo ez omp. Dias eo a-dra-sur lakaat an dud da bleustrifañ hentoù Breizh, hogen ma ne zaver ket a-benn da ober eus ar c'helc'hioù skolioù brogarantez eo kerkoulz deomp dilezel evit ober ur labour all talvoudusoc'h. N'em eus ket da ziskleriañ eveljust penaos e c'heller breizhekaat ar c'helc'hioù. Nemet bez e c'hellan lavarout pezh a zo bet esaet ober e Kernev abaoe miz Ebrel diwezhañ. Savet ez eus bet, egiz ma ouzer, ur c'hevredad evit kelc'hioù keltiek ar rannvro-se.

Preder pennañ ar re a vlenias ar vodadeg diazezañ hag a oa Bretoned em-
skiantezk, a voe lakaet renerion ar c'helc'hioù-se da zegemer e tleent
bezañ estroget muzikerion gouelioù poblal. Paogwir ne oa ket awalc'h a dud
desket war draoù Breizh e pep kelc'h e voe divizet ez afe prezegerion d'ober
koozeadennoù ha prezegennoù dilorc'h diwarbenn an danvez keltiek ha breizhek
en eil kelc'h warlerc'h egile. Evalse e voe graet prezegennoù diwarbenn Bro-
Gembre e kelc'hioù Konk, Kastellin, Bannaleg. Spi a zo da c'hellout ken-
drec'hel gant al labour-mañ, ekerzh ar bloavezh-skol nevez a zo o paouez
kregif; klevet em eus e oa bet graet div brezegenn e kelc'h Konk nevez zo,
unan diwar-benn an Eisteddfod gant un ezel eus ar c'helc'h hag a oa bet eno,
hag un all diwarbenn ar brezhoneg gant un ezel all. Setu eta ur skouer eus
pezh a c'hell bezañ graet. En diwezh e ranker dont abenn da aozañ kentelioù
reeliek war istor Breizh ha war brezhoneg evel maz eus hiziv an deiz e Kemper.

Ur gudenn all a zo e sigur saval kelc'hioù keltiek. Tud zo o deus kavet
paotred ha plac'hed yaouank hag a oa laouen da zont da zeskiñ "dansal". Nemet
holl gwitibunan a oa eus ar gostezenn dehou pe kleiz. Ha neuze paogwir e
rank ar c'helc'h bezañ neptu en deus paouezet an hini a rae war o zro d'o
c'henteliaz war an dansoù. Kengompren e soñj a c'heller : rot eo diskar ar
vojer a zo bet savet gant ar C'hallaoued etre rummadoù Bretoned zo. Dav eo
distrujañ an drougiezh hag an disfiziañs a zo bet savet en hor bro gant an
estren. Hogen goude degemer kement-se e ranker goullenn avalato digant tud
an emsav klask gounit o c'helc'hiaour da vihanañ, ma ne c'hellont ket pleus-
trif war an holl renkadoù Breizhiz a gaver hiziv; ar pezh a zo kasaus n'eo
ket e vefe savet kelc'hioù etouez ar gomunisted, hogen e vefe savet ar re-se
gant komunisted evit degas an dud d'ar gomunistiezh hepken. Kemendall a zo
gwir diwarbenn ar strolladoù all. Ar gwir da vezañ komunisted pe kristenion
pe forzh petra o deus ar Vretoned, nemet pa reont wardro ur c'helc'h e rankont
arzak pep tra klask gounit an dud d'an emsav.

I V

An ali a fell din enklozañ en diskleriadur emañ o paouez reiñ uheloc'h
diwarbenn kelc'hioù h.a. eo e tleomp ober ne vern penaos, hag ez eo gwel
c'hoazh marteze treuzober eget chom hep ober netra. Abaoe m'hon eus savet
ar gelaouenn-mañ hon eus pouezet e pep nivezenn war an arvar m'emañ Breizh
ennañ. Noustpet gwech hon eus adlavaret, hon eus ranezennet, koulz lavaret,
e rankomp ober pe vervel, ha n'eo ket gant ar bluenn e vo saveteat Breizh,
ha n'eo ket dav bezañ arzourion pe skrivagnerion hepken pa zleomp bezañ stourm-
erion. Merzet em eus re alies e komeske Bretoned zo, dispar o menozioù ahen-
all, oberiantiz ha difreterezh, hag e talvezent o diegi lor a hiziv gant treuz-
faltazi diwarbenn brezelif evit Breizh; tud o deus lennet re a romantoù, hag

a zeu da grediñ ez eo Istor Breizh ur romant. Aes eo d'an den padout ouzh
un arvar pell, hag e zasañ hep e anavezout. Aes eo d'an den padout ouzh
marc'hatmat ha gwalc'hus d'ar fouge. Hogen n'eo ket hennezh a saveteo netra :
an hini a gred kemer al lec'h hag al labour disterañ er stourm eo a ray; an
hini a gren marteze, hogen a chom hag a zalc'h. Hennezh eo a zoujomp, rak
hennezh eo a drec'ho. Ne ray ket avat paotr-ar-bluenn, paotr-ar-gambr-studi,
ne ray ket al lazhour kennebet, an hini a anver soudard, dre gomz vray, hag
a zo kement enoret e Bro-C'hall, hag en holl vroioù o deus perzh en heralezh
an Impalaeriezh roman.

Skuizh omp ivez o klevout kan an "Hunvreoù kaer". Kaer pe get, ne garomp
ket an hufvra, rak n'eo ket hufvreerion eo ez omp hogen sevenourion. Ha maz
eus lorc'h ennomp, ne zeu hennezh nemet eus pouez hor c'hefridi emskiantet
ganeomp. Rak gouzout a reomp ez eo tonket d'an emsav en amzer-da-zont deskif
adarre da Vreizh prest d'hen ankounac'haat ez int "tud". Muioch eget ur vro-
adelezh a fell deomp mirout e Breizh: "denezh" hor c'henvroiz hec'h-unan;
bez' e tleo hon emsav, evel hini Kembreiz reiñ al lec'h kentañ da benn-talv-
oudegezh ha da benndellid Mabden; e spezed hag e ene, ha stourm evit mirout
dezhañ e giriegezh hag e ziaubiezh.

Setu c'hoazh pezh a'laka emsav Breizh hiziv dishefvel diouzh kement
emsav all a zo, hag a voe en hor bro. Kemm a-grenn penn d'ar vazh a fell deomp
ha peurdreuzfurmañ Breizhiz, ober ur reveulzi wirion, en ur gerr-berr. Rak-se
ivez ne c'hellomp ket dilezel hor galvedigezh. N'eo ket hor faltazi hor ran,
n'eo ket al lorc'h broadel, evel ma c'hoarvez gant hon amezeion. Hogen anaoud-
egezh ar reizhded, ar c'hoant d'hen adseval en hor bro, hag ar youl da servij-
out ha da uhelaat hor breudaer.

Gwaien, 9 a viz Gwengolo 1947

An Tremener

o o o o

DIWARBENN DIEUBIDIGEZH IWERZHON

Nevez eo he deus Iwerzhon en em ziskleriet dieub ha torret he deus al liammoù diwezhañ he stage c'hoazh ouzh an impalaeriezh saoz. Kentel an darvoud-se eo a fell din tennañ amañ.

Da gentañ e oa anez brezel diabarzh 1920-22 peogwir ez eo deut Iwerzhoniz abenn eus o zaol (ha diriskl kaer) abenn tregont vloaz peoc'h. N'eo ket hepken gwad a zo bet espernet, hogen pinvidigezh a zo bet arboellet, hag arvaroù tec'het diouto. Lakaomp o defe klasket Iwerzhoniz kaout e 1921 dre heg ar pezh o deus kemeret hiziv dre gaer - tost da vat - e vefent bet war var da gavout dirazo ur gouarnamant saoz aheurtet en defe gallet - en ur lakaat ar priz ret evit-se - o fladañ da vat ha na oa harzet e gwirionez nemet gant soñj he brud mat. Abaoe 30 vloaz avat o deus bet amzer ar speredoù e Bro-Saoz d'en em voazañ ouzh menoz un Iwerzhon dishual ha n'int ket bet feuket kement hiziv pan eo c'hoarvezet ar pezh o defe euzhet outañ gwechall.

Evidomp-ni Breizhiz eo heñvel ar pal : kaout ur Vreizh dishual. Istor Iwerzhon avat ne zle ket bezañ didalvez deomp, ha dre he studiañ - muioc'h eget kemer ennañ ur vrizhskouer evit traoù'zo - e tleomp klask chom hep asou-pañ elec'h he deus graet. Arabat eo eta tañhall da E.P.V. bezañ gwak ha bezañ a-du gant ur stad na zere ket ouzh Breizh broad : n'eus nemet an dishualded a zere outi. Embann a raio Emsav Pobl Vreizh atav ez eo se gwir groñs Breizh. Hogen anat eo ivez ez eo teoget ar C'hallaoued hiziv gant rakvarnioù a vir outo da gompren hor soñj. Ahendall ez int ar re greñvañ forzh penaos, pan hor befe zoken ar bobl a-bezh a-du ganeomp. Neuze e tleomp klask en em glevout evelato. Nac'haf a reomp eveljust an diskoulmoù na aotrent ket da Vreizh bevañ, ha n'int nemet gevier. Hogen bez' e klaskomp ivez, evit diskouez hor youl vat, evit mont diouzh un hant a gasfe d'ar brezel marteze, damantif da vrizhaon ar C'hallaoued a vev c'hoazh pounneraet ha touellet o spered gant un istor 6 pe 7 kentved politikerezh dre nerzh. Marteze ne ray ket berzh hor youl emglev diouzhtu da nebeutañ, hogen ne c'hello ket ar C'hallaoued hor gwaskañ da vat hep gwir zigerez anez koll o brud. Muioc'h eget ar brud avat a goll ur vro pa gell anezhañ. Eno emañ hon tu mat, hag arabat eo diskregin dioutañ. Hag en amzer da zont ivez e tevio rummadoù Gallaoued all a vo digoroc'h o spered.

Addisplegoù all a c'heller ober da zivizadur gouarnamant Oulenn. Safaset e vezo bremañ Iwerzhoniz - hag a zo stank tre enni - en ur stad diaesoc'h en Impalaeriezh saoz, rak sellet e vo outo evel ouzh estrenion, ha muioc'h bec'h warno evit ober wardro o micherioù, h.e. Saunders Lewis a glemme nevez zo en "Y faner" abalamour d'an distrann-se a vremañ a zo etre ar broioù, hag a venage e tlefe an dud kaout holl wirioù keodedourion ur stad goude bezañ

chomet 3 bloaz enni, drezañ an unan, hep kaout ezhomm a gorigelloù ar burev-erezh. Hogen evit ma vefe talvoudus seurt rektres e vefe ret d'ar stad bezañ adaozet hervez ar stumm kevredadel. Ha setu perak : evit ar poent ez eo ar geodedouriezh un tu da hevelekaat an arallvroidi. Ne vroadeler ken buan an Italianed e Bro-C'hall nemet gant ar spi da c'hellout ober anezho aasoc'h Gallaoued evel ar re all. E Breizh ivez ez eo bet ar geodedouriezh c'hall un tu da heñvelaat ar Vretoned ouzh ar C'hallaoued. Ma c'hellfe keodedourion ur stad bennak mirout o dreistgwirioù, kaout skolioù hag ur merserezh dezho, neuze ne vefe ket par ar gudenn, hogen n'omp ket degouezhet an; ha gwelloc'h eo evit ar poent, evel m'emañ an traoù evelhen, e ve diaezet tud ur vro en diavaez kentoc'h eget koll o broadelezh. E-pad ar brezel e c'houlenner digant tud ur vro kalz gwashoc'h evit hen mirout.

Kerzu 1948

An Arvester

o o o o o
o o
o

P E O C ' H H A B R E Z E L

1. Kudenn Aljeria

Abaoe ur pennad amzer edon e soñj skrivañ ar pennad-mañ. Dija em boa klasket ober ur sell-tro ouzh an darvoudoù e 1958, da vare ar c'hemm-gouarnerezh e Bro-C'hall. Edod erru neuze e barr-uhelañ ar brezel en Aljeria emacomp bremañ o tostaat ouzh an diwezh anezhañ. Ne vern penaos eo anat ne vo biken a Aljeria c'hall daoust d'ar pezh a hete lod. Hevelep disoc'h a oa da c'hortoz: ne oa ket ar reizhded gant ar C'hallaoued a-hont. Aloubet eo bet Aljeria e 1830 ha staget ouzh ar stad gall dre heg ha dre nerzh pa n'oa ket anv c'hoazh d'en em zifenn ouzh komuncourion, a gav din. Darn eus ar C'hallaoued a zo deut di o deus savet o finvidigezh diwar goust hen vroiz. En amzer-se e oa degemeret gant an holl lezenn an nerzh. Hiziv, avat, e klasker tamm ha tamm - gant pil-pouseurezh alies, met ne vern - diazezañ ur gwir strevroadel. Natur e oa eta daskoriñ da Aljeria ar pezh a oa bet laeret diganti, he frankiz, ar gwir da virout he broadelezh ha n'eo ket hini ar C'hallaoued, kaer e vo arguziñ. Kavout a ra din ne c'hall Europiz eno kaout gwarantoù nemet hiniennel ha kumuniezhel e ve, ha n'eo ket broadel, rak biskoazh n'int aet di d'en em staliañ gant ar soñj da sevel ur c'henele nevez (1). Moarvat int bet dedennet di gant ar stad gall end-eeun : touellet ha desavet int bet eta; hogen ne c'haller ket diazezañ da viken un direizhded evit dero'hel d'ur ger roet e gaou, rak an douar-se ne oa ket da Vro-C'hall. Kement-se eo a zisoñj Europiz Aljeria koulz hag Ulsteriz hanternoz Iwerzhon. Moarvat eo diasur dazont ar re o deus graet o annez er broioù-se en abeg d'an emzalc'h o deus bet e-keñver an diavaezad a gemer ar vro - anez degemer eo reizh ivez stagidigezh ar vr-mañ ouzh Bro-C'hall da heul drouziwezh hol lu e Sant-Albin.

(1) Pezh o deus graet Europiz Afrika ar c'hreisteiz pe a-c'houdevezh re ar Stadoù Unanet. Galloued Aljeria avat o deus gortozet pep tra digant ar stad gall : n'int ket bet barrek da c'honit an emrenerzh; n'o deus ket bet an dezo-se biskoazh zoken.

2. Emgav politikel ar stad gall

D.G. en deus lekaet un termen da vrezel Aljeria. An impalaerelourion c'hall giz kozh a damall an dra-se dezhañ. Hogen kement-se ne dalv ket en deus lekaet D.G. d'ar brezel-se an termen en defe karet. Argilet en deus epad ouzhpenn bloaz arack embann o defe Aljeriz (ha n'eo ket Aljeria) ar gwir da zibab o hent (an "emzvizerezh"). Tamallet eo bet outañ e gorvigelloù. N'eo ket lavaret e vijent bet youlet penn-da-benn er penn-kentañ. Sofij hoc'h eus penaos kenreizhadur ar stad gall e 1956 a oa mennet da ziazezañ un dreist-stad gall kevredel, damhefvel ouzh stadoù Unanet Amerika. Dezo D.G. eo oa moarvat herzel ouzh kontamm kerantez an emzeneriezh dre louzoù an hefval-zroug ha, war un dro, prientiñ evit Aljeria un diskoulm "enorus" hag a oa da vezañ degemeret gant ar ze "fuzañ" eus dalc'herion ar frankiz : ar statud a stad kevredel er gumuniezh c'hall-afriket. Un tu e oa ar raktres-se da virout beli ar stad gall war-eeun en e drevadennoù kozh. Hogen, siwazh, n'eo ket emdroet an traoù evel ma spie D.G. Gwinea a zibabas an dishualded diouzhtu; an eil warlerc'h eben e kuitas an holl vroioù du ar gumuniezh evit dont da vezañ stadoù dishual. Adal ma oa tarzhet, avat, ar gevrediezh a felle da Z.G. sevel ne chome mui, hervez ar reizhpoull, nemet reiñ ar frankiz ivez da Aljeria : Diskiant a oa profañ houmañ da bobloù ha ne c'houlennent netra hag he nac'hañ ouzh ur bobl en em ganne abaoe seizh vloaz evit he c'haout.

An dra-se ne lavar ket en deus kroaziet D.G. war bep mennad a impalaerelouriezh. Renket en deus an traoù e seurt doare ma rank ar broioù nevez "dieubet" dibenniñ penn-da-benn ouzh harp arc'hantal hag arboellerezhel Bro-C'hall. Four-cmglev Evian peurgetket a lez ar stad gall mestr an ekonomiezh en Aljeria. Moarvat ez eo hevellep beli ha kontrolerezh skafvoc'h eget an hini politikel, aesoc'h da andur ha padusoc'h a se marteze hogen anzav a ranker ivez ez eo diasuroc'h ha kompren awalc'h a c'heller c'hwervoni ha brouez an impalaerelourion c'hall giz kozh. Digarezomp D.G. avat : n'oa ket tu da herzel dre hag ouzh ur froud hollvedel, froud an didrevadennerezh en doa klasket heñchañ e-unan a-ziarack. Ret mat eo degemer ez eo emsav ar frankiz e pep bro un emsav natur ha reizh kenañ.

3. Un dachenn emled nevez avit Bro-C'hall?

En arbenn a gement-se eo bet degaset D.G. da bladiñ muioc'h-mui gant Europa. Ne gredan ket e kar D.G. Europa eviti hec'h unan ha gwall en defe karet emichañs tremen hepti. Adarre avat en deus sellet ouzh savidigezh Europa evel ouzh un degouezhenn diharz ha fallet en deus dezhañ neuze kemer e ziarbennoù evit ma vije Bro-C'hall marc'h-blagñ en Europa nevez. Ac'hann e

105

zisfi ouzh Bro-Saoz na aotrefe ket da Vro-C'hall ren kement e diabarzh ar gumuniezh nevez. Ac'hann ivez ar pouez roet er stad d'an arboellerezh, d'an adoù gant an deknokratad a zo prast awalc'h da zifocrañ en trevadennoù kent abaoe 1945 gant Bro-Alamagn : war un dachenn dister awalc'h rivinet, dismantret, gwastet gant ar bombez eo deuet an Alamagn a-benn da sevel arboellerezh krefvañ ha gallouduseñ ar goudevezh-brezel ken ez int deuet da vezañ kretaerion ar broioù all. A zo gwelloc'h : envroet eo war gorread ar "Bundesrepublik", kalz enkoc'h eget hini ar stad gall ha tudet stank endav ur poblañs a ouzhpenn dek milion a repuidi, hep degas trubuilh a bouez e buhez ar stad, o pourchas dezhañ er c'hontrol nerzh-labour ha pinvidigezh en diwezh. Aes eo eta kompren en dije pleget D.G. en Aljeria a-benn ar fin peogwir ne grede ket er gwashañ degouezh - disparti hag advrouder Europiz Aljeria er vammvro europat - e vije ee ur walenn evit Bro-C'hall. E savboent eo ez eo d'ar gouarnement - da lavarout eo dezhañ - barn hag e tile Galloued Aljeria ha n'o deus bro arall ebet nemet Bro-C'hall sentañ evit kenvad ar vro - e-giz ma intent-eñ anezhañ, evel dres.

4. An dispac'herion c'hall nevez

E gwirionez, keit ha ma esuro Europiz Aljeria ez int Galloued egiz an holl n'he devo o emsavdeg a vremañ diazez buhezal start ebet rak ne c'hallont ket neuze gortoz an harp diavaez a zeus d'ar re en em save a-enep d'ur stad estren (o mennad stourm a oa awalc'h da ober anezhañ ur stad estren). Er ster strishañ, avat, ez eo an QAS un afer diabarzh eus Bro-C'hall ha rak-se eo moarvat e vo mouget a-benn an diwezh.

Ar pep mantrusañ a zo evit Europiz a-hont eo ez int esploetet gant ur gostazenn c'hall evel m'eo bet esploetet emsavdeg ar Vretoned e-doug an dispac'h gall gant ur gostazenn c'hall arall (1). Klenket int bet en un emsav ha n'eo ket e bal pennañ darc'hel un Aljeria c'hall dishual en hanternoz Afrika kevredet diouzh ret e stern un Europa unanet - an diskoulm reizhpoullkaf

(1) Rak-se adarre ez eo bet trec'het evel ar gostazenn-se. N'eo ket distroet ar rouaned c'hall dre m'o deus ar C'hallaoued pe ar Vretoned en em savet a-du ganto, hogen da haul trec'h enebourion Vro-C'hall, e-barzh kirri-samm an estrenion. Nikun ne c'hell dizarbenn ar wirionez-se.

(peogwir ne ra forzh pobl Vro-C'hall eus an "troadoù du") ma n'eo ket an hini furañ hag an hini aesañ o vezañ ma lakfe ar brezel hag an trubuilh da badout diziwezh.

Bremañ avat n'emañ ket kont evel-se ha nad eo kumuniezh Europa a-hont nemet ur pion etre d'ouarn an Armead Kuzh a fell dezhi diazezañ ur stad gall nevez beliger ha mac'hom. N'int eta nemet un elfenn en un emsav na gred ket e unan e c'hell'o biken adsevel an Aljeria c'hall a wechall. Elfennoù all a zo pouezusoc'h en emsav-se.

Un eil elfenn e vefe an elfenn "fasgat" hag "hitlerat" rik. Hini "Broad yaouank" gant o c'hroez keltiek (!), pagan, digristen atav. Ar re-mañ a garfe ober eus ar bobl c'hall ar bobl wenn dilennet da savetoñ ar ouenn wenn. En Aljeria ne stourmont nemet evit derc'hel en he flomm beli an dreist-gouenn. Moarvat o deus levezon war an emsav rak a-hont en Aljeria e tiskouez argadennoù ha gwall-daolioù an Armead kuzh, e-touez perzhioù all, un enep-muzul-madegzh anat. Derc'hel a reont, a-hend-all, war a seblant da gelennadurezh Hitler ergentaou, hag a zo kontrol rik da hini an deknokratad koulz e Bro-C'hall hag e Bro-Alamagn : penaos eo diazezet galloud ur vro war an dachenn douar alcubet, dalc'het ha trevadennet kentoc'h eget war ar skruktur arboeall-erezhel. Ar re-mañ avat a skarzhe Aljeriz diwar zouar Aljeria.

Un trede elfenn e vefe hini dehouiz impalaerelourion, kristen peurvuiañ, a anv da vihanañ. Rouealerion "Stummoù Bro-C'hall" h.a. Jakobined kreizenn-gar a fell dezho ober eus Bro-C'hall ar rouantelezh veur evel en amzer Loeiz XIV... pe Napoleon kozh (dre zefact a well !). An hirezch da veurded tremenet Vro-C'hall o lusk da vale. Nac'hañ a reont an disterañ emrenezch ouzh Aljeria en anv ar sturienn : an unded a ra an nezh.

Ur pedervet elfenn eo hini breuriezhoù an "enteringarourion gatolik" e-giz m'o anver. Paotred "Sauge", "Verbe", "La Cité Catholique" e kaver izili anezho e pep bro, Kanada, Spagn, Bro-C'hall, h.a. "La Cité Catholique" he deus savet kelligoù e pep lec'h en Europa hag ul levr-stur evel "Pour qu'il règne", a zo bet troet e meur a yezh hag a zo mennet da vezañ aviel gwirion en emsav, kalz gwell eget an hini kozh a zo aet un tammig e-maez a c'hiz abaoe keit all, ret eo anzav. War a hañval e karfe dalc'herion ar Goued gatolik ober eus ar "gatoligiezh" - diforc'h un tamm mat, 'm eus aon diouzh ar gristeniezh - ur gelennadurezh kemblac'h da hini ar gomunouriezh, gouest da c'hoari ar memes roll kevredigezhel ha politikel hag hi. Moarvat e loc'h ar venoziadeg-se diouzh ur savboent gwirion awalc'h : ne c'hall ket ur gredenn relijiel pe brederouriezhel chom hep e-fediñ war hor meizadur eus an den hag ar gevredigezh eta. Hogen faziet bras int o kredif a klot gant uhelvennad ar gristeniezh ober eus an dud robodoù relijiel rak-divizaouet : n'he deus ar feiz he ster leun a zibab arvarus nemet dre berzh an arvar e unan; ha ne

welan ket penaos e c'hellfe unan dibab pa ne vije mui dibab ebet d'ober o vezañ ma vije argaset an holl gredennoù digristen. Un ober a boell eo ar feiz ha n'eo ket unan a asoterezh. Evidon-me n'eo ket ar grenn-amzer ur mara- - pegen divizaouet bennak diouzh giz ar gomunourion pe ar gouarnerezhioù holl-vac'hoù arall e vent - da zegemer beli an iliz evel m'o deus graet krennamzeriz; moarvat e tisoc'hor da bolitikelaat an iliz ha d'he "bedalaat" hep kristenañ da vat ur gevredigezh a zo deust pagan en abeg d'un deknikelezh ha n'eus ket anv a zistrujañ... a-ratozh kaer da vihanañ. Sankañ a reor eta e kanstokoù diarsav he difrouezh gent enebourion an iliz. Evit dont a-benn anezho e rankfed ober gant doareoù-ober direizh ha digristen rik.

Adlavarout a ran n'eo ket ar stad a zo kiriek d'an digristenaat hogen ar sevenadur skiantel ha teknikel e unan, egiz m'eo emdroet, hag emichañs n'eo nemet goustadik, dre ul labour pennek a-hed rumadoù, o kemer perzh a-zevri e buhez ar gevredigezh hag e savidigezh ur sevenadur nevez e tizho ar gristenion kemm ar speredegzh dizoue a zo o ran bremañ.

Ar wirionez eo moarvat ne glastk an dud-se nemet un digarez hag ur bennozh d'o sec'hed oberiañ hag a zo bedel kenañ - paourgetket e Bro-C'hall : adsevel ar stad kreñv a zassorc'ho ar Vro-C'hall gozh. Atav ar memes idol azeulet dre zindan : Bro-C'hall en hini eo.(1)

Erfin ez eus un diwezhañ elfenn, al lu gall hag a c'hellfe bezañ kleze, na petra 'ta, an emsav-se. L'od a lavar eo bet gonezet hiniannoù eus an ofisourion da vennadoù an emsav broadel katolik. D'ar c'houlz-se e tegemarfent kelennadurezh ar gatoligiezh vroadel evel ar benveg speredel a-enep d'ar gomunourion a zo en em gavet dirazo e pep lec'h abaoe 1945. Ewel ma ne gradar ket en hon amzer nac'hañ ouzh ar pobloù ar gwir d'en em ran eo oes gellout mirout outo da bekañ ar gwir-se en anv dreist-mad ar sevenadur kristen. Hogen n'eus ano adarre, kredapl, nemet un andorenn a guzh anien vac'homeañ an impalaerelour gall stummat gant ar skol c'hall hag hengoun al lu gall e unan. Ar gwashañ eo n'o deus ket ar re-se skiant eus o c'hoantadoù kuzh : gwirion ez int hag int emdrouellet.

(1) Lenn war an divoud-se, Madelein Garrigou-Lagrange. Intégrisme et National-catholicisme. Esprit, Nov. 1959. Ha pennadoù gant P.H. Simon ebarzh "Economie et Humanisme" e 1959 ivez.

5. O ro-uziwez h al lu gall

E gwirionez eo erru an arme c'hall d'ur mare kreñnus eus he bezoud. Betekhen eo bet dreist pep tre ul lu impalaerger, boazet da dagañ, benveg savidigezh ar stad gall - ar Frañs, na petra 'ta, - hag an impalaeriezh c'hall da c'houde. Hogen petra a c'hoarvez ganti bremañ ? Berzet eo outi kenderc'hel gant hec'h hengoun. A neoudoù eo bet kaset kuit an arme c'hall diouzh an holl drevedennoù a oa bet gonezet ganti da Vro-C'hall abaoe 100 vloaz bennak. Enket e vo abarzh pell da chom da viken war dachenn europat ar stad gall. Petra vern ? a lavarot : kefridi al lu gall eo difenn douar ar vro. Hogen setu dres ar gudenn : evel m'emaer o sevel un Europa kevredel e teu diwirhefveloc'h-diwirhefvelaf e vo aloubet Bro-C'hall ur wach bennak gant armead ur vro europat all. Ne vo ket aloubet kennebeut gant ar Stadoù-Unanet : etre keneiled dre ret egiz maz eo Bro-C'hall hag ar Stadoù-Unanet n'eo ket dav ! Ma n'eus ket anv hiviziken, siwazh, da dagañ ha da aloubiñ broioù tramor evel argentaou. Awalc'h e voe da brezidanted ar S.U. hag U.R.S.S. krizañ o zal un tammig e 1956 da gefvez afer Suez evit ma skarfe Gallouedigoù ha Saoznigoù a ziwar zouar Ejipt. Neuze eo echu kefridi gozh al lu gall ha koulz e vefe divodañ anezhañ.

Eo, bez he deus ar Vro-C'hall digomunour un enebour marteze : ar Rusia gomunour an hini eo. Roll an arme c'hall e vefe eta difenn Bro-C'hall a-enep d'ar vroad vac'hom-se. E sell da se emañ D.G. moarvat o prientif e vombezennoù atomel. Hogen piv na wel ket eo dic'hallus kreñn ar brezel empennet hag hufvraet gant D.G. ? Ne vo taget biken Bro-C'hall gant U.R.S.S. - ha perak e tagfe Bro-C'hall hec'h un ! - hep ma tarzhe ur brezel hollvedel a rafe adarre eus al lu gall un adnerzhig hep pouez na dishualded ebet - lakaomp e tiemezel-fe Bro-C'hall diouzh F.E.A.A.N. A-hend-all e vefe farsus faltaziñ Bro-C'hall o tiskleriañ ar brezel eus he ferzh da U.R.S.S. - lakaat ha dije bet aotre digant he c'havredidi ! Goude m'he defe Bro-C'hall un nerzh atomel par da hini R.R.S.S. na vefe kevatal kempouez an nerzhioù : re zister eo tachenn Vro-C'hall evit gouzefiv tamm ebet un argad atomel a-berzh Rusia, dreist-holl bremañ m'he deus kollet he zrevadennoù tramor. Pulluc'het e vefe-hi er c'henn-stok-se. Ken diempennus all eo un argad atomel eus Bro-C'hall a-enep d'ur vro all atomel pe get : ouzhpenn ma ranko Bro-C'hall derc'hel kont muic'h-mui ha daoust dezhi eus mouezh ar Broadoù Unanet en amzer-da-zont ne vo ket lazot gant U.R.S.S. hag ar S.U. kevret da c'hoari he boned egiz ma karo hag en doare-se peurgetket.

Evelse eta, nuklael pe get, n'eus mui amzer-da-zont ebet d'an arme c'hall evel arme vroadel giz kozh. Ne c'hell c'hoari ur roll bennak nemet e fram

Europa pe an NATO. Kement-se a lavar ivez n'eo ken ul lu broadel egiz na oa a-ziagent peogwir n'eo mui he c'hefridi difenn ar vro a-enep d'ar re a c'hellfe he zagañ ha peogwir ivez n'eo mui evit embreger brezel argadif ebet.

6. Ar var a bolitikelaat al lu gall

Dre m'o deus komprenet ervat an dra-se eo troet lod eus an ofisourion c'hall war-du ar politikerezh diabarzh. O vezañ ma n'he deus mui al lu ur roll diavaez da c'hoari e tle kaout da vihanañ ur roll diabarzh - enez anez euz eo didalvez a-grenn hag eo koulz hec'h enframmañ diouzhtu e stern un arme europat evel maz eus bet anv eus an dra-se evit "Kumuniezh difenn Europa" betek 1954.

An ofisourion c'hall na blegont ket d'an dra-se a zo bet touellet ha sorbet gant skouer ar brezelioù dispac'h e Sina pe er Viet-nam : er broioù-se eo bet krouet ar stad gant an arme; an am gemmesket eo an arme gant ar strollad hag ar strollad gant ar stad. Deuet eo hiniennoù eus an ofisourion da soñjal, eta, e oa tu da gas da benn e Bro-C'hall an dispac'h a zo bet sevenet e broioù zo gant ar gomunourion ha gant ar memes doareoù-ober. Kredet o deus merzout e oa hollc'halloudek ar "speredlevezonerezh" : ar benveg e vefe dezho da gas da vat er stad gall ur revarzi hag han lakfe da c'hoari en Europa ar roll c'hoariet gant ar vro-se en amzer Napoleon - pe ar roll he deus Bro-Alamagn klasket c'hoari da vare Hitler; hufvra beurbadel ar Gall impalaerlour ! Pa soñjer mat, ne ra ket kalz forzh an dud-se eus manozioù na kelennadurezh. Ma vijent bet gwir zispac'hexion o defe gouestlet o buhez a-bezh d'an dispac'h ha n'eo ket da 40 pe 50 pe 60 vloaz o defe soñjet her c'has da benn; n'eo ket d'an oad-se o defe meizet e oa ezhomm trauzfurmeañ o bro. Nemet oberourion ez int ha spontet int o vezañ e c'hellfe an avantur hag an ober ober diouer dezho. Dibebet o deus ar gatologiezh vroadel da gelennadurezh - p'o deus graet - peogwir ez eus anezhi er mare-mañ, dre hengoun tiegezh ha renkad, dre gasoni ouzh ur gredenn "estren", ar gomunouriezh, evit chom hep dedennañ disfiziñs an Amerikaned. Ma vije savet un Hitler bennak e Bro-C'hall e vijent aet d'e haul, laouen, ken dillo all, egiz ma roas ofisourion an trede Reich a-gent, o kredañ o dije dofvaet al loen farv. Ar wirionez eo na ouzont ket petra eo ar gristeniezh wirion a zo o chom e kalonoù an dud ha n'eo ket er strolladoù pe e luoù ar stad. Forzh penaos, o mennad na gav ket e wrizienn er garantez evit ar reizhdad hogen bepred el lorc'h impalaerger a garfe derc'hel d'ar stad gall ar renk kentañ he deus bet betek hen.

En un doare, e klask D.G. hag e zalc'herion tizhout ar memes pal dre hantennoù diforc'h - fall put ha didalvez da soñj e' enebourion evel dres - ha rak-se moarvat n'eo ket dic'hallus e vo juntet endro ar gostezenn dehouat kozh e Bro-C'hall en deiz ma varvo D.G.

Evit krennañ : dre ma n'he deus mui kefridi ebet - impalaerel e oa ar gefridi-se - eo pennfollat an arme c'hall; heñvel eo ouzh ur gwiañ yac'h deust didalvez en un organadur hag a dro da grign-bev gouest da zistrujañ an organadur and-eeun penn-da-benn en diwezh.

7. Ma tarzhe ur brezel-diabarzh e Bro-C'hall?

Ne gav ket din eo ken tost ar brezel diabarzh e Bro-C'hall hag un nebeut mizioù zo. Daoust m'eo dic'hoanaget ar pep brasañ eus sternetaerion emskiantek al lu gall n'eo ket prest c'hoazh an niver vuiañ eus an ofisourion da dreñf penn-da-benn a-du gant an dispac'herion. Ma ! Kalz a zo bourc'hizion vihan evel izili emsav da skouer, tadoù a diegezh war ar marc'had. Ha sur mat e vint techetoc'h da chom sioul o welout ne ra ket nemeur a verz emsav an armead kuzh e Bro-C'hall; harzet eo bet daou rener a bouez eus an Armead Kuzh ha war a seblant evit ar poent, eo tonket an emsav-se da c'hwitaf war dachenn ar politikerzh evel ar chouanerezh ergentaou.

Emichañs e vo ret d'an iriennereion gortoz kimiad D.G. arak dezho klask a-zevri pakañ o c'hañs : alese o mennadoù diniver da gas an den-meur "ad patres" ar buanañ ar gwellañ. Hogen neuze eken peseurt hent a vije dirazo ?

Hini ar brezel eveljust. Petore brezel avat ? Ne ray ket an iriennereion, a greden, ur brezel digor heñvel ouzh hini Spagn. Seurt brezel a vije tonket da c'hwitañ. Graet en deus berzh franco e 1939 en abeg da zizunvaniezh e enebourion da gentañ hogen dreist-holl dre ma vev harpet gant daou stad fagat galloudus bras d'ar mare-se, Italia hag Alamagn. Hiziv ne gavje ar gostezenn dehou e Bro-C'hall sikour ebet nemet digant franco e ve - ha distar e ve rak stag eo ar stad spagnat ouzh ar S.U. ha ne c'hellfe ober netre hep o aotre. Diouzh an tu all, avat, e vefe skoazallet ar gostezenn "gleiz" da vat gant holl vroioù ar Reter emañ o harzoù 300 km. bennak diouzh harzoù Bro-C'hall. Ne vefe ket kevatal eta kemblac'h an nezhioù.

N'eo ket sur eta e kemerfe ar brezel-diabarzh e Bro-C'hall stumm ur brezel klasel (neuze eveljust e vefe al lañs gant tud a vicher!). Gwirheñveloc'h eo

ne vefe nemet ur brezel-dispac'h, ur brezel Aljeria pe Indez-Sina astennet ha lieskementat, elloc'h e vefe ar soudarded a vicher rampo tost-da-vat gant amatourion an dispac'h a gleiz. Kredapl awalc'h e vefe zoken e ve an tu-kreñv gant ar re-se kentoc'h neuze rak tostoc'h int d'ar bobl eget bourc'hizion; un hengoun dispac'hel koshoc'h ha startoc'h o deus hag harpet brokus evel ma vefent gant vroioù ar Reter ne vefent ket trec'het aes tamm abet gant an arme c'hall.(1)

8. E trevroadelañ ar c'henstok

Dres. Ur spi o deus moarvat paotred an Armead Kuzh eo sachañ a-du ganto an Amerikaned en diwezh. C'hoari a rafent ur wech ouzhpenn politikerzh an degouezh gwashañ. Ar S.U. ne c'houlfent da briz ebet kaout ar stad gall ur veli hag a c'hellfe bout nep-tu pe a-enep dezho. Gwell e vije dezho c'hoazh ur stumm gouarnerezh damheñvel ouzh hini Franco eget kement-se.

Neuze eta o defe ur c'hañs bennak da ober o mad eus sikour an Amerikaned. Da vihanañ ma ne harzont ket ouzh savidigezh Europa ha ma tiskouezont bezañ leal ouzh "feur-emglev Difenn an Norz-Atlantel".

Se n'eo ket sur avat rak emichañs e kavo gwell an Amerikaned skorañ, m'o devez tro - un nerzh-stre bennak, scuploc'h ha siquloc'h. Hogen daoust ha gallus e vo d'an nerzh-stre-se diwanañ ? Tu a vefe, a gav din, ma fall d'ar Rusianed ha d'an Amerikaned darc'hel d'ar "Statu quo ante" er rannved-mañ. Rak setu dalc'h ar gudenn : ne c'houzafvo ket muioc'h ar Rusianed ur gouarnerezh enep-komunour tser er C'hornog eget na c'houzafvo an Amerikaned ur Stad komunour. Er c'heñver-se zoken eo anat e vefe trubuilhet ha diaezet an Amerikaned gant kevredidi re feuls hag a lakfe war var o folitikerzh kenvevañ o peoc'h a-vremañ. Sellit a-hend-all ouzh o folitikerzh el Laos abaoe ur pennad amzer.

(1) Forzh penaos e kollo Bro-C'hall ar peurrest eus he levezon rak divizet e vo he zonkadur gant an daou c'halloud meur gwirion.

9. Emzalc'h an Emsav dirak seurt degouezh

Setu un dibunadur gallus eus an darvoudoù a zo o c'hoif bremañ. Dont a ran da gudenn hon emzalc'h a emsaverion dirak an darvoudoù-se.

Da gentañ eo da zisteurel diouzhtu, aveljust, an disterañ soñj a emglev gant paotred an "Armead Kuzh". Lod eus an emsaverion a c'hell bezañ dehouiz, "anteringarourion" pezh a garint (1) hogen ne c'hellont ket harpañ tud hag a zo impalaereleourion c'hall petra bennak ma teu anv gant unanig anezho eus rennvroelouriezh, digreizennerzh, h.a. Lakaomp e ve gwirion an dud-se : erabat disoñjal e vez isurzhiat an digreizennerzh ganto da vat ar stad hag ar vroad c'hall dre vras hag e tisoñjant kerkent o fromesaoù ma verzfent - pe ma kredfent merzout - n'eo ket spletus o sevenañ evit maured ar stad gall a fell dezho adsevel; a-hand-all, pelac'h emañ ar fromesaoù-se ? N'int ket bet graet biskoazh a-zevri a-berzh o emsav a gav din.

E 1924 e rae Hitler ivez anv eus ar "Zentralisationswut" "kounnar ar c'hraizennerzh" peogwir e oa ar gouarnamant kreiz e Berlin eus an tu kleiz kentoc'h. Gouzout a rit avat pezh a reas p'en devoe kemeret ar veli : divodañ ha kas da get ar stadoù alaman emren. Ma ! E Bro-Italia e oa an "Demokratelezh kristen" a-du gant an digreizennerzh, gwiriñ ar gumun h.a. ergentaou, pa oa an tu gwan ganti. Abaoe m'he deus kemeret ar galloud avat ne fell ket mui dezhi klevout anv eus an dra-se peogwir n'emañ ken a-du gant he mad-hi. A-hand-all n'eo ket digreizennerzh a c'houlennomp evit Breizh, ma' soñj ! Gwiriñ broadel par da re ar broadoù all en Europa ne lavaran ket, ha n'eo ket an dud-se, sur, a zo prest da selaou ouzh hor goulennoù : evito n'eus ha ne vo biken nemet ur vroad er "Frañs" : Bro-C'hall an hini eo.

Ken diboell all eo avat evel ma soñje c'hoazh nevez zo studierion yaouank e Roazhon gortoz un dra bennak digant ar stad gall sokialour-komunour diazezet war-lerc'h un trec'h eus ar gostezenn gleiz. Da gentañ n'eo ket gwirhañvel e trofe ar gomunourion ken buan se a-du geneomp goude m'hor befe kenstourmet war un dro ganto : atav e sellint ouzh an emsaverion vreizhat evel mevelion gouestlet d'ar sentidigezh didabut ouzh o iliz-int.

War zigarez herzel ouzh ar fachistiezh c'hall e kinniget kenstourm war-eeun e framm ar politikerezh diabarzh gall. Dezo kuzh ha dic'houzvez dezho o unan ar baotred-se e oa lemel diwar choug an emsav an tamall a zo bet graet (2)

(1) Ar fagiz vreizhat o unan a zo a-snep d'ar politikerezh-se forzh penaos.
(2) N'on ket a-du tamm ebet gant nep stumm a fagouriezh. 'Brain eo bet frouezh ar

outañ e-pad ar brezel da vezañ bet a-du gant ur gouarnerezh holl-vac'hom. Seurt emskoulm a gablusted, avat, a zo bugelal ha diot. Ar re a zo aet a-du gant an Alamaned o deus graet ur fazi politikel d'am soñj : hogen n'int aet a-du gant an Alamaned nemet evit adsevel ur stad breizhat ha n'eo ket bet embannet ganto zoken e felle dezho e ve fagat ar stad-se. An darn-vuiañ eus ar re a zo aet ebarzh ar "Bozen" o deus en em zouget evel ar Saozon, ar C'hall-aoed o deus stardet dorn ar Mac'homer meur Stalin hag a zo c'hwedet gant ar Rusianed o unan bremañ. Erfin, n'hon eus ket da c'houlenn digarez digant dan, na tuez, na youl-vat - nemet bezañ krefv awalc'h evit diframmañ hor gwir digant hon enebourion. Ar peurrest n'eo nemet rannvroelerozh ha rondonerezh.

Lakaomp o dije ar baotred vat-se diskouezet d'ar vistri c'hall bezañ servijerion leal epad ar brezel-se, petra o davo da c'hopr evit se ? Netra, peogwir ne vo neuze - gant ma vo trec'h ar gostezenn gleiz penn-da-benn, pezh ne vo ket sur tamm ebet - strollad breizhat dishual abet evit goulenn gwiriñ evit Breizh. Hetomp zoken n'o devo ket ar stourmerion-se kollet o feiz breizhek oc'h en em gannañ ebarzh strolladoù estren.

Hogen desevet e vefe ar baotred-se evit un abeg all moarvat : ne vo ket trec'h penn-da-benn ar gostezenn gleiz peogwir ne c'hell bezañ hevelep trec'h nemet hini ar gomunourion : re zinerzh eo ar sokialourion diub e Bro-C'hall ha n'eo ket ar S.F.I.O. evit kas da bann ur brezel bennak ! Merket hon eus avat ne asanto biken an Amerikaned e taufe Europa da gouzhañ e dalc'h kevredidi Moskov. Disoc'hañ a raer eta gant an aon rak ar brezel atomel bepred d'un treuzvarc'had bennak etre Amerikaned ha Rusianed. Ya, ar spont rak ar brezel atomel eo tarmenusañ lusker ar politikerezh etrovroadel a hiziv, an hall her goar. Er gwellañ degouezh e c'hellfe padout ar brezel seizh pe zek vloaz pe ouzhpenn evel er Vietnam. Daoust hag an dra-se a c'hallomp hetañ ? Hag a-benn ar fin netra ne vefe kemmat.

Bezot pe vezet, da nep mare ne c'hell bezañ anv evit an emsaverion a gonlabourat gant pennadurezhioù ur vro a nac'h an zav broadelezh Vreizh, pegen hael ha pegen reizh bennak e ve a-hand-all o menozioù. Na c'hall ar Vretoned ober brezel a youl vat nemet war-eeun evit dieubiñ Breizh e ve.

Petra klozañ eta ? Kement-mañ, a greden : ma n'omp ket gouest da stourm war-eeun, egiz ma verken diouzhtu, evit adsavidigezh ur stad breizhat eo arabat daomp-ni emsaverion kemar perzh e brezel ebet. Na rafomp nemet diwar

gelennadurezh-se. Bez e c'heller lavarout eo dizaneloc'h c'hoazh eget ar gomunouriezh. Hogen ne c'hallomp stourm outi nemet a framm Breizh. Euskeriz n'o dije ket kemeret perzh e brezel Spagn ma ne vije ket bat taget o Stad gant ar fagourion spagnat o unan.

bouez koll hor feiz breizhek hag hor poan a foranfemp en aner en diwezh. Dabust hag ar falz - reistafeser war he meno - en deus gonezet da Vreizh un dra bennak en arbenn da gement-se ? Netra, koulz lavaret. Ar gentel a zo krennswalc'h.

Ma n'eo ket eta en emsav evit ober e vad eus an darvoudoù evit adsevel ur stad breizhat e tle dont endro en e grogen, en em guzhat, en em zouarañ, en em urzhiañ dre laer, da c'hortoz deizioù gwell. N'eo ket aotreet dezhañ fallgaloniñ na dic'hoanagiñ.

10. Ur politikerezh breizhek dishual a rankomp kaout. Breizh a zle trec'hiañ drezi hec'h unan. Petra a zo a-du gant an Emsav ?

Ar pezh a zleomp hetañ er mare-mañ - evel e pep amzer, nemet ziwazh n'omp ket mestr war darvoudoù 'zo - eo ar peoc'h. N'eo ket prest an Emsav daoust maz eo kalz gwell ar c'hendegouezh gall hag etrevroadel eget pemzek vloaz zo da skouer. Koazhet eo brud ha sked ar stad gall muioc'h-mui abaoe 1945. Tamm ha tamm o deus dilezet ar C'hallaoued ar soñj da vezañ ur galloud-meur hag ar vouezhiadeg-bobl diwezhañ e miz Ebrel 1962 n'he doa ket moarvat an dalvoudegezh a garje O.G. bezañ rost dezhi; lavarout a ra dreist-holl ar vouezhiadeg-bobl-se he deus dilezet ar werin c'hall dre vras pep mennad impalaerelouriezh. Komprenet en deus O.G. an dra-se emichañs ha rak-se e vrabañs gant ar berzh arboellerezhel a zo bet gonezet dindan e ren. Hogen ne c'hall ket al lorc'h broadel bezañ diazezet war ar binvidigezh. Kredapl eo eta e asanto ar bobl c'hall asoc'h hiziviken da emrenerezh Breizh goude bezañ aotreet o frankiz d'ar bobloù a oa gwechall dindan he beli. Un ereadur reizh-poell a zo en darvoudoù.

11. Ar spered gall ha breizhat e Breizh

Tonket eo ar spered gall da gozhañ ivez e Breizh. Arabat disofjal ez eo ar Vretoned ur bobl dismegañset, evel Aljeriz, ha rak-se ivez o deus en em staget kement d'ur mare vennad an impalaerelouriezh c'hall a oa dezho un digoll d'o dismegañs. Gwall zilufret eo avat ar mennad-mañ en deiz a hiziv

115
hag aesoc'h a se e vo eta dedennañ ar Vretoned da zegemer mennad an Emsav : adal m'he deus kollet Bro-C'hall he dishualded hag he galloud meur etrevroadel, adal maz eo splann ez eo kabestret ouzh lestr ar Stadoù-Unanet e klasko ar Vretoned o dellid en ur Vreizh adsavet he seul didennoc'h e raint m'o devo gwelet pobloù sklav ergentaou o kemer hent ar frankiz. Adarre, bez ez eus un deveradur natur e galadur an darvoudoù.

Ret holl eo lavarout avat : kement a zo bet graet gant ar rannvroelourion abaoe ar brezel a zegas dour da villin ar vroadelourion, kaer o devo ober, ha ne vern o youl fall a-hend-all. Biskoazh n'eo bet tizhet kement a dud yaouank gant Kendalc'h; biskoazh n'eus bet kement a Vretoned yaouank emskiantek eus tonkadur o bro. Drezo o unan ha keit ha ma chomint war dachenn ar "sevenadur" ne vo ket gouest an emsaviou-se da ziogetañ netra a-zevri evit Breizh. Hogen savet o deus ul loc'hva ma c'hell an emsav broadel kemer lañs diwarneñ en amzer-da-zont. Kenlabouret o deus ar rannvroelourion ez objektivel da sevel ur Vreizh vroadel hag anaoudegezh-vat a zleomp kaout outo avit se.

Talvoudus eo bet ar CFLIB evel just peogwir en deus lakaet kalz Bretoned da vezañ e oa gwasket o bro e-keñver arboellerezh da vihanañ. Levr ar Pleven a zo arouezius kenañ eus emlad an emskiant-bobl nevez - a izel-renk moarvat, diglok, sur, hogen gwirion evelato - a zo o tiwanañ en hor bro.

Ur fazi e vefe kredañ avat e c'hell an emskiant-se, drezi hec'h-unan, adkrouiñ ur vuhez vroadel e Breizh. O studiañ kudadenn ar gouerion e Breizh hez merzimp splann.

12. An emsavadegoù gouerion en hor bro

Kredet en deus meur a hini warlene e oa prest gwerin Vreizh d'en em sevel evit kaout un tammig muioc'h a amann war he bara.

A-dra-sur e oa neuze, egiz ma verken uheloc'hik, un doare emskiant-bobl oc'h eginañ etquez ar gouerion hag emesk Breizhiz dre vras : bodet eo gouerion Vreizh a-bezh en ur lod en o sindikadoù; a-hend-all o deus galvet ar Vretoned all war o sikour. Hogen ne ranker ket en em douellañ evit se : ar gouerion warlene ne oant ket broadelourion; ne raent ket forzh eus personelezh Vreizh; d'ar muiañ ne oant ket a-enep rak diwezhatoc'h e asantjont e ve enklouzet un nebeut goulennoù evit ar sevenadurezh hag ar yezh el lezenn-stur a zle bezañ kinniget d'ar gouarnamant gall.

Kredif e oant prest d'ober un dispac'h war zigarez e raent un tammig trouz hag un tammig dizurzh a oa amoet d'am soñj. Er menozioù, da gentañ, emañ an dispac'h, n'eo ket en oberoù. Hogen, dres, daoust ha menozioù o doa vezañ ar vicherourion a ra dilaz-labour, displegadoù, a ziskenn war ar straed evit gwellaet o live-bevañ. Hogen un dra a zisofjer : e penn ar sindikadoù evit gwellaet o live-bevañ. Hogen un dra a zisofjer : e penn ar sindikadoù evit gwellaet o live-bevañ. Hogen un dra a zisofjer : e penn ar sindikadoù evit gwellaet o live-bevañ.

D'ar c'houlz-se eta e vije bet follentez harpañ ar gouerion en o emsav-adeq oc'h ober dispac'h evit o c'hont. Perek ? Peogwir e vije bet kement-se c'hoari roll ar c'hezh a denn ar c'histin eus an tan evit ar gouerion, egiz ebarzh mojenn Ar Feunteun. Klasket o defe ar gouerion un emglev kerkent ha m'o dije kredet e vije bet roet dezho darn pe zarn eus o goulennou. Setu pezh a zo c'hoarvezet a-hend-all. Un nebeut promesaou a zo bet graet, loar skedus al lezenn-stur istribilhet e lein eabl Breizh, ha Yann Gouer a zo distroet d'ar gêr fur ha fizius. Kuitaz d'ober un tamm raou ur wech bennak adarre e-giz ur bugel mign ma ne rear ket van da selaou outañ.

Bezomp sur ne ray biken ar gouerion ur gwir zispac'h e Breizh - nemet p'o devo komprenet n'eus ket anv a vara hepken en o emgann hogen eus o dellid a dud hag a Vreizhiz.

o o o

13. Reiñ ur gelennadurezh d'ar gouerion e Breizh

Ma fell deomp eta en em skorañ war ar gouerion e vefe dav kinnig dezho - hag o lakaat da zegemer - ur gelennadurezh hollek a zalc'hfe kont eus o mad danvezel moarvat hogen a sellfe ouz med ar vroad maz int izili anezhi hag o lakfe da zifenn war un dro o enor a Vreizhiz. Hep ober eus o renkad ur renkad dilennet e c'hellfed diskouez dezho pouez ar sevenadur diwar ar maez e kultur hor bro, tostoc'h ha maz eo d'an natur eget sevenadur mekanikel an ijinerezh, petra bennak maz eo tonket al labour-douar e unan da vezañ mekanik-aet muioc'h-mui en amzer-da-zont dre youl ar gouerion o unan a fell dezho - gant reizh en ur stumm a-hend-all - e ve o gonidagezh dedaoluoc'h dalc'hmat.

E gwirionez, ne gredan ket nemeur e c'hellimp dedennañ gouerion Vreizh a-vloc'h d'an emsav. Pal an emsav eo adsevel dellid ar Breizhad dre ziogelid e vreizhadalezh; houmañ, avat, n'emañ ket el labour-douar hepken, evit ur c'houer zoken. Evel-se eta n'eo ket gwirheñvel e c'hellfemp gonit d'hor menozioù estreget hiniennou. Awalc'h eo o defa an hiniennou pouez ha levezon en o emsav evit ma c'hellfe o skoazell bezañ talvoudus deomp. Hogen ur fazi eo spiañ e teufe ar silvidigezh eus ar gouerion : anez bezañ broadelourion ne c'hellint ket hor skoazellañ da vat. D'ar c'houlz-se e vefe ret d'ar beizanted degemer ne c'hell kudenn al labour-douar bezañ diskoulmet nemet e fram Breizh da gentañ. Da lavarout eo e c'hellomp-ni broadelourion bezañ degaset da soñjal ez eo reizh hervez lezenn an arboellerezh marc'hadal ha kevazerezhel e vo digresket niver ar gouerion er vro-mañ. Nemet pezh a c'houlennimp eo e kavfe an holl Vretoned, forzh penaos, fred ha labour en o bro memes; ar gouerion a ranko diskregiañ a zarn pe a vloc'h diouz o micher a zleo kavout en o c'horn-bro pe er vro ur c'honidigezh all da gemer lec'h o gopr kozh pe da glokaat anezhañ. Distareal a reomp eta kement raktres a dennfe da lakaat ar Vretoned da zivroañ. Se a zo lavarout ez eo kudenn arboellerezhel Vreizh da vezañ diskoulmet evit mad Breizh ha n'eo ket evit mad Bro-C'hall. Ur gudenn vroadel eo eta hini ijinerezheladur hor bro. Hag an dra-se a ranko kompren ar Vretoned.

Dav eo d'ar gouerion gouzout n'eus ket a ziskoulm teknek rik d'o c'hudennou, Kempenn marc'had ha kenwerzh dedaoladur al labour-douar, disteraat niver an etreourion ne gemmo ket kalz tra e stad an traoù. Darn eus ur gudenn vroadel, hini Breizh, eo afer al labour-douar emañ. Poent eo da gouerion hor bro koll ar spered klaskerion-vara a c'hortoz pep tra digant gouarnamant Paris elec'h klask urzhiañ o unan o bro-int. Poent eo dezho gouzout ne c'hellint bezañ tud e Breizh nemet dre sevel o stad dezho o unan drezo o unan. (1)

(1) N'eus nemet un emsav, an emsav broadel, a zlo lec'heñ gant an ober. Eñ a rank

14. A l lezenn - stur

Kalz a vrud a zo bet graet warlene e ser al lezenn-stur. Lod anezho a ra van da gredif ez eus anezhi al louzoù burzhudus a rank pareañ Breizh hep mank. Ar CELIB dreist-holl.

Daoust hag e c'hell degas seurt lezenn-stur ur vad bennak da Vreizh - gant ma vije mouezhiet, ya - den ne oufe nac'hañ. Bez e c'hellfe bout atav un diazez d'hon adsav arboellerezhel; dreist-holl e lak ar Vretoned da gompren ez eus ur c'henvad breizhat hag e tle hemañ bezañ difennet : an dra-se en deus a gav din, ar muiañ pouez. Bez e c'heller embenn anezhi hep degas disfiziañs a war an embanner. Un danvez bruderezh talvoudus e vo atav al lezenn-stur. Pe e vo lekaet da dalvezout he moarvat e roy c'hoant d'ar Vretoned da c'houlenn mui c'hoazh; pe e vo nac'het hag e c'hellimp atizañ droukrañs ar Vretoned hag o zreif a-enep d'o mac'homer (1).

Arabat eo ivez, avat, e lakfe ar Vretoned da gousket ur wech ouzhpenn. Rak, daoust d'ar pezh a soñj lod ne c'hell ar stad gall ober gouestl ebet; evit un abeg mat, en e gefver e unan e rafe ar gouestl ha ne vefe eta redierezh ebet anni. M'he dija Breizh ur bersonelezh lezennel - egiz on amzer ar rouaned c'hell, da vihanañ - marteze e c'hellfe ar stad gall bezañ erret gant ur feur-harpañ sinet gantañ, dreist-holl ma vije sujet Breizh ha Bro-C'hall d'ar memes reizhadur atrevroadel. Hogen merket mat eo bet war ar gaze-tenn O.F. e miz C'hwevrer pe e miz Meurzh diwezhañ, a gredan ne rae ar stad gall dre al lezenn-stur gouestl ebet nemet en e gefver e unan e ve. Neuze, peseurt surentez kaout el lezenn-stur-se ?

A-hand-all, evel just, e vefe diboell kredif e c'hello al lezenn-stur kemm stad hor bro goude ma vefe lakaet da dalvezout ervat. Daoust ma 'choul-aka al lezenn-se bezoud Breizh ne lak ket ar bezoud-se anat kennebeut. Bez ez eus e Breizh estreget kofoù da vegañ. Hogen lennit ervet dilinennadoù ha melladoù al lezenn-stur, dindan an talbenn "Sevenadur" peurgetket. Mantrèt e vlot o verzout ne seller ouzh an "deskadurezh" - ur c'hiz eo muioc'h-mui bremañ - nemet evel un tu da ziorren arboellerezh ar vro - Moarvat ez eus un dra bennak reizh en dra-se. Hogen enebiañ a c'heller evelato o lavarout e nac'h

kemer intrudu pep ober a bouez ha sachañ ar gouerion da heul. Ar fezi eo gortoz un intrudu a bouez a-berzh ar gouerion. Kement-se adarre n'eo a-berzh an emsav a-vremañ nemet anzav e zic'halloud.

(1) Diouzh un dra e ranker diwall : un dic'roadur a rofe labour da estrenion e Breizh. Nevez zo e klaske ur firm gall tuta e Bro-C'hall evit un adstal e Roazhon.

seurt deskadurezh talvoudoù ar sevenadurezh peogwir emañ e servij ar binvidigezh hag an arc'hant. Disfizout a ranker ouzhpenn evit un dra all : ne c'hell bezañ roet an deskadurezh-se nemet ebarzh skolioù gallek. Setu e teu al lezenn-stur da c'houlenn e ve savet muioc'h c'hoazh a skolioù gallek en hor bro, peogwir ne c'heller tizhout en deknikelezh evit ar poent nemet dre ar galleg. En diwezhañ eta e roy al lezenn-stur muioc'h a c'halloud hag a vinvioù d'ar re a zo mennet da zivroadelañ Breizh o vezañ m'emañ ar galennadurezh bepred dindan al lezenn-stur etre daouarn ar mererezh en deus graet ar muiañ da zivrezhonekaat ar vro.

Gouzout mat a ran ez eus anv eus ar yezh el lezenn-stur. Hogen awenet ha maz eo ar c'hevrenn-se gant maizadoù an emsav rannvroel ne ro diskoulm gwirion ebet da gudenn ar yezh dres; ar gudenn-se n'eo ket diskouezet tamm ebet en he sklaerañ hag en he c'hrisañ : n'eo ket mui ar brezhoneg ur yezh poblek peogwir ned eo mui e neb lec'h ken koulz lavaret yezh ar c'havell d'ar vugale. Da zas-sorc'hif eo ar brezhoneg eta ha ma 'garfe e tiskoueze peotred an emsav rannvroel ar c'hontrol din dre un enklask sirius a-benn ar fin. Neuze, perak ken-derc'hel da gomz eus "yezh ha sevenadur poblek", egiz ma komzer eus sonerezh poblek, dañsoù poblek, binvioù-labour poblek (Kv. enklaskoù ar "Falz" he defe graet gwelloc'h oc'h ober abaoe pell zo un enklask diwar-benn stad ar yezh). Kaer a zo ober, sellout a raor avat ouzh ar sevenadur poblek evel ouzh ur sevenadur a eil-renk pe tonket da vont da get (evel kemant a denn d'ar gonezerezh douar a wechall). Bez ez eo ar yezh ur fed broadel ha n'eo ket ur fed renkadell - pezh n'eo mui zoken bremañ. Ma n'hon aus ket kalon da implijout ar gerioù a glot gant hor mennadoù gwirion - broadel ha n'eo ket poblek - ne zeuimp biken a-benn da savateñ hor broadelezh.

Kement-se a laka anat n'he devo al lezenn-stur a dalvoudegezh nemet war dachenn ar bruderezh ha n'eo ket hini ar sevenerezh.

15. A r " MOB "

Daoust ha bez e c'hello ar MOB degas un dra bennak da Vreizh ? N'eo ket gwirhefvel tre betek hen. Moarvat e seblant ar renerion anezhañ goanagif e vo gonezet a nebeudoù pennadurezhioù ha sternataerion ar vro. Evit dedennañ an danvezioù izili avat ha chom hep feukif anezho e taver war bal pennañ an emsav : adsevel ur vroad kultiek. Diskiant eo kredif e c'hellfe ur stad breizhat dam-emren diazezet a-drugarez d'ar MOB - lakaomp e vije gallus ! - kas da benn he c'hefridi advroelañ. Seurt Breizh dam-emren a vefe hefvel ouzh Sikilia; da lavarout eo e chomfe evel arack ur rannvro c'hall. Evidon-me ha daoust ma

anzaven e ra ar MOB labour gaer hag efedus na greden ket a c'hello ar c'hen-
urzhiadur-se kas da benn hon uhelvennad - advrezhonekast Breizh. - hep ma vije
bet managet gwech ebet an uhelvennad-se. Sur-mat eo ar MOB ur benveg emsav
d'ar stourmer a venn embreger anezhañ hogen n'eo ket gant ar benveg-se e vo
adsavet Breizh emichañs.

Fazi gwashañ izili ar MOB eo alies gortoz pep tra digant adaozadur ar
stad gall. Neuze - evel ar rannvroelourion dres - emaint o spiañ e c'hoarvezo
ur reveulzi bennak e Paris - na pelec'h 'ta - hag a ziazezo - o burzhus adarre !-
ur gouarnerezh a-du gant ar "rannvroioù" pe da vianañ gant an digreizennerzh.
Awalc'h e vefe d'ur rener O.A.S. pe d'an danvez roue pe Dorez ober anv eus
rannvroelezh pe eus un dra bennak heñvel evit ma koazha o disfiziañs ha ma
teufent da harpañ gouarnerezhioù a bep seurt ha ne raint bikan forzh ebet eus
Breizh peogwir - bezet pe vezet - e vint gall. Sklav int eta d'ar politikerezh
gall evel ar rannvroelourion. Arabat eo kredif e c'hellor gant hevelop strollad
kas da benn un dispac'h gwirion e seurt ebet. Ma vije daskoret a-drugarez
dezhañ un tammig emrenerezh d'ar vro-mañ n'en dije an emrenerezh-se hag eñ
sternataet gant gallegerion talvoudegezh ebet da adkeltiekaat ar vro. Ne
c'hellje ket daskorif d'ar Vreizhiz o dellid a Vreizhiz. Didalvez ha noazhus
e vije a-benn ar fin seurt emrenerezh peogwir e lakfe diaesoc'h tizhout an
emrenerezh gwirion.

16. Da gentañ embanno eo Breizh ur vroad

Eveljust an hent dizreiñ war-du ar frankiz a seblant bezañ hini Kembre.
Eno ez eus ur strollad hag a stourm war-eeun ha dinden al lezenn da zaskorif
da Gembre gwirioù klok ur vroad. Ar pezh a hetomp eta hag ar pezh a zisfemp
seveniñ eo kemm, diskoultrañ hag imboudañ ar MOB e seurt doare ma teuy da
vezañ ur gwir strollad broadel. Un euzhvil dibenn eo ar MOB evit ar poent ha
ne c'hello ket emichañs diraz nap pal. Re a ziforc'h a zo stouez e izili :
diouzh un tu, broadelourion rik ha diouzh un tu all arboallerezhelourion hag
a wel dreist-holl e Breizh ur rannad-vro da ziorren harvez sturiennoù hon
doueonourion vodern, paotred an ekonomiezh. Keit avat ha n'hor bo ket e Breizh
un emsav politikel a embanno e rank Breizh kaout gwirioù kevatal da re vroadoù
arall Europa kevredel - ha paourgetket ar barsonelezh etrevroadel ma talc'h ar
broadoù europat all d'ar barsonelezh a seurt-se, - keit ivez ha n'hor bo ket
ur strollad a embanno e fell dezhañ adsevel al ledenez-mañ ur vroad keltiek
klenket war-eeun ebarzh starn Europa ha n'eo ket displegañ ur rannvro eus

kornog Bro-C'hall, dassorc'hif - lavarout a ran mat dassorc'hif - ar brezhoneg
avel yezh pemdeziek an holl Vretoned gwitibunan n'he devo hor broadelazh c'hafañ
ebet da drac'hif hag aner e vo kement a vo graet en despot da youl-vat ha da
vennadoù kaer ar re a lavaro e stourmont evit ar vro.

Ha c'hoazh ne rankor ket neuza magañ re a hufvreoù. Goude ma vimp deuet
a-benn da gaout un nebeut kannaded, lakaomp, pezh na seblant ket bezañ evit
warc'hoazh, ne vo ket profet deomp evit se ur stad broadel breizhat.

17. An emsav sevenadurel rannvroel

Gwall varnet em eus an emsav sevenadurel, dreist-holl an hini rannvroel,
e-kerzh ar bloavezhioù tremenet : "Istor ar yezh peurunvan", "Istor an emsav
sevenadurel" ha da ziwedhañ "Opiom an emsav". Krennañ a ran amañ va zamalloù :
ne glot ket ober an daou emsav sevenadurel pennañ "Bleun-Brug" hag ar "Falz"
gant ar gwirvoud. Kenderc'hel a reont da gas o labour war-raok egiz ma vije
ar brezhoneg ur yezh vev-buhezek; awalc'h eo dezho deskif lenn ha skrivañ ar
yezh un tammig bihan d'ar vugale; eveljust n'eo ket dav stourm evit ar yezh
diwar goust ar galleg : un torfed e vefe; ha da echuif bepred an diskan :
brezhoneg "yezh ar bobl" hag a rank chom yezh ar bobl. Hag ouzhpenn : ar
spered broadel a zo da argas peogwir e tagas disfi war ar c'haezh stourmerion
o deus poan awalc'h da lakaat ar gouarnamant da gredif ez int Gallacued vat.
Setu, betek han, emzalc'h an emsav-se : r'am dislavaro ar renerion anezhañ.

Ar wirionez avat a zo disheñvel krenn ha kalz tristoc'h. Marv eo brezhoneg
ar bobl ha rak-se e komz renerion ar "Bleun-Brug" galleg ouzh ar vugale a
atersont er c'henstrivadegoù. Ouzh han ober avat e anzavont ez eo ar brezhoneg
ur yezh varv, egiz latin, peogwir n'eo ket mui gouest ar vugale d'o c'hampren
pe gomzont outo ar yezh-se. Nauze, perak ober van da gredif ez eo awalc'h ar
pezhig a c'houlennont evit derc'hel bev ur yezh a ouzont ez eo ret dassorc'hif ?

Moarvat em eus skrivet e oa koulz divodañ an daou emsav-se ha war a glevan
eo bet feuket hini pe hini gant va barnadenn. Lavarout a rin eta ez eus un dra
hag a hetfen kalz mui eget o divodañ : ober anezho gwir strolladoù brogar, o
lakaat da gompren ne c'heller ket savetaif - adsevel kentoc'h - ur yezh hep
spered broadel ha ne c'heller ket diwanañ ur spered broadel hep e heñchañ war-
du ar stad broadel. Ar peurrest n'eo nemet traif mein da sec'hif, difreterezh
ha n'eo ket oberierezh.

18. Klask an unvaniezh?

Adlavarout a ran eta ar pezh am eus lavaret meur a wach : ne c'hell ket bezañ a unvaniezh araok ma vo sklaerac'h he resisnet menozioù ha mennadoù ar bagadoù hag ar strolloù a zo bodet en emsav rannvroel. D'ar re a zo e penn an emsav-se eo kompren ne c'hell ket saveteif yezh ha broadelezh Vreizh hep spered ha politikerezh broadel. Keit ha ne vo ket anzavet splann gant an holl re a zo bet kiriek d'ar politikerezh rannvroel a zo bet kaset da benn ebaoc ar brezel ez eo Breizh ur vroad hag e rank kaout gwirioù ur vroad ne gev ket din e talv ar boan klask un emglev rak diazezet e vefe war an amsteriegezh, an touell hag ar gaou, ha ne c'hellfe dougen frouezh ebet.

En degouezhioù a vremañ, goulenn emezelaf e "Kendalc'h", da skouer, a vefe anzav en deus ar politikerezh rannvroel un dalvoudgezh bennak evit saveteif ar yezh hag ar vroadelezh hag e c'hell ar re-se bezañ miret dindan ar gouarnerezh gall, pezh a zo diwir a-grenn.

19. Un emglev goull o ne dalv netra

Follentez a vefe gortoz burzhudoù digant ur c'henstroll a vefe o klask urzhiañ ha blenias an holl emsavioù breizhek. Ober ha palioù hennezh a vefe komprenet e fram ar gouarnerezh gall. En arbenn d'an dra-se dres, kement a c'houlennfe ne c'hellfe bezañ roet nemet ma klotfe gant mad Bro-C'hall evel m'hen intent ar C'hallaouad o unan. Kelennadurezh ar brezhoneg, da skouer, a vefe isurzhiat etav da vad ar galleg : kement-se a lavar ivez e venfe ar brezhoneg evel e-ziagent-barnet d'ar marv. Bez e tle an emsav broadel eta miret e frankiz e-kefver an emsav rannvroel ha ne c'hell ket ez enat reif ar silvidigezh da Vreizh. En em stagañ outañ a vefe ur fazi mantrus.

20. Pazh a zlefe bezañ "Kendalc'h"

Broadelour ebet, stroll broadel ebet eta ne c'hell emezelaf e "Kendalc'h" evit ar poent - lakaat e ve ar vistri wirion anezhañ, da lavarout eo Keravel hag e genseurted, prest da zegemer anezho, pezh n'eo ket evit warc'hoazh,

kredapl - hag un abeg mat a zo da gement-se : bez ez eo "Kendalc'h" bepred ur strollad gall ofisiel. Damveneg a ran amañ eus pevare mell kenreizhadur "Kendalc'h" (hel lenn a c'heller ebarzh an "Annuaire de Bretagne" 1951). Diskleriet eo er mellad-se ez eo lakaat "Kendalc'h" dindan baerbniezh ar Brefeded (!) hag an eskibien e Breizh, ha me 'oar-me petra c'hoazh ! Gwir eo ez eo bet savet ar genvroeriezh-se e 1950, en amzer ar spont, gant tud o deo aon hag a grene; met daoust hag ez eo gent krenerion e vo saveteif an dra bennak e Breizh ?

Kentañ tra a rankfe ober "Kendalc'h" eta e vefe kempenn e genreizhadur evit dont da vozañ ur strollad breizhek dishual, kas diwar e dro psikoz ar bloavezhioù a spont, degemer ar vroadelouriezh ha, da heul eta, distaurel penn-da-benn stern ar gouarnerezh gall a varn Breizh keltiek d'ar marv. Awalc'h am eus diskouezet e oa aezet an danvezioù lezenn kinniget evit ar brezhoneg e sell da vad ar galleg ha Bro-C'hall ha n'eo ket e sell da vad Breizh hag ar brezhoneg. Politikerezh an divyezhegezh ne zle ket mui bezañ politikerezh ofisiel "Kendalc'h"; dilezet a-grenn e rank bezañ. E-lec'h-se e tle embann e rank Breizh bezañ adkeltiek penn-da-benn hep damant ouzh gonidoù ar galleg el ledenez-mañ.

A-hend-all e tlefe bezañ ivez kefridi "Kendalc'h" heñchañ ar re yaouank war-du ar vroadelouriezh dre hent ar sevenadurezh, da lavarout eo, dont da vozañ par d'ar "Gaelic League" an Iwerzhon ergentaou.

Bez e c'hellfe ivez, e gredan, kengerzel an holl gostezennoù breizhat d'en em vadañ evit divizout ur politikerezh nevez diwar-benn ar sevenadurezh. Kentañ tra a vefe da ziferañ, avat, eo un enklask meur diwar-benn gwir stad ar yezh a-benn gellout sevel al "Levr Gwenn" a vo implijet da ziazezañ ar goulennoù a ramp evit saveteif ar yezh; bez e tleomp lakaat ar gouarnamant gall da gompren ne asantimp biken da varv hor yezh goude ma vije aet da get tost da vad ar brezhoneg e-touez ar bobl. Betek hen ne veze harpet ar goulennoù a raed evit ar yezh war arguadur resis ebet; lezet e oa da gompren e vije awalc'h ar goulenn sevenet evit saveteif ar yezh daoust ma soñje lusk-erion an danvezioù lezenn a-du gant ar yezhoù lec'hel ne oa ket gwir tamm ebet. Da "Kendalc'h" eo redias ar gouarnamant gall da reif ur respont frouezh a-benn ar fin : daoust ha fellout a ra dezhañ ya pe nann, e vefe ar brezhoneg ? Ma soñj eo koulz dezhañ mont da get n'en deus nemet lavarout kreñn-ha-krak; ma asant d'e zerc'hel bev eo ret dezhañ prientiañ ur politikerezh brezhonekaat taer evel ma c'hellfe hen prientiañ ur gouarnamant breizhat broadel. Hogen ret eo dezhañ respont; chom hep respont a dalvezfe koulz ha nac'hañ. Neuze e rankfe Kendalc'h treiñ penn-da-benn war-du an ober politikel ha dispac'hel.

Kalz o deus aon rak kas da bann an enklask meur a venegen uheloc'h peogwir e reont aus niver ar vrezhonegerion diezez o goulennoù. Aon o deus n'o

defe mui nemet serrif o genou d'ober ma vije dizoloet ne gomz ket mui ar vugale brezhoneg kenetrezo e nab lec'h marteze. Ne welan ket peseurt gonid a zo o vogañ huñvraoù hag o komz abaoe kant vloaz eus ar milion a vrezhoneg-erion. Penaos parañ ur c'hlañvour anez anavezout ervat e gleñved ? Evidomp-erion. Ni avat n'hon eus aon ebet da gaout rak diskuliañ ar wirionez rak diazezañ a reomp hor goulennoù war ar gwir he deus pobl Vreizh da virout ha da zisplegañ he yezh; hag a-hend-all e kredan ez eus tu da adsevel ur yezh ne vern pegen izel e ve kouezhet, lakaet eo mennet ar bobl he c'homz da reñ dezhi ar renk a zle buzañ dezhi en he buhez.

Ma kavomp gwell avat serrif hon daoulagad hag heuliañ bepred politikerezh ar struskafval, koulz eo deomp dilezel an ober ha mont da gousket. Na zoujomp ket embann, eta, diouzh ret, eo ar brezhoneg da zassorc'hiñ ha Breizh da advrezhonekaat ha bezomp kalonek awalc'h evit arbediñ ar politikerezh dispac'hel a c'hell hepken diogeliñ e silvidigezh.

Ma tauer a-benn da vezañ akord war ur program seurt se ha dreist-holl a-zivout an enklask am eus meneg, neuze e talv ar bean harpañ "Kendalc'h" hag emezelañ ennañ. Ma chom "Kendalc'h" avat ur c'hentroll a vagoù hag a vreuriezhoù disheñvel krenn dre o mennadoù hag o folitikerezh, oc'h enebif hag o tabutal kenetrezo, neuze e vo barnet d'an dic'halloud ha d'an dilusk evel an holl strolladoù breizhat. Perak ez afe ar vroadelourion da goll o amzer ennañ ?

Ret eo eta d'ar zo yaouank sammañ o c'hiriegezhioù - sed pozh am eus lavaret stav - ha dibab o hent ur wech evit mat. Dezho eo gouzout ña spirañ a ra bepred ar politikerezh a zo bet empennet ha kasot war-raok a c'houde ar brezel. Ma hor c'hredont n'o deus nemet kenderc'hel gant an hent o deus kemeret; hogen ne c'hell ket ar vroadelourion o harpañ. Ma soñjont avat e tere hepken ouzh stad ar yezh ur politikerezh brezhonekaat taer e tleont kendrec'hiñ strolladoù evel ar "Bleun-Brug" hag ar "Falz" ez int bet fañzet hag eo dav dezho komm o folitikerezh heizev ar sturiennoù am eus meneget meur a wech. Ha ma nac'hont, en em zispartiañ diout evit sevel ur strollad nevez. Ne welan-me ket da betra e c'hell servijout un unded diwar-c'horre ha na gloc ket gant un unded wirion a venn hag a soñj.

o o o o

21. A r a b a t e o d' a r v r o a d e l o u r i o n s o ã j a l
h e p k e n e r s t o u r m s e v e n a d u r e l

Daoust ma c'hell bout talvoudus un emsav sevenadurel gant ma c'houllenno start advrezhonekaat Breizh ha m'en devo ur spered broadel yac'h eo arabat d'ar vroadelourion gouestlañ o holl nerzh dezhañ.

Un dra fall e vefe eta, war va meno, dont da hatif un emglev netra nemet evit tec'hout diouzh ur stad diskonfortus : digonvez an emsav broadel. An arnod-se d'en em unanif koustet pe gousto gant un emsav krañvoc'h e ziañvez a zo un arouez a wanded, a ziyoul, ha, dre vras, a zacusteriegezh an emsav broadel. Anzav a ra ar vroadelourion n'eus nemet ur politikerezh dispac'hel a c'hell reñ da Vreizh ar stad broadel he deus ezhomm da zreistevañ; hogen evel maz int dic'houest da gas da benn avit ar poent ar politikerezh-se e klaskont kemer perzh ar gostezenn nemeti a hafval bezañ barrek da dennañ un dra bennak digant ar gouarnement gall. Dafjer an emzalc'h-se eo en em g-stummañ hepmaiken a-benn ar fin ouzh politikerezh hengounal ar rannvroelourion.

Setu petra eo daousteriegezh an emsav broadel : labourat a ra war dachenn ar sevenadurezh - peogwir ne c'hell ket lod eus o izili ober estroget se - elec'h skeiñ war-du ar politikerezh hag an dispac'h diouzh ret evel maz eo e gefridi natur. Eval-se eta eo tonket dezhañ dre gaer pe dre hag - an em stagañ ouzh korr an emsav rannvroel a bled ivez gant ar sevenadurezh.

Kiriek eo da gement-se ivez reolenn an hollvrezhonegezh. Re a chom ar vroadelourion vrezhonegerion kenetrezo. Anet eo koulskoude ne c'hallont sevel kenetrezo nemet un doare "framasonerezh", pe "Rotary club", ur vreuriezh kuzh ha n'eo ket ur gwir strollad. Endroadur "Beilhadegoù Trager" a ziskouez ne c'heller ket sevel zoken ur gwir strollad brezhonek an deiz a hiziv peogwir e teu ar "vrezhonegerion" o unan da ober gant ar galleg pe gomzont eus traoù dreist un tammig d'o frederennoù pemdeziek : ne vern e vent broadelourion pe rannvroelourion : ne ouzont ket mui awalc'h o yezh evit ober ganti da zivizout gant brezhonegerion desket diwar-benn traoù ha na sellont ket war-eeun ouzh ar vuhez war ar maouz.

o o o o

22. Perak ne zeuer ket a-benn da sevel ur strollad broadel

Egiz m'em eus lavaret dija e tle ar pal bezañ sevel ur strollad gwir vroadel hollek, o pladif a-zevri gant pap kavrenn eus buhez Vreizh : yezh, sevenadurezh, arboellerezh, politikerezh. Dreist-holl e tlefe bezañ pal ar strollad-se embann ez eo Breizh ur vroad keltiek pezh na ra strollad ebet ha diskleriañ ez eo unan eus mennadoù kentañ an emsav ober eus ar brezhoneg yezh pemdeziek an holl Vretoned gwitibunan, erfin e tle ar stad breizhat broadel bezañ war ur renk gant stadoù all Europa. Arabat eo en em douellañ avat : seurt strollad na c'hella ket kas e labour endro e brezhoneg penn-da-benn. Gwell e vo, forzh penaos, klask sevel hevalop strollad eget arnodif en em glevout gant tud n'int ket mui pe n'int ket c'hoazh broadelourion.

Anzav a ran n'eo ket aes kas da benn ar ratozh-se abaoe m'o deus ar vroadelourion lezet rannvroelourion pe c'hallegerion da ran ar strollad politikel nemetañ hon eus, evel m'o deus ranket lezel re all da bledif gant an emsav sevenadurel. Ha bremañ eo skoilhet ar vroadelourion peogwir int rediet da glask en em silañ en emsavioù rannvroel ken sevenadurel ken politikel - hag oveljust, hep disoc'h ebet da c'headal peogwir ne c'heller ket distroadañ renerion a zo bet oberiant en o emsavioù, ne vevn pegen gwallek ha dispirus eo o barregezh hag o renadurezh a-hend-all.

Gwir eo ivez : sevel strolladoù nevez n'eo ket un diskoulm d'ar gudenn en abeg da zisoc'h arvarus un intrudu seurt-se. Bez e c'hell c'hwitañ an emsavioù nevez, chom gwan, dinerezhañ ar strolladoù rannvroel hep nemeur a c'honid evit ar vroadelouriezh, pe c'hoazh talvezout da ziskuruner d'an emsavioù rannvroel politikel ha sevenadurel. Hogen ma kredfed n'eus nemet emsavioù digor ha lezennel a c'hell degas an dieubidigezh e tlefed sammañ ar riskl-se evelato. Rak estu dalc'h ar gudenn evit ar vroadelourion : ret eo dezho divizout ur wech evit mat peseurt doare-oberiañ a zo ar surañ da zio-gelid dreistvuhez vroad Vreizh. Pe e soñjer ne c'hell ket ur strollad broadel digor ober berzh abalamour d'ar gwaskerezh gallus a-berzh ar pennadurezhioù gall - ha neuze e klaskeur mont gant hent ar gampennouriezh, evel ar rannvroelourion; ret eo eta klask un emglev a-zevri gant ar re-se dres. Pe e soñjer e c'heller disoc'hañ d'un tu bennak gant ur strollad broadel egiz hini Kembre, digor ha lezennel, (en abeg da savidigezh Europa, da skouer) - ha neuze eo ret bezañ hez awalc'h evit diazezañ ar strollad-se hep darc'hel kont eus ar riskl da c'hwitañ pe da vezañ gwasket. Pe neuze eur sur ne c'hell pobl Vreizh tizhout he mennadoù nemet dre hent an dispec'h aval ar pobloù all o deus en em zishuallet a-c'houde ar brezel - ha neuze e ranker soñjal a-zevri en degouezh-

se ha kemer an diarbennoù e sell dezhañ adal brumañ (1). Bezet pe vezet, dav eo d'an emsav broadel dibab e hent evit mat (2).

23. Klafved an emsav broadel

Ar pezh a ziskleir dic'helloud an emsav broadel abaoe ar brezel diwezhañ eo an doare "sperelladur" a zo en em gavet gantañ. Bez ez eo evel un had a zo dic'houest d'eginañ ha da vleuniañ.

Meur a abeg a c'heller reiñ da gement-se. Distrujet eo bet an emsav broadel gant diwez ar brezel. Ne chomas er vro nemet un nebeut tud yaouank hep skiant-prenet ha di-ekor. A-hend-all, meur a vloaz o padas ar gwaskerezh. En abeg dezhañ ne c'hellas ket AAT hag EPV en em ladañ.

Kiriok eo d'an dra-se, ivez, ar pouez hon eus roet d'an emsav hollvrezhonek. Hemañ, egiz m'em eus merket endav, ne c'hell tamm abet bezañ un emsav a engroez. A-benn ar fin ez eus anezhañ ivez un diskouezataenn a sperelladur - ne dalv bodadegoù ar vrezhonegourion nemet da zerc'hel bev enno ar feiz breizhek ha da virout outo a fallgalonif. Moarvat eo an dra-se un dra a bouez bras evit an amzer-da-zont. Hogen n'eus ket da souezhañ ma teu an emsaverion da ober gant ar galleg ur wech maz int deuet er-maez eus o c'hellc'hiadur. Ne c'heller mui prozege avial ar vroadelouriezh e Breizh-Izel hag e-touez ar gouerion zoken nemet e galleg.

Bewech ma fell deomp terrif ar voger m'omp serrat adrefv dezhi eo ret deomp ober gant ar galleg. Ha rak-se en deus ranket Per Danez sevel "Ar Vro".

Lavaret em eus - hag her c'hredif a ran bepred - n'en deus ar brezhoneg ur c'hañs da zroistvevañ nemet ma teu da vezañ yezh vroadel Vreizh kenuzhiet en ur stad. Ez difotis eta e tlefe ar stad-se bezañ savet gant ar vrezhoneg-erion o unan. Hogen anat eo n'eus ket tu e ve hollvrezhonek an emsav a zicubo ar vro. Ret e vo eta d'ar vrezhonegerion kenlabourat gant gallegerion da ran an emsav-se; un darn vras eus o labour e rankint ober e galleg. Kouzhañ a c'heller d'an dra-se hogen poent eo d'ar vrezhonegerion dont er-maez eus o

(1) Mat eo gouzout n'eo ket prest tamm abet spored an emsaverion da seurt degouezh-uster. Kentañ tra e vefe eta prientif ar sporedoù.
(2) Ret eo merkañ e chom an dibab-se difotis evit an hiniennoù : pep hini a zibab a hent hervez e demz-spored ha n'eo ket ezhommoù un emgav politikel rusis.

c'hreñvlec'h. Ur fazi eo krediañ e touz an dud d'ar brezhoneg dre ar brezhoneg
- gwir e vije ma vije bev buhezek ar yezh -; dont a raint deomp ha d'ar yezh
dre ar galleg.

N'eo nemet e dinbarzh hor breuziezhoù hag hon tiegezhioù e c'hellomp
hag e tleomp ober ingal gant ar brezhoneg anez mont da bilpouzion.

Sofañ am eus e skriva Kadig gwachall ebarzh "Galv" ne dalv ar boan komz
nemet ouzh ar re o deus desket ervat ar yezh. Ha moarvat brientinon wirion
Vreizh eo ar re o deus graet eus ar brezhoneg yezh o empenn hag o c'halon.
Ar re-se hepken o deus ar gwir da gomz en anv Breizh keltiek. An dra-se avat
ne lavar ket ez eo an holl vrezhonegerion gwitibunan ar re ouestañ hag ar
re varrekañ e pep keñver ha war bep tachenn. E-touez ar re a lenn kement a
vez moulet e brezhoneg o kavar e gwirionez tud a bep seurt hogen, sur mat,
n'int ket donezonet holl evit eber politikerezh ha c'hoari ur roll kevred-
igezhel a bouez. Er c'hontrol e kejer emesk ar c'hallegerion gant brogarour-
ion vat, dezho porzhioù pinvidik ha liessourt, tud avat ha na zuskint biken
ar yezh o vezaf ma n'int ket mailhad war ar yezhoù ha n'o deus ket amzer.
Deomp avat eo o sachañ a-du gant hor menozioù o kenlabourat ganto.

Ar pezh a spont ac'honon pa soñjan en emsav broadel eo ar goenagoù
diboell a vag an izili anezhañ betek hiziv; ar spi, da skouer, e teuo an
emsaveurion all hag ar rannvroelourion diouto o unan da anzav o beli un deiz
dre maz eo reizh o menozioù, treken. Petra vezn e ve reizh ar menozioù ma
ne spir ket an oberoù ? Splann meurbet eo ne c'hell pakañ ur veli bennak en
un emsav nemet ar re o deus diazezet anezhañ hag o deus kemeret ur giriagezh
bennak er veradurezh anezhañ.

Er c'hañver-se eo diwezhat un tammig evit kaout ul levezon gwirion ebarzh
emsaveioù a zo bet savet a ziforc'h diouto hag a-enep dezho a-wechoù.
Ar "c'hraonellerezh" a zo ur politikerezh ha na zedaol ket efedoù mærzhus.

24. Oberiantiz aroueziel

Gwall dech an emsav broadel eo an oberiantiz aroueziel evel n'eo an di-
freterezh hini ar rannvroelourion.

Div skouer eus an oberiantiz aroueziel-se eo "Skol Sant-Erwan" hag ar
"c'hendrev".

Anat eo ne c'helle ket skol-stur Sant-Erwan dougen frouezh ebet - nemet

nemet e vije bet ar skol vrezhonek divyezhek kentañ savet en hor bro. Hogen
o vezaf ma ne oa d'ar c'houlz ma voe diazezet Skol Sant-Erwan lezennadur ebet
a-du gant an divyezhegezh er vro-mañ e oa tonket an embregadur-se d'ober tro-
wenn. Diskouezet ha deus hepken e oa tu da gelenn un tamm mat a vrezhoneg
dindan ar gouarnerezh gall, hep arnodenn na program ispisial : n'ha deus dis-
kouezet tamm ebet avat e c'helle savetañ ar yezh gant skolioù seurt-se.

A-hend-all ne c'helle ket Skol Sant-Erwan ober berzh en abeg da ziseblantañ
an iliz dre vras pe enebiezh an emsav rannvroel zoken, hini kevrennoù a zleje
bezañ bet harperion natur ar skol, ar "Eleun-Brug", da skouer, ha kement-se
en abeg d'an tabut diboell a lakaas tud zo da sevel diouzhtu war-lerc'h ar
brezel.

Ne gredan ket kalz e talv ar boan adsevel "Skol Sant-Erwan" rak ne vo
biken a lezennadur a-du da vat gant ar yezh dindan ar gouarnerezh gall. Ha pa
vo bet savet ar stad broadel breizhat n'eo ket eus "Skolioù Sant-Erwan" hor
bo ezhomm.

Moarvat e oa ret klask reif lañs d'ar skol vrezhonek-se hogen dav eo
gouzout n'ha doa ha ne c'helle kaout nemet un dalvoudegezh aroueziel ha brud-
erezhel. Duzhpenn e oa mat diskouez n'eo ket digor d'an emsav hent ar c'hel-
ennerezh hag ar sevenadurezh. Dober a zo eus oberennoù rannal ha c'hwitet
evit anavezout gwelloc'h an hent e rankomp mont gantañ.

Meulet em eus meizad ar c'hendrev da sevel. Lavaret em eus e rankomp
kaout kelligoù kevredigezhel vrezhonek a seurt gantañ e Breizh. Pa braderian
avat en em c'houlennan ha bez o deus danvez diazezerion ar c'hendrev ur rak-
tres resis da gas o mennad da benn; en em c'houlenn a ran ivez ha bez o deus
ur gelennadurezh diwar e benn. War a hafval ne arvestont nemet ouzh doare
teknikel an embregadur.

Arabat eo avat e teufe an obererezh-se, koulz hag hini al lennegezh, pe
reoù all c'hoazh, da vezaf ur minic'hi a rofe deomp goudor a-enep d'ar gwir-
voud kriz, da c'hortoz n'ouzon peseurt burzhud da zisubiñ Breizh ha da ziskoulmañ
hon holl gudennoù. An dalc'h eo gouzout ha bez e c'helle ar c'hendrev heñchaf
e Breizh ur c'henurziadur kevredigezhel nevez ha braizhek rik, ur stumm bro-
adel da gempenn al labour-douar e Breizh; diskouez, da skouer, penaos e cheller
drezañ daren er vro-mañ ur c'henobererezh hag ur gumunlezh vreizhat en ar-
boellerezh al labour-douar. Da lavarout eo, daoust ha bez e c'helle urzhier-
ezh ar c'hendrev bezañ astennet d'ar pep brasañ eus al labour-douar e Breizh
ha termanif dre se ur sevenadur nevez diwar ar maez ?

Gwiriañ a ranker evit se eta ha deraout a ra ar c'hendrev ouzh stuz al
labour-douar e Breizh er mare-mañ. Ret eo reif d'an oberenn-se ur ster politikel
hollek ha n'eo ket hepken unan buhezal hiniennel. Anez, ne vo nemet un tu ouzh-
penn da vagon un hufvre.

Ma ne dizh ar re yaouank sevel nemet ur manati da waskedif o uhelvennad ne gredan ket e talv kalz a boan dezho foranif o strivoù. Kement-se ne vefe nemet un doare e-touez kent re all da dec'hout diouzh ar stoum - dres evel ma ra ar rannvroelourion. Abaoe ar brezel na ra an emsaverion nemet tec'hout a zirak er stoum.

Ne vern penaos, n'eo ket heñvel emgav kevredigezhel ha politikel Breizh ouzh hini Israel. Moarvat hon eus holl estlamm ouzh kalonegezh hag ampartiz ar Yuzevion o deus adsavet kenel Israel. Hogen ne c'hellomp ket heñvel di-chipot ar skouerioù a gredomp kavout en o ober. Kalz tostoc'h deomp eo degouezh Iwerzhon hag ar vro-se a c'hell hon heñvel paot gwell ivez. Hogen, dres, n'eus ket bet savet biskoazh kendrev ebet en Iwerzhon arak an dioubidigezh. En Israel, a-hend-all, e oa disheñvel kreñn an traoù : setu ur vro fraost na c'helled ket bout en gortoz e rofe gonid diouzhtu; tud o tont a bep korn er bed, hep peadra, dic'houest da brenañ douar evito o unan, dic'houestoc'h da brenañ birvioù hag ardivinkoù da sevel an aozadurioù hag ar strukturioù a oa ezhomm. Ne lavaran ket n'eus kentel ebet da denañ diouzh o embregadur evit kenurzhiañ al labour-douar ha kompenn ur gevredigezh unvan ha kenvedger e Breizh. Hogen kavout a ra din ne c'hellor soñjal e kement-se e Breizh nemet a c'houde ma vo diaubet ar vro ha dioglet dazont ar stad broadel breizhat. A-hend-all, evit ar yezh zoken n'en devo ar c'hendrev nemet un dalvoudegezh a skouer, un dalvoudegezh a speredlerzh evit an amzer-dazont - evel an tiegezhioù brezhonek a zo bet savet abaoe tregont vloaz bennak - ha tamm ebet unan e efederezh adal bremañ.

25. A - enep d'ar subjektivelezh

Si gwashañ darn eus ar vroadelourion, a gredan, eo ar subjektivelezh da lavarout eo ar gwall dech o deus emsaverion zo da stagañ Breizh ouzh o c'hud-ennoù personel elec'h o digemmañ mat. Ober a ran eus ar subjektivelezh an doug da faltaziañ Breizh evel ma karfemp e ve ha da welout an ober breizhek un tu da embreger hor perzhioù ha da zisplegañ hor personelezh hep muiken. Ha tremen a ra lod o buhez o saourif o digenvez, o meurded dianav o ferzhioù brezelourion ha renerion (da-zont !) - e-lec'h oberiañ e gwirionez ha sevenañ un dra bennak adal bremañ. Komz a reer eus an hufvreoù kaer a zo trec'h d'ar bed ha ma 'oar-me. Ne garfed ket mui zoken stoum evit pobl Breizh hec'h-unan hogen tantet e vefe da ober eus Breizh un danvez da verat, ul loen arnodadif, un dachenn da lakeat da dalvezout kelennadurezhioù a bep seurt, komunouriezh,

laikouriezh, naziouriezh, dreist-katologiezh ha ma 'oar-me. A-benn ar fin e tauer d'en em ziforc'hañ ha d'en em zispartiañ da vat diouzh hor pobl ha n'eo ket bet tec'het da vat biskoazh da gelennadurezhioù seurt se. Ar brezhoneg e unan a zeu da vezañ un tu d'an em zigenvezañ; n'eo ket awalc'h ober gantañ pa n'eo ket mui lennet nemet gant un nebeut kantadoù a dud; ret eo ouzhpenn ober gant skrivadurioù ha troiennoù diseurt hag iskis, hep gonid ebet evit ar yezh. Moarvat e c'hellomp hatif e teufe Breizh en amzer-dazont da vezañ heñvel ouzh ar patrom anezhi e zougomp a don hor c'halon. Hogen ne ranker ket ankouaat n'eo ket Breizh hor perc'henniezh ha ne c'hellomp biken he gwellañ. Un dra hepken a glaskomp : daskorif d'ar vro-mañ he frankiz diavaez evit ma adkavo dres he frankiz diabarzh, difenn ur gumuniezh ez omp an izili anezhi. Hag ez eo bet laeret pep tra diganti, a zo gwasket, a zo mouget, na c'hell ken bevañ. Kement-se holl a zo hervez ar reizhdad naturel, ur paour kaerzh reizhdad douarel. Hogen er reizhdad a zo dleet deomp emañ dellid pep hini ec'hanomp Breizhiz !

Ret eo diwall eta da gemmeskañ ar pep ratañ, ar pep pennañ hag an eil-renk en hor stoum. A-hend-all, bezomp dinoc'h, ma asant Breizhiz d'hon heñvel er stoum evit ar frankiz, e vint tuet ivez da sellout ouzh Breizh evel ma ray ar re o devo o bleniet ha daskoret dezho o dieubiezh.

26. Ar var ar chapelerezh

Unan eus an abegoù a ziskleir perak eo chomet gaonac'h an emsav broadel eo an tech d'ar chapelañ ha d'al labourat a-ziforc'h a zo oc'h ober e reuz ennañ. Moarvat eo kement-se un heñvel da zrouziwezh 1944 : ar stourmerion oc'h en em serrif ebarzh ur grogen da chom hep santout stokadennoù an diavaez. Ur merk a warded, a zo, sur mat, en un emzalc'h seurt se. Unan en am cuestl d'ar studioù hon geltiek, egile d'an drouzelezh pagan, hennezh all d'an drouzelezh kristen, d'ar reizhkredennegezh vreizhat; reoù a zo douget d'an "anteringouriezh", hiniennoù d'un doare fagerezh, lod d'ar sokialouriezh pellañ, d'an trozkouriezh, d'ar stalinouriezh h.a. Pa verzer ouzhpenn n'eo ket kalz eus ar re 'zleje bezañ renerion an emsav broadel evit distreiñ da Breizh ha kemer perzh a-zevri er stoum e c'heller bezañ nec'het diwar-benn chafsoù an emsav broadel.

Kement-se holl, e gwirionez, a zo diyac'hus. Re ec'hanomp, a gav din, o deus ar memes perzh fall hag ar rannvroelourion, da lavarout eo,

ez int re zifur evit degemer ar gwirvoud egiz m'emañ ha re laosk evit krouiñ anezhañ endro hervez hor youl. Setu : bez e c'hoursezer en un amzer-da-zont dispis n'ouzon peseurt darvoud marzhus - brezel ha kemm gouarnerezh e Bro-C'hall, emsavadeg kouerion en hor bro h.a. - evit diskoulmañ an holl gudennoù. He setu ivez : abaoe bloavezhioù emeur o lemnañ ar c'hleze ken ez eo aet d'un neudenn da droc'hañ an amañ.

27. Arabat eo sevel emsavioù rannel

Ma 'gred e tlefe ar vrogarourion lezel o menozioù relijiel ha politikel rik a-gostez evit ar poent ma fell dezho ober berzh. Awalc'h omp pell diouzh hor pobl en arbenn da gelennadurezh ar vroadelouriezh ha na c'hellomp ket diouerif : n'eo ket dav klask donaat ar c'hleuz en ur embann menozioù espar ha n'o daus heklez ebet e-touez hor gwerin. Prizout a ran, da skouer, difoaltre ha kalonegezh "ar Stourmer", hag ar vroadelouriezh divrall anezhañ. Hogen ne gaven ket eo fur dezho embenn un aviel estren ouzh Breizh, graet evit impal-eriezhoù latin pe hanter latin evel an hini a savas an Aostriad Hitler, ha na jaot tamm ebet ouzh ur vro vihan evel Breizh. Bez e c'heller estlammañ ouzh ar gadarned hogen pa vez e servij ar reizhded ha n'eo ket e servij ar mac'homerezh (1). Ha m'o deus c'hoant ar Vretoned-se da vezañ brogarourion ha sokialourion war un dro perak an diaoul mont da glask ur gelennadurezh ha n'avezont nemet a-dreuz Bro-C'hall - rak lodek eo fegiz vreizhat en hengoun gall ar fegouriezh. A-hend-all e anzavont n'eo ket bet lakeat da dalvezout da vat ar gelennadurezh-se o Bro-Alamagn zoken. Perak eta adkemer un anv hag un arouez estren argarzhad gant hor c'henvroiz ?

Diouzh un tu all n'on ket a-du, da skouer, gant ar yaouankizoù a zo bet stummet gant kalaouennoù ar gostezenn gleiz c'hall e-pad brezel Aljeria hag a vag, diouzh o doare, uhelvennad an dispac'h broadel ha kevredigezhel, boutingar, en em wel dre o c'houk egiz max'helion varvek un enezenn zo hag a ro blev gwenn d'ar c'haezh Yankied (2) pe a wel dispac'h Aljeria egiz m'eo

(1) Un emzalc'h buhezel hiniennel, un digoll d'un emskoulm a izelded evel ma c'heller kavout e-touez pobloù bet gwasket ha dismegaset pell amzer eo an emzalc'h fegat. Un emzalc'h krouadurel eo avat.

(2) Emgav kevredigezhel - ha politikel - Kuba, egiz hini Israel, a zo dishevel krenn diouzh hini Breizh. E-touez traoù all : dizek eo an hanter eus an dud enni, ha dishevel eo ar vro-se en arak.

bet hufvret gant kleiziz c'hall (egiz ivez m'eo bet drouklivet gant dehouiz an hevelop bro); un dispac'h broadel ha sokialour war un dro. Un dra iskis eo penaos tud hag a soñj ez int brogarourion n'int ket evit en em zistagaf diouzh an endro hag ar c'hendegouezh politikel gall, penaos int intrer e gwirionez gant talvoudoù politikel gall, koulz fegiz, komunourion, anterin-garourion pe sokialourion dishual. Penaos e c'hellfe tud ken gallekaet reif endro da Vreizh ur vuhez vroadel ?

Ne gredan ket e c'hellomp kas da benn daou zispac'h war un dro. Ne vern penaos hon eus ezhomm eus an holl Vretoned evit adsevel ar vro ha pep rumm a rank kaout e lec'h e Breizh. A-hend-all ne c'hell ket hor bro en em zigen-vezañ diouzh ar rannved m'emañ klenket ennañ : da skouer, ne c'hellfe ket embann ez eo "marksist-leninat", egiz Kuba, (lakaomp e ve trac'h e Breizh un emsav seurt se un deiz bennak); ne c'hellfe ket kennebeut dibab ur gouarnerezh egiz hini Franco pe Salazar (lakaomp e ve prest ar Vretoned d'hen degemer !)

anez bezaf gwelet fall da c'houarnamantoù arall Europa. Gouzout a reer ivez eo stag arboellerezh Breizh ouzh an arc'hant a c'heller emprestañ digant kefioc'h ha bankoù europat. Emañ Breizh er sistem kapitalour ha ne c'hellfe en em zieubif dioutañ hep kouezhañ stre divrec'h broioù ar Reter (1) egiz m'eo c'hoarvezet gant Kuba pe talañ ouzh diaestorioù diniver; anet eo zoken ne c'hellfe ket ober egiz stad Yougoslavia a zo bet harpet en un doare bennak gant an Amerikaned en abeg d'ar stoum a-enep d'ar broioù stalinat (pe ez-stalinat !).

Ret e vo d'ar Vretoned eta ober gant ar sistem kapitalour - ha n'eo ket dres ar gopitalouriezh klasel en abeg d'ar c'hemmesk pouezusoc'h-pouezusaf a rektresouriezh hag a sokialouriezh a gaver enni - dre ma ne c'hellomp ket en em zistagaf e-kefver arboellerezh diouzh ar stadoù hag an dreist-stadoù a zo war hon tro.

A-hend-all, ma vez Breizh - hag e vo emichañs - ur vro demokratel klasel eo ret bezañ en gortoz e vo trac'h enni ar rankadoù o deus ar muiañ a bouez enni hag e vo renet Breizh gant ar re-se e-kefver politikerezh diabarzh ha kevredigel. Krefv e vo enni eta, emichañs kostezenn an demokratelzh kristen ha levezon speredel an iliz. D'ar c'hostezennoù all eo difenn o frankiz hag o chañs ha n'eus ket anv muic'h d'o lezel da vezañ gwasket gant ar gostezenn d'ar c'h. Nemet dre 'n arbenn a skrutur kevredigezhel Breizh ha pouez ar gouerion dieub enni, distarded an ijinerezh evit ar poent, eo arabat gedal un dra all.

Ar re a het e ve savet e Breizh ur gevredigezh unvan - a yezh, a spered,

(1) Breizh ne c'hell ket kaout un tonkadur dishevel diouzh peurrest Europa er c'hefver-se. Bro-C'hall ha Bro-Saoz o deus ranket emezelañ er c'henvarc'had.

a galon - a het stankañ an disparti etra ar vourc'hizion hag ar werin, a ranko labourat dre ar sindikadoù hag ar strolladoù politikel ordinal : d'ar c'houlz-se eo e c'hellfe kendrevioù bezañ talvoudus. D'ar mare-se e c'hello ar stad hag ar gumun kemer levezon oc'h heñchañ emzispieg ar arboellerezh hag o rannañ al leve broadel. Anat eo e tleomp skeiñ e Breizh war-du ur gevredigezh diazezet war ar reizhded elec'h e vo skarzhet aotrouion, skraperien, rastallerion-vadoù, mac'homerion elec'h en devo pep hini e zellid hag e giriegezh, hep rankout plagañ e c'hlin da neb. Hogen ne fell ket deomp kennebaut all evit se lakaat Breizh e servij strolladoù estren ha na reont ket forzh anezhi na degemer kelennadurezhioù ha na zereont ket ouzh stuz istorel ha kevredigezhel hor bro.

28. Ur pal hepken

Tro am eus roet d'am displegadenn evit merkañ n'en deus an emsav nemet ur pal hag a zo adsevel ur stad broadel keltiek e Breizh hag e rankomp lezel pobl Vreizh da zibab he zekkadur a-hend-all. Ar pezh a zleomp tizhout eo ingalded ar stad breizhat gant ar stad gall hag ar stadoù all a yelo d'ober kevrediezh Europa warc'hoazh. Ne c'hello ket broad Vreizh bezañ isurzhiat da Vro-C'hall ur wech ma vo anzavet ez eus anezhi ur c'hanel. Breizh a c'hello chom stag mui pe vui ouzh Bro-C'hall a-kefver arboellerezh mar deo an dra-se a-du gant mad ar Vretoned hogen ne c'hell ket bezañ enklozet en ur stern politikel gall.

Evit al lu hag ar bersonelezh etrevroadel e tleo Breizh bezañ en ur renk gant stadoù all Europa kevredel. Adlavarout a ran ne c'hallomp degemer isurzhiadurezh ebet d'ur stad broadel arall en Europa.

29. Ezhomma zo eus ur youl start da zisoc'haf

Bez e ranker lakaat ar Vretoned war ziwall : n'eo ket abalamour m'emaer oc'h ober unaniezh Europa e vo roet da Vreizh hec'h emzeneriezh ez emraek, koulz lavaret. Marteze e vo ret ober un tamm frauz ardek sachañ an tamm geneomp. Da rannerion an emsav broadel e vo barn a-benn un nebeut bloavezhioù pehini eo an hent surañ da dizhout a-benn ar fin an emzeneriezh hag an ingalded e stern

Europa. Un dra a zo diarvar avat : ret e vo dezho oberiañ ha n'eo ket arvariañ anez chom ar fri war ar gloued ur wech ouzhpenn.

Na ankounac'haomp ket koulskoude e labour an amzer geneomp betek ur poent a vo (nemet a-kefver ar yezh poblek; houmañ, avat, a zo kollet n'eus forzh penaos) hag e c'hell intrudioù digoulz gwallañ e-leizh an emzav. Diskouezet em eus e oa ar spered gall tonket da gozhañ muioù-h-mui diwar-lerc'h savidigezh Europa. Anat eo e c'hellfe un intrudu broadel breizhat bremañ reif tro d'ur polis hollc'halloudek dre berzh lezennoù dreist-reizh gwaskañ ha gennañ da vat un emsav a chom dinerzh ha digenurzh betek hen.

Gwell e ve a yoc'h, a gradan, mar befe ret, lakaat da glotañ un emsavdeg gant hini Walloniz, da skouer, evit reif un digoll da Vro-C'hall en Hanternoz. Goude ma ve ret deomp mont dre hag ouzh ar gouarnerezh gall na rankomp ket klask diskar ar stad gall evitañ e unan. Hag an tu d'hon diskar e vefe kinnig sevel ur stad kevredel peogwir e kase an dra-se a-benn ur pennad amzer da ziempredur klok ar stad gall, da gentañ; kemont-se a-hend-all a zo a-enep krenn da hengoun ar stad gall en deus diazezet e arboellerezh hag e vererezh war ar stad unvan. Awalc'h a gempouez a vo en Europa ma vez degemeret enni ouzhpenn ar c'hwec'h stad eus ar c'henvarc'had kentañ Bro-Saoz hag ar broioù keltiek hag erfin ar broioù hispanat.

Ur fazi e vefe dreist-holl kredif e vo dieubet Breizh dres evel m'eo bet Aljeria, ma ouzomp habaskterif ha gortoz hor c'houlz. Moarvat o doa Aljeriz traoù a zeus war o sikour : un dachennad douar oc'hon, ur poblañs chomet muioù-h dic'hallek eget hon hini; ur ouann hag ur relijion muioù-h diforc'h eget hor re diouzh re ar stad mac'hom (ma c'heller lavarout ez eo ar stad gall ur stad kristen !); harp e-leizh a vroioù; ar galloud da bouezañ ez diplomatel war Vro-C'hall eta; stad izeloc'h hag amziorroetoc'h c'hoazh an arboellerezh eget hini Breizh. Hogen skoilhod a oa dirazo ha na gavimp ket dirazomp : n'eus ket e Breizh ur poblañs estren hag enebour, dezhañ ar pep brasañ eus pinvidigezh ar vro, evel Ulsteriz Iwerzhon pe Europiz Aljer hag Oran; rannadur an Naoned e kiriegezh ar c'hallaoued n'en deus pouez ebet ma n'eus diazez broadel ebet dezhañ : kounomp, da skouer, eo bodet hall gouerion Vreizh ar memes kevredad; Breizh a-hend-all a zo a viskoazh ur vro unvan en despad d'un divyezhegezh ha n'hon eus ket gallet trec'hiañ betek hen; un hengoun politikel hon eus ha n'o doa ket Aljeriz ha n'int bot bodet biskoazh c'hoazh en ur memes stad. En un doare ez eus ar vro-mañ zoken muioù-h a unvaniezh yezhel ha sevenadurel eget en Aljeria : diazezet eo Breizh war an hengoun keltiek. Hag, adarre, ma savar Europa, goude m'he deus kollet Bro-C'hall hec'h impalaeriezh da vat - Aljeria a zo bet stourmadenn ziwec'haf an impalaerelourion c'hall - n'hor bo ket da dalañ ouzh ar spered aheurtet en deus lakaet brezel Aljeria d'en em astenn a-hed seizh vloavezh hir. E 1962 he devo ar cheoavin-istiezh c'hall paket ur gwall daol, ha marteze taol ar marv.

Awalc'h e vefe deomp eta kaout harp ar broioù bihan ha kevredelourion wirion Europa, hini ar broioù keltiek, hag a zo a-enep da Europa ar stadoù empennet gant impalaerourion gozh Europa. Ne vo ket ret ober eus Breizh ur gudenn gwir etrevroadel, spi am eus; awalc'h e vo e vezo ur gudenn europat, A-se e vo kalz aesoc'h da ziskoulmañ ur wech ma vo bet tarmentet da vat : ne vo ket hor soñj trec'hiañ dre an armoù evel m'eo bet mennad an emsavid aljeriat epad ur pennad amzer : ar re-mañ a felle dezho sevel ur stad dishual ha distag a-grenn e pep kefev diouzh Bro-C'hall; hogen abalamour da Europa dres e chomo etre Breizh ha Bro-C'hall liammoù niverus : moneiz europat, lu europat (1), dileurigezh er memes Breudoù Europat hag er bodeoù europat all. Etre an daou vrezel, lakaomp, e c'halled empennañ en dije talvezet ur stad breizhat europat a-enep d'ar stad gall; adal ma saver Europa n'he deus mui ar gudenn-se ster abet; erfin, Breizhiz ha Gallaoed o devo ar memes keodedouriezh poegwir e vo houmañ boutin da holl Europiz (2).

D'ur c'houlz a zo e vo kalz aesoc'h diskoulmañ ar gudenn eget nad eo bet nevez zo c'hoazh hag aesoc'h c'hoazh eget nad eo bremañ. Ret eo eta ar spereid europat da gemer o greñv, da gemer penn-herr, arak boulc'hañ un intrudu krennuss. Evidon-me o kredan e welimp ar c'houlz-se ha rak-se eo ret deomp en em brientañ adal bremañ ha dreist-holl strivañ da vat da lakaat ar spereid broadel da drec'hiañ en emsav hag e Breizh.

o o o o

(1) Anet eo n'eus ket anv e sevel ur moneiz ispisial evit Breizh. Forzh penaos e vije menet Breizh e tachenn al Lur Gall. Evit al lu, e ranko Breizh bezañ enframmet en ur c'henuzhiadur europat pe norzhatlantal. "Ingalded" Breizh a zeu da vezañ ur gudenn diabarzh eus Europa; he gwirioù a vo gwarentet gant al lezenn europat hag o vezañ ma ne vo bro europat ebet dishual evel arak n'he devo ket da zoujañ bezañ taget gant hini anezho.

(2) Ma vije ar C'hallaoued sporedet ledan hag uhal e komprenfent e c'hellont ober o mad eus emsav ar broadelozhioù e Koznog Europa, er Spagn hag en inizi predenek evit astenn o levezon en Europa kevredel en ur zont da vezañ gwarezour gwirioù ar broadoù bihan. N'eo ket ni a zo a-enep d'ar C'hallaoued hogen ar re-mañ ne gomprenont ket e belec'h emañ o mad gwirion.

K L O Z A D U R

N'eus forzh penaos, ne c'hellomp ket mui kilaf. Graet hon eus Brezhoned eus hor bugale. Ne vennomp ket e tamallfent deomp un deiz bezañ roet dezho ur vro hag ur yezh n'eus ket anezho. Moarvat eo dinsur amzer-da-zont Breizh poegwir n'eo ket hepken diouzh hor poell hag hor youl - ha Doue a oar pegen gwallak int - hogen ivez diouzh emroadur un emgav politikel ha n'eo tamm en hon dalc'h : savidigezh Europa kevredel. Ma vije staget ar rannved-mañ er bloavezhioù da zont ouzh ar bloc'h komunour er reter, da skouer, e vije tanket Breizh da vont da get a-grenn, o vezañ ma n'emañ ket ar gomunourion c'hall a-du gant ar broadel-ehzioù e diabarzh ar stad gall (evit un abeg aes awalc'h da vezañ : an emsaviou broadel n'int ket komunour, pell a se zoken). Hogen ur c'hañs hor bo ma c'hell ar rannved-mañ en em genurzhañ hervez ar gevredelozh ha chom distag diouzh ar rannvedoù all. Hor c'hañs eo Europa kevredel evel m'eo bet an didrovedennel-adur hini ar broioù aziat hag afrikat. Hogen ne dennimp ket ampled eus ar c'hañs-se anez ober bec'h ni hon unan. D'ar Vretoned eo divizout ur wech evit mat hag-ef e fell dezho dont endro da vezañ ur bobl pe chom da viken un tropell. Gouezent avat ne dizhint biken daskorif d'o broad ha lorc'h a wechall ma n'int ket kalonek awalc'h evit merzout spis peseurt divizoù a zo da gement-se ha ma n'int ket kadarn awalc'h evit saveniñ koustet pe gousto an divizoù-se.

Roazhon, Meurzh-Mezheven 1962

NOTENN

Ar c'hrogadoù a zo c'hoarvezet nevez zo etre kouerion e Breizh - e Kastell-Pol - a ziskouez mat an devo emsav ar gouerion er sindikadoù ul levezon war struktur kevredigezhel al labour-douar e Breizh (o tennañ da ezvennañ an em-bregadurioù "marzel" hag ar mearzioù dibourvez koulz hag an streourion, da ziazezañ er vro-mañ eta ur struktur kevredigezhel kumunel ha kenobererezhel). A-benn ar fin e klot emsav ar gouerion gant mennadoù ha techoù soñjal an deknokratad a garfe diazezañ ur sokialadur eus al labour-douar. War-aeun avat ne zegaso an emsav-se netra da Vreizh - nemet e c'hell treiñ a-du gant an emsav ma wel er stad breizhat un tu da zisoc'hañ aesoc'h gant e ratozhioù.

o o o o
o o o o
o o o o

mmmm	mmmm	mmmm	mmmm	mmmm	mmmm
mm m	mm m	mm m	mm m	mm m	mm m
mm m	mm m	mm m	mm m	mm m	mm m
mm m	mm m	mm m	mm m	mm m	mm m
mmmm	mmmm	mmmm	mmmm	mmmm	mmmm
mm m	mm m	mm m	mm m	mm m	mm m
mm m	mm m	mm m	mm m	mm m	mm m
mm m	mm m	mmmm	mmmm	mmmm	mm m

Komanant 1962, 12 niverenn.....	36 NF
Komanant 1962 d'ar Geriadur Istorel hepken, (4 niverenn).....	12 NF
Komanant 1962 hep ar Geriadur Istorel, (8 niverenn).....	24 NF

Dr ETIENNE, Châteaulin, CCP. 16.093-13 Paris

Liesskrivet e ti
 Herve AR MEE, 32 str. Tad Bourdon, Roazhon
 CPPP Nn 35.709
 Disklêriet hervez lezenn, Trede Trimiziad 1962

Priz ar c'haier-mañ : 10 NF

